



**HAL**  
open science

## KEAV, Kamp Etrekeltiek ar Vrezhonegerion, un enezenn vrezhonek en ur meurvor gallek

Damaris Merlet

### ► To cite this version:

Damaris Merlet. KEAV, Kamp Etrekeltiek ar Vrezhonegerion, un enezenn vrezhonek en ur meurvor gallek. Humanities and Social Sciences. 2020. dumas-02883870

**HAL Id: dumas-02883870**

**<https://dumas.ccsd.cnrs.fr/dumas-02883870>**

Submitted on 29 Jun 2020

**HAL** is a multi-disciplinary open access archive for the deposit and dissemination of scientific research documents, whether they are published or not. The documents may come from teaching and research institutions in France or abroad, or from public or private research centers.

L'archive ouverte pluridisciplinaire **HAL**, est destinée au dépôt et à la diffusion de documents scientifiques de niveau recherche, publiés ou non, émanant des établissements d'enseignement et de recherche français ou étrangers, des laboratoires publics ou privés.



Distributed under a Creative Commons Attribution - NonCommercial - NoDerivatives 4.0 International License

## **Skol Veur Roazhon 2**

Master enklask Brezhoneg ha Keltiek

**KEAV, Kamp Etrekeltiek ar Vrezhonegerion, un enezenn  
vrezhonek en ur meurvor gallek**

*Damaris MERLET*

Dindan renerezh Ronan Ar C'hoadig

**Bloavezh skol 2019-2020**

Trugarekaat a ran an holl re o deus sikouret ac'hanon el labour-mañ : Gwen hag Anna o deus respontet d'am goulennoù niverus, ar berzhidi hag aozourien o deus roet din o amzer evit eskemm war KEAV, Ronan Ar C'hoadig, evit e sikour hag e alioù prizius ha ma merc'h Keridwen, evit he sikour hollret.

### Diverradenn :

KEAV, Kamp Etrekeltiek ar Vrezhonegerion, a vo studiet e-barzh ar c'hounskrid-mañ. Ur staj brezhonek dibar eo, peogwir e vez dalc'het abaoe ken pell, hag implijout a ra ar soubidigezh e brezhoneg en e holl obererezhioù ha mont en-dro. Diazezet eo an enklask war atersadennoù a zo bet kaset gant ar skriverez gant lod eus an aozourien hag ar berzhidi evit studiañ efed ar c'hamp war ar yezh, ar sevenadur hag al liammoù sokial. Da gentañ e vo diskouezet skiant prenet ar skriverez evel stajiadez hag hini an dud aterset. Dielfennet e vo da eil efed ar c'hamp war implij ar yezh en e holl obererezhioù hag e buhez ar berzhidi. Diskouezet e vo, er fin, penaos ez a en-dro ar gevredigezh vihan-mañ, penaos e kemer perzh en ur birvilh sevenadurel hag e krou liammoù sokial donoc'h. Kemer perzh e KEAV n'eo ket un doare d'en em glozañ war ur gevredigezh hengounel avat. Er c'hontrol e ro tro d'ar berzhidi da dapout krog en o buhez hiniennel hag a-stroll evit sevel ur bed lec'h ma vo anavezet al liessevenadurezh hag al liammoù etre an dud.

### Résumé :

Ce mémoire se propose d'étudier KEAV, *Kamp Etrekeltiek ar Vrezhonegerion*, un stage de breton hors du commun, par sa longévité, son originalité – l'utilisation exclusive du breton dans toutes ses activités et son fonctionnement. En s'appuyant sur des entretiens menés avec des participants et des organisateurs, l'auteure explore son impact sur la langue, la culture et les liens sociaux. Dans un premier temps, l'auteure revient sur son expérience et celle des personnes interrogées. Dans un deuxième temps, elle analyse l'apport de KEAV à la pratique de la langue bretonne dans ses activités et son originalité. Dans un troisième temps, elle montre comment cette micro-société s'inscrit ainsi dans une dynamique de foisonnement culturel et de densification des liens sociaux. Loin d'être un retrait sur une société traditionnelle, participer à KEAV permet aux

stagiaires de reprendre du pouvoir sur leur vie individuelle et collective pour façonner un monde où la diversité culturelle et la force des liens serait reconnue.

Abstract :

This thesis proposes to study KEAV, *Kamp Etrekeltiek ar Vrezhonegerion*, an uncommon Breton course, by its longevity and its originality - the exclusive use of Breton in all its activities and its organization. Based on interviews with participants and organizers, the author explores its impact on language, culture and social ties. First, the author reviews her experience and that of the people interviewed. Second, she analyzes the originality of KEAV and its contribution to the practice of the Breton language in its activities. Third, she shows how this micro-society is thus part of a dynamic of cultural bloom and strengthening of social ties. Far from being a withdrawal into a traditional society, participating in KEAV empowers participants to shape a world where cultural diversity and the strength of ties would be acknowledged.

# KEAV, un enezenn vrezhonek en ur meurvor gallek

Leun-chouk e oa KEAV en hañv tremenet gant 250 den a bep seurt oad war un dro er c'hamp. Div wech ur sizhunvezh e pad ar c'hamp. Ur c'hamp hañv eo Kamp Etrekeltiek Ar Vrezhonegerion. (KEAV). Implijet e vez ar brezhoneg eno evel yezh pemdez. Ul lec'h deskiñ ha vakañsiñ eo war un dro evit ar re o deus desket brezhoneg.

Graet em boa anaoudegezh gant KEAV pa oan o teskiñ brezhoneg er bloavezhioù 2006/2007. E pep lec'h ma veze desket brezhoneg e veze lavaret d'an dud : pa vioc'h muioc'h en ho pleud e brezhoneg kit da gKEAV ! Tro ho po da gomz da vat eno hag aesoc'h e vo deoc'h komz brezhoneg dre forzh ober ! Talvoudus eo ivez evit an dud a zesk gant ar pal implijout ar brezhoneg en o micher, peogwir e rank an danvez-skolaerien divyezhek hag ar gelennerien nevez mont d'en em stummañ eno. Ur greizenn stummañ evit an dud a labour en deskadurezh divyezhek eo neuze ivez.

Ar staj kentañ, an hini koshañ e brezhoneg eo. Savet e oa bet KEAV e 1948 gant tri den : Vefa de Bellaing, Ronan Huon ha Zavier Langleiz. C'hoant o doa da reiñ tro d'ar vrezhonegerien kar o yezh d'en em gavout etrezo evit reiñ lañs d'ar brezhoneg, en ur c'henarroud gwall-zisheñvel eus an hini a-vremañ. KEAV a zo bremañ unan eus al lec'hioù nemeto evit bezañ soubet e brezhoneg, war-bouez ar skolioù Diwan.

Anna Ar Beg ha Gwenael Huon a zo e penn an aozadur abaoe 1976. Sikouret e vezont gant ur skipailh a-youl-vat : tregont pe daou-ugent den. A-youl-vat e vez bepred ar gelennerien hag an aozourien e KEAV. Erlerc'hiet e vo Gwen Huon gant Gwenhael Besnard (skolaer e Diwan) hiviziken.

Ul lec'h, ur c'hamp, un ensavadur evit pleustriñ war ar brezhoneg eo neuze evit an nevez-vrezhonegerien hag ar vrezhonegerien ampart. Ul lec'h evit bezañ soubet er yezh. Ul lec'h evit an treuzkas eo. Kinnig a ran sellout ouzh ar pezh eo KEAV hag ouzh ar pezh a zegas d'e berzhidi, ouzhpenn d'ar yezh. Treuzkas ar yezh n'eo ket a-walc'h. N'eo ket kennebeut ur staj brezhoneg evel ar re all. Mesket e vez al liveoù ha mesket tud ampart gant tud ha n'eo ket flour o brezhoneg c'hoazh. Gant ar yezh hag ouzhpenn dezhi ez eus darempredoù a stumm an dud, a sav o identelezh hag a sikour da eoriañ ar brezhoneg en o buhez. E sell emañ da studiañ penaos ez a KEAV en-dro ha penaos eo disheñvel eus stajoù brezhonek pe hentenoù all evit deskiñ. Ur skol stourm evit ar yezh eo, eus un tu, ha sevel a ra liammoù sokial, diazez ur sevenadur pe un identelezh da adsevel,

eus un tu all.

Bet e oan bet meur a wech e KEAV, er bloavezhioù tremenet, pa oan o teskiñ ha peurzeskiñ ar yezh. Evit kas da benn ma studiadenn em eus kemeret perzh evel stajiadez e tri degouezh er bloavezh 2019 : ur staj kan war un dibenn-sizhun e Plañvour e miz Meurzh, ur staj ur sizhunvezh e Kastellin e miz Gouere, hag ur staj un dibenn-sizhun « brezhoneg er familhoù » e Karaez e miz Du. Kemeret em eus perzh evel stajiadez ha war un dro em eus sellet ouzh an traoù evit ma enklask. Aterset em eus stajidi hag aozourien da vare staj an hañv ha da heul, e meur a lec'h, peurliesañ en o zi.

E sell emañ da ziskouez perzhioù dibar KEAV, da gentañ, a-fed staj brezhoneg, en ur implijout an atersadennoù hag ar pezh am eus bevet eno. Penaos e c'hell bezañ implijet evel ur benveg evit ar yezh, da eil, hag a-benn ar fin, an doare mont en-dro implijet evit sevel liammoù sokial. Implijout a rin aze lennadennoù o deus sikouret ac'hanon da zoonat ar preder. Ur skouer eo ar c'hamp marteze, eus an doare a c'heller implijout evit reiñ muioc'h a unvaniezh en ur bed rannet a-dammoù, ar bed a-vremañ.

## I – Dibarded staj KEAV

### 1 – Eus istor KEAV da gKEAV en deiz a-vremañ

#### Ar raktres

Ar staj koshañ e brezhoneg eo KEAV. Krouet eo bet just war-lerc'h ar brezel pa ne oa hini all ebet war an dachenn. Yezh nemeti ar staj eo ar brezhoneg :

*Koll e vo keit ha ma vo mesket gallegerien ha brezhonegerien,*

eme Per Denez en ul lizher da Vefa De Bellaing e 1947, hag ivez : *Karout a rafen ober ur skolañv e giz ma vez graet e Kembre.*

Ar c'hentañ kamp a voe dalc'het e Kleder, e Gorre-Leon, 57 den ennañ hag en o zouez 18 Kelt tramor. Ar c'hampoù kentañ a oa hanter studi ha hanter dudi. Kentelioù ha prezegennoù a veze diouzh mintin ha kouronkañ, baleañ, kaout plijadur goude kreisteiz. Kembreiz hag Iwerzhoniz a zeue, neuze e veze kentelioù kembraeg hag iwerzhoneg.

*D'ar mare-se, eme Anna Ar Beg, e oa ret adsevel ar brezhoneg.*

Adsevel ar brezhoneg : souezhus em eus kavet seurt frazenn pa ouezer ez eus bet kollet

miliadoù a gomzerien abaoe. Hervez F. Gourvil<sup>1</sup> e oa 1,1 million a vrezhonegerien e 1952 hag en o zouez, 100 000 den a oa unyezhek, an holl anezho ganet a-raok ar brezel bed kentañ. Stad ha skeudenn ar yezh a oa fall, fall-tre zoken peogwir e oa merket evel warlerc'hiet, didalvez, mezhus : yezh an amzer dremenet hag ar « blouked » e oa. Yezh ar « c'hollabo » a oa ivez e soñj an dud, dre ma oa bet lod eus an emsaverien a-du gant an Alamaned pe renad Vichy da vare ar brezel. Start e oa bet ar bloavezhioù kentañ, bloavezhioù ar « ghetto », hervez an dro-lavar implijet gant Gwen Huon<sup>2</sup> ha danevell Anna Ar Beg, pa ne ouie ket en a-raok an aozourien pet a dud a zeufe. Ne oant ket niverus, bloavezhioù zo : nemet un dek bennak bemdez e 1950<sup>3</sup>. Tennet e veze gounid d'ar c'houlz-se eus ur gouel e Breizh (ar Bleun Brug alies) lec'h ma veze bodet tud dedennet dija gant sevenadur Breizh.

*Anna Ar Beg : Ret e oa kavout ul lec'h, tikedoù boued, gwiriekat e oa naet an dour. Kavout ur skol, ur skol vras a-walc'h gant ur c'houkva. Skol ar seurezed e oa peurliesañ gant ur c'houkva evit ar merc'hed. Ar baotred a yae da gousket e skol ar baotred. War lerc'h e voe e Plonevez. Pep hini a zegase ur golc'hed hag e veze lakaet plouz e-barzh evit kousket. Simpl tre e oa. (An dud ne oant ket figus evel bremañ).*

*Cheñch a rae lec'h bep bloaz. Vefa De Bellaing ne ouie ket bleniañ hag a yae a lec'h da lec'h evit klask ha kavout ul lec'h a zere. D'ar c'houlz-se e oa un emgav bloaziek evit ar familhoù brezhonegerien. Cheñch a rae lec'h bepred peogwir e oa ar memes tud, neuze e oa mat kaout ul lec'h all da vakañsiñ. Ne oa ket kalz a gentelioù, ne oa nemet ur brezegenn diouzh mintin hag ur gentel. Goude kreisteiz e oa dudi .*

*Gwen Huon : Bepred ez eus bet ur meskaj a oajoù, meur a vroadelezh (Kembreiz), setu perak e oa etrekeltiek. Stad ar stourm a oa fall d'ar mare-se, e veze graet kollabo eus an dud a stourme. An diazezoù a zo bet simpl ha solut : brezhoneg hepken ha ne oa ket deskiñ brezhoneg met bevañ e brezhoneg. Gant se hon eus dalc'het bepred. An dra-se a oa dispac'hel, peogwir ne oa ket a stajoù brezhoneg ha pa oa stajoù sonerezh ha dañs e oa dister plas ar brezhoneg, pep tra a veze graet e galleg.*

Nebeut a dud a voe er bloavezhioù 1950 abalamour d'un disemglev tro-dro d'ar skritur<sup>4</sup>, ha

1 Meneget gant Fañch Broudic, « quelques études sur l'usage du breton », langue-bretonne.com.

Accessible à : <http://archive.wikiwix.com/cache/?url=http%3A%2F%2Fwww.langue-bretonne.com%2Farticles%2FBothorelAndre.html>, consulté le 23 octobre 2019.

2 Gwenaél Huon, *Al Liamm*, niv 345, 2003, pp62-79.

3 Anna Ar Beg, *KEAV, ar bloavezhioù kentañ*, Roazhon, Hor Yezh, 1988, p 224.

4 Un disemglev a zo bet er stourm evit ar yezh evit divizout peseurt skritur implijout : ar skritur peurunvan, broudet ha brudet gant Roparz Hemon e 1941 pe ar skritur « skolveuriek » pe « Falc'huneg » difennet gant tud all, lod anezho eus Skol Veur Brest ha reoù all hag a oa beleien.

diaesterioù all diwezhatoc'h er bloavezhioù 1965/68.

*Gwen Huon : Brasaet e oa ar familh ha pep hini a felle dezhañ kaout muioc'h a frankiz. Ar rummad kozh o doa bevet ur prantad kriz war lerc'h ar brezel, « bloavezhioù ar ghetto » a lâre tud zo. Ne oa ket re akord (Ronan Huon) e teufe ar c'hamp da vezañ ur c'hamp labour hepken kennebeut : soñjal a rae e oa ret kaout ur c'hempouez, labour spered a dra sur met dudi ha distan a oa ret kinnig d'an dud ivez<sup>5</sup>.*

Ar re yaouank n'o doa ket c'hoant ken da sentiñ ouzh reolennoù strizh a-walc'h ar c'hamp : sevel abred, mont d'ar c'hentelioù d'an eur, chomm er memes strollad... Ur c'hempouez a oa da gaout etre kentelioù ha dudi hag ar re yaouank a enebe ouzh rummad ar re gozh. Chom a rae KEAV er bloavezhioù-se kristen ha broadelour<sup>6</sup>. Met ar rummad nevez ne oa ket ali gant ar re gozh. Heuliañ a rae alies ar c'hamp fest ar Bleun Brug. Klask a rae Vefa De Bellaing ur skol er memes kumun ma oa ar fest. Liammet e oa e giz-se ouzh ar sevenadur hag ouzh ar yaouankiz.

Kenaozet eo bet gant SAE (Skol an Emsav) e-pad ur bloaz e 1974 : muioc'h a dud a zo met ar palioù oa disheñvel : muioc'h troet war ar politikerezh e oa Skol an Emsav.

*Anna Ar Beg : E St Visant e 1976 em eus kinniget da Vefa De Bellaing kavout ur skol evit ar bloaz war lerc'h. Ma fal e oa stabilaat an traoù, e giz-se gant ar memes lec'h bep bloaz e vefe aesoc'h en em aozañ, stabilat ur skipailh hag ober bruderezh a vloaz-da-vloaz. Bet on o klask titouroù digant DEC<sup>7</sup> Kemper ha skrivet em eus d'ar skolioù a oa bras a-walc'h. Bez e oa seizh anezho moarvat, teir nemetken o deus respontet, div evit nac'hañ ha skol Sant-Alan e Skaer, he deus asantet. En em staliet omp eno evit un dek vloaz bennak. Met bihan memestra e oa ar skol. Kampiñ e oa mui pe vui. Stabilaet eo bet al lec'h hag ar mare eus ar bloaz ivez. Muioc'h a dud a oa, muioc'h a skolaerien ha kelennerien, un ezhomm a oa. Prest e oamp war-lerc'h da vont kuit peogwir e oa re vihan ar skol, met tud an ti-kêr o deus bet c'hoant e chomfemp hag o deus kinniget deomp skol Joliot Curie. Aze e oa aesoc'h peogwir ma oa ur gudenn bennak e c'hellemp goulenn gant an ti kêr. Aze e oant evit sikour.*

Adalek 1976 neuze e oa bet cheñchet an aozadur ha sammet ar c'harg gant Gwen hag Anna. E Skaer e voe bepred adalek ar c'houlz-se.

Kudennoù all a voe d'ar c'houlz-se abalamour da gudennoù personelezh pe politikerezh. Diaes e oa kavout ur skol gant lojeiz hag ur gantinell : skol St Alan e Skaer ha war-lerc'h un aozadur all pa voe muioc'h a dud e skol Joliot-Curie. Muioc'h a zeskarded a zeue, neuze tud ne oant ket ampart

---

5 Gwenaël Huon, *Al Liamm*, niv 345, 2003, pp 62-79.

6 *Idem*

7 Direction de l'Enseignement Catholique



war ar yezh. Startoc'h e oa kavout kelennerien neuze berraet eo bet ar c'hamp (da zek devezh, ha war-lerc'h, div wech ur sizhunvezh). Re a dud a oa evit Skaer goude ur pennad. Ar c'hentelioù a oa deuet da vout an obererezh pennañ met goude ar c'hentelioù e veze ivez beilhadegoù, kan, dañs... Ha bepred e teue tud a vroioù estren evit ar brezhoneg.

## An diazeourion

Reizh eo ober anv eus ar re o deus krouet KEAV peogwir o deus roet kalz, hag ul lodenn vat eus o hêrezh a c'hell bezañ santet c'hoazh : spered ar stourmerien gentañ a zo bet meneget din e meur a desteni. Pa lenner an testenioù kavet e-barzh *Al Liamm*, e verzer eo un dro-gaer denel, merket gant mignoniezh, gant sioù ha perzhioù mat an dud, gant an emouestl o deus roet evit o mennad.

Zavier Langleiz (1906-1975) a voe skrivagner ha livour. Kemeret en doa perzh e luskad ar Seiz Breur, krouet gant Jeanne Malivel, e-touez tud all. Studiet en doa e skol an arzou kaer e Naoned, kelenn a reas e Roazhon ha deskiñ a reas gwenedeg en e vro (ganet e oa e Sarzhav). Kristen e oa hag ar feiz he deus levezonet e oberenn. Ur priz lennegel a zoug e anv, evit broudañ an dud da skrivañ e brezhoneg. Kemer a reas perzh er stourm evit unvaniñ ar skritur gant Roparzh Hemon da vare ar brezel. Rener KEAV e voe etre 1948 ha 1954.

Roet en deus da KEAV e logo hag e bennvennozh : degemer an holl a fell dezho peurzeskiñ brezhoneg hag an digor war ar broioù keltiek . Ober a rae war-dro bruderezh, klask arc'hant, nac'hañ ur baeroniezh bennak a-berzh un aozadur publik pe brevez : fellout a rae dezhañ e chomfe KEAV distag eus luskadoù politikel pe eus ar Stad. Evel e geneil Ronan Huon, *ne felle ket dezhañ en defe KEAV da c'houlenn an aluzen, pe goulenn sikour arc'hant digant ar Stad pe c'hoazh fiziañ dazont ar brezhoneg er Stad gall*<sup>8</sup>. Kemer a rae perzh en obererezhioù ar c'hamp : sport, c'hoariva, kan, prezegennoù e-pad ar c'hamp. Paket gant e labour, ne chomas ket pell.

Vefa de Bellaing, he doa graet war-dro ar c'hamp eus 1948 betek ar bloavezhioù 1970. Ne oa ket brezhonegerezh a-vihanik met tommet e oa bet ouzh ar yezh hag ar sevenadur pobl da vare he vakañsoù hañv e Kerglov e kichen Karaez. Kemeret he doa perzh e kamp Bodadeg ar Sonerion e 1947 e Sarzhav hag e skrivas da heul da Langleiz :

*Gwelet em eus gant tristidigezh ha truez, ur bern tud yaouank e Sarhau hag e lec'hioù all, e BAS, pe er c'helc'hioù keltiek o klask komz ha chom hep bezañ skoazellet, pa ne veze ket graet goap outo !*

---

<sup>8</sup> Gwenaél Huon, *Al Liamm* niv. 345, 2003, pp 62-79.

Kentelioù he doa bet gant Skol Ober, ha kompren a reas da neuze e oa a-bouez kaout ul lec'h ha meskañ brezhonegerien a-vihanik ha deskarded. E penn Skol Ober goude marv Marc'harid Gourlaouen e oa bet, skrivet he doa bet barzhonegoù, pennadoù, sonerezh ha dreist-holl ur « geriadur ar sonerien<sup>9</sup> »... He labour e KEAV a oa kavout ur skol bep bloaz, gweladenniñ, skrivañ lizhiri, ober bruderezh, ober war-dro an enskrivadurioù, embann ur c'hannadig a zeue er-maez div wech ar bloaz.

Rener KEAV e oa bet Ronan Huon adalek 1953, betek 1966. Ne oa ket brezhoneger a-vihanik padal e dud a ouie brezhoneg. Deskiñ a reas gant kendirvi hag eontred, diwar ar maez, kostez Montroulez. Rener ar gelaouenn *Al Liamm Tir-Na-Nog* e oa bet adalek 1948 hag hini an ti-embann Al Liamm. Dimeziñ a reas gant ur vrezhoneger, Elen Ar Meliner hag e tesavjont o fevar bugel e brezhoneg. Kelenn a rae brezhoneg e Bodadeg ar Sonerion, a oa e 1947 ar c'hamp breizhat nemetañ, met re a c'halleg a oa hervezañ, pe re nebeut a vrezhoneg, hag an tri c'homper ha divizout krouiñ ur c'hamp gouestlet d'ar brezhoneg. Labour rener ar c'hamp a oa : degemer an dud, bezañ jubennour gant ar Gembreiz, buheziñ, sevel prezegennoù, aozañ dudiamantoù, beilhadegoù, pediñ skrivagnerien. Dilezel a reas ar c'harg e 1966. Ur pennad fromus diwar e benn en doa skrivet e vab Gwen e-barzh *Al Liamm*, ma veneg ha displeg ennañ lod eus perzhioù dibar KEAV, er mennad savet gant e grouerien. Pa voe lidet 50 vloaz KEAV e 1997, Ronan Huon a oa an hini nemetañ eus an diazeourien a oa bev ha war al lec'h c'hoazh.

## **Ar re o deus kendalc'het**

Ha war e lerc'h e voe : Yann Talbot (marvet e 2018), beleg ha kelenner. Ur paotr eus Rostren e oa, person e oa bet eno. Kelenner e oa bet war an ekonomiezh hag ar brezhoneg hag e oa bet diplomet e istor ha douaroniezh ivez. Emouestlet e oa bet e kampoù e brezhoneg koulz hag e kevredigezhioù, evit reiñ kentelioù ha brudañ ar brezhoneg.

Per Penneg : un den bet ganet e Brest, klañv diwar an droug-skevent, ne c'hellas ket chom o vevañ e Breizh. Desket brezhoneg en doa en e endro familh. E studioù en doa graet e Roazhon, ha war-lerc'h e oa aet da vevañ e Grenoble hag e Tunizia... Klask a rae tremen un nebeud sizhunvezhioù e Breizh bep hañv. Rener KEAV e oa bet etre 1966 ha 1972 mui pe vui. Kemeret en doa perzh e labourioù SADED (Strollad An Deskadurezh Eil Derez), ur strollad evit kelenn skiantoù e brezhoneg en eil derez. Kemer a rae perzh ivez e stajoù Skol an Emsav.

Paol Kalvez a oa bet ganet ha desavet e Lokouarn (Bro-Leon) gant ur voereb dezhañ, e

---

<sup>9</sup> Vefa de Bellaing, *Dictionnaire des compositeurs de musique en Bretagne*, Rennes, Ouest Editions, 1992, 280 p.

brezhoneg penn-da-benn, en ur metoù sokial uvel. Yezh kentañ ha nemeti e voereb a oa ar brezhoneg. E skol ar veleien e oa bet Paol ha war-lerc'h e Okitania ha Tunizia gant ar soñj mont da visioner. Nac'het e oa bet dezhañ mont da visioner ha da veleg war an dro. Distreiñ a reas da Vreizh ha kejañ gant tud an Emsav. Labouret en doa gant SADED, eñ ivez : e bal a oa sevel geriaoueg ha kentelioù par ha par d'ar re e galleg. Kentelioù uhel a roas e KEAV er bloavezhioù 60. Troet e oa war-zu ar relijion gatolik hag ar brezhoneg : e-karg da gKEAV e oa bet eus 1972 betek 1977 gant Vefa de Bellaing.

Kendalc'het ez eus bet gant Gwen hag Anna abaoe 1976. Sikouret e vezont gant ur skipailh 30 pe 40 den :

*Anna Ar Beg : Ar gelennerien a zo izili, hag ar skodenn a zo ur sizhunvezh kentelioù. Talvezout a ra evit tri bloaz. E giz-se hon eus tro 70 kelenner. Tud ar gegin n'int ket izili. Dont a ra tro 15 den d'an Emvod Meur.*

*Gwen Huon : Er c'huzul-merañ, a vez bodet 3 pe 4 gwech ar bloaz, e vez dasparzhet ar c'hargoù etre an dud, pep hini a gemer unan. Da skouer, Loig a ra war-dro ar gelennerien. Ober a reomp ur bilañs eus ar pezh a zo bet graet hag eus ar raktresoù. Sofi a ra war-dro an devezh stummañ hag ar staj kan.*

Prezidant KEAV eo Gwenael Huon ha mab da Ronan Huon hag Elen Ar Meliner. Desavet e oa bet e brezhoneg asambles gant e vreudeur. Rener KEAV eo bet abaoe 1976. E vreur Tudual a zo rener ar gelaouenn *Al Liamm*. Ar pevar breur a zo emouestlet e bed ar brezhoneg pe al lennegezh.

Anna Ar Beg a zo sekretourez KEAV abaoe ar memes bloaz. Labouret he doa gant Vefa de Bellaing, evel ma tispleg en he zesteni. Desavet e oa bet e brezhoneg asambles gant he breudeur ha c'hoarezed hag an holl a implij c'hoazh ar brezhoneg etrezo. He zud avat o doa desket brezhoneg evel Ronan Huon. Kenlabouret he deus e meur a gevredigezh troet war ar brezhoneg, al lennegezh, an deskadurezh.

## 2 – Kemer perzh ha sellout ouzh mont en-dro ar staj

E-kerzh an hañv 2019 e oan bet e KEAV e Kastellin gant ar soñj prientiñ al labour-mañ hag em boa divizet sevel atersadennoù aozourien ha stajidi. Kemeret em boa perzh war an dro er staj, hervez reolennoù ar staj. Dav eo din lavaret e oan bet eno meur a wech e-giz stajiadez evit peurzskiñ hag implijout ar brezhoneg gant ma bugale. Ne c'hellen ket bezañ sellourez nemetken, da gentañ em boa kemeret perzh peogwir e kaven e oa talvoudus KEAV evit komz brezhoneg.

An aozourien a zo, hervezon, tud a gemer ur c'harg en aozadur, pe e vefe aozañ ar staj pe buheziñ un atalier peotramant reiñ kentelioù. An dud-se a zo izili KEAV, hervez reolennoù ar gevredigezh, reiñ a reont e-giz skodenn ur sizhunvezh kentelioù, ar pezh a dalv da skodenn evit tri bloaz. Mouezhiañ a c'hellont en Emvod Meur.

Ar berzhidi pe stajidi a zo an dud a gemer perzh en unan eus an obererezhioù kinniget : staj ur sizhunvezh pe staj un dibenn-sizhun. An dud am eus aterset o deus kemeret perzh ur wech pe meur a wech, pe ar bloaz-mañ pe en amzer dremenet, e-pad bloavezhioù neuze.

### **Atersadennoù**

#### *Methodologiezh an atersadennoù :*

Prientet em boa da gentañ ur c'houlennaoueg verr a oa disheñvel evit ar berzhidi hag an aozourien. Kaset em boa anezhi d'an dud o doa kemeret perzh er staj kanañ ganin en nevez-amzer 2019 met dipitet e oan gant ar respontoù, a oa re verr, re sec'h ha ne oant ket niverus a-walc'h. Abenn ar fin ne roe ket plas a-walc'h d'an dud da ezteurel o soñjoù. Atersadennoù dre gomz am eus bet gant an dud, e-kerzh staj hañv KEAV e Kastellin ha reoù all e Naoned, e lec'hioù disheñvel (tiez an dud, lec'h labour...) gant stajidi a-orin eus Liger-Atlantel (dreist-holl). Pep atersadenn a zo bet padet tro un eurvezh (etre  $\frac{3}{4}$  eur hag 1e30), ur bilañs anezho a vo kavet a-zindan hag ur skouer klok e pezh-stag. Tamm-ha-tamm em eus cheñchet ma hentenn, hervez kuzulioù am eus bet pe kavet evit an atersadennoù er skiantoù sokial. Goulennet em eus gant an dud ezteurel o mennozhioù hag ar pezh o doa bevet e KEAV ha ma oa ezhomm em eus savet goulennoù ouzhpenn. Kavet e vo da heul un daolenn a zispleg piv am eus aterset, pe oad e oant ha pelec'h e oa bet graet an atersadenn.

Lec'h atersiñ	oad	Anv er c'hounskrid
E KEAV, e Kastellin	77	Anna Ar Beg, AAB
E KEAV	68	Gwenael Huon, GH
E Naoned	52	Emmanuel
E Naoned	47	Camille
E Naoned	42	Quentin
E KEAV	40	Nora
E Sant-Ervlan	29	Maiwenn
E Kerc'hfaou	53	Yann
E KEAV	33	Soazig
E KEAV	40	Sophie
E Sant-Ervlan	30	Ewen
E Sant-Ervlan	62	Naig
E Sant-Ervlan	63	Eleonore
E Naoned	60	Catherine
E KEAV	60	Youenn
E KEAV	29	Tudi

Goulennet em eus digant an dud o aotre da lakaat anezho em c'hounskrid. Cheñchet em eus o anvioù, war-bouez hini an aozourien pennañ, oberiant er mare-mañ e KEAV.

Kaozeadennoù berroc'h am eus bet ivez gant stajidi hag aozourien mesket ouzh taol pe war ar prim e KEAV, neuze a-wechoù, n'eus ket un atersadenn glok, nemet bommoù en ur gaozeadenn. Klasket em eus bezañ feal ouzh spered ar pezh am eus klevet, hep distummañ ar c'homzoù hag en ur zisplegañ o c'henarroud.

### **Sell an aozourien**

- Petra eo KEAV ?

*Anna Ar Beg : Ur gevredigezh stourm evit ar yezh eo KEAV, n'eo ket ur staj, ur skol eo kentoc'h, ur skol stourm evit ar yezh.*

- Petra zo bet cheñchet abaoe ar penn-kentañ ?

*Anna Ar Beg : Ar spered n'eo ket cheñchet. Daou briñsip a zo : brezhoneg nemetken ha tud a-youl-vat, an holl gelennerien a zo a-youl-vat. Un trede priñsip a zo ivez : chomet omp distag eus ar strolladoù politikel, setu perak hon eus gallet derc'hel betek bremañ. Degemer a reomp an holl dud*

*pe e vefent eus an tu kleiz pe eus an tu dehoù, n'omp ket stag ouzh ar politikerezh.*

*Gwen Huon : N'eo ket cheñchet spered KEAV abaoe an amzer : brezhoneg hepken ha tud a-youl -vat.*

- Hag ur gevredigezh eo KEAV ?

*Gwen Huon : Ya, ur gevredigezh eo KEAV, un emvod meur a zo e fin tout ar bloaz pe penn-kentañ ar bloaz e Plañvour pe e Karaez. Pedet e vez ar gelennerien. Ar stajidi n'int ket izili, n'o deus ket a c'halloud mouezhiañ. Ledan tre ar statudoù evit reiñ frankiz d'ar gevredigezh.*

- Petra soñjit eus an divyezhegezh ?

*Anna Ar Beg : Ha nann, nann, nann ! An divyezhegezh n'eo ket ar pal ! Ober gant ar brezhoneg an hini eo. Bezañ gouest da implijout ar brezhoneg e pep degouezh eus ar vuhez.*

- Petra zo dibar e « spered » KEAV ?

*Gwen Huon : Liammañ a zo a-bouez, kenaozañ traoù gant spered KEAV, da lavaret eo kensikour, nebeut a hierarkiezh, tud a-youl-vat. Abalamour da se e c'hellomp kinnig prizioù izel. (GH)*

*Kenlabourat, kenaozañ a glaskomp bepred : gwelet ez peus an tiez embann a gas o levrioù amañ hag e werzhont kalz. Goude saloñs Karaez eo amañ e vez gwerzhet ar muiañ a levrioù brezhonek. Evit an davarn ivez, kenlabourat a reomp gant embregerezhioù eus ar vro (Coreff evit ar bier, Patrick Gourlay evit ar sistr). War an dro gant ar staj emañ an Erer Kozh neuze fustoù a zo prest evidomp. (GH)*

*Ar soubidigezh. Din da c'houzout n'eus ket a lec'h e giz-se en tu-hont da Ziwan ha KEAV, ul lec'h evit ober gant ar brezhoneg war ar pemdez gant un ensavadur. An abeg nemetañ evit dont e KEAV eo ar yezh. (Soazig)*

- Ha petra vroud ac'hanoc'h da genderc'hel ?

*Ar blijadur da welet an traoù o vont war-raok. Graet e vez an traoù e brezhoneg nemetken hag an dud o deus plijadur. Reiñ tro d'an dud d'en em welet. (AAB)*

- Petra eo al labour aozañ bep bloaz ?

*Goude ar c'hamp e savan ur rentañ-kont evit gwelet ar pezh a zo bet mat hag ar c'hudennoù da renkañ. Liammoù a zo gant ar skol amañ (lise ar Stêr Aon, e Kastellin), evit sevel ur gevrad ha*

*marc'hata. E penn-kentañ e oa ur gevrat a vloaz da vloaz, bremañ hon eus ur gevrat evit tri bloaz hep kreskiñ ar priz. Ar skipailh amañ el lise a zo o vont da cheñch, emañ ur skipailh all o tont, tud eus Brehoulou (ur skol labour-douar all), a zo Bretoned. Marteze int tommoc'h ouzh Breizh... Degemeret e oamp bet mat ganto pa hor boa goulennet ganto feurmiñ o skol. Degemer a reomp tro 200 den e-kerzh ur sizhun.*

*Bremañ e teu muioc'h a dud gant skoazell, abaoe un nebeud bloavezhioù. Rediet e vez an danvez skolaerien ha kelennerien da zont d'en em stummañ amañ evit kaout ur skoazell gant ar Rannvro. N'eo ket ni hon eus an arc'hant, met ar studierien. Met degas a ra tud.*

*Neuze er c'huzul-merañ (a vez bodet 3 pe 4 gwech ar bloaz) e vez dasparzhet ar c'hargoù etre an dud, pep hini a gemer unan. Da skouer, Loig a ra war-dro ar gelennerien. Ober a reomp ur bilañs eus ar pezh a zo bet graet hag eus ar raktresoù. Sofi a ra war-dro an devezh stummañ hag ar staj kan.*

*Setu ar c'hudennoù a bep seurt a c'hell bout : n'eus mui tredan en davarn evit fardañ ar c'hafe pe tommañ an dour. Hag ivez evel-just ez eus melestradurezh, kas ha reseviñ mailoù e-leizh. Pep kelenner a sav ur program. Diwar se e reomp bruderezh hag e implijomp hor rouedad, ar c'hevredigezhioù hag ar c'hreizennoù a zo tost ouzh ar brezhoneg, ar skolioù, an ubapar, DAO, Divskouarn...(GH)*

## **Sell ar stajidi**

Stajoù all a zo evit deskiñ brezhoneg met disheñvel eo KEAV peogwir e vez implijet brezhoneg nemetken en holl degouezhioù ar vuhez pemdez. Ar c'hamp brasañ e brezhoneg eo ivez, komzet e vez muioc'h brezhoneg eno ha kalz a dud a zo. Er bloavezhioù 1980/90 e oa marteze ur c'hant den bennak bep sizhun, bremañ eo muioc'h eget 200. Ur gevredigezh vihan eo neuze, kalz muioc'h eget ur c'hamp pe ur staj all.

- Petra eo pal KEAV d'ho soñj ?

*Camille : Lakaat an dud da gomz e brezhoneg, kinnig ur vuhez e brezhoneg, lakat an dud da gejañ gant tud all, gant tud ar vro, da skouer. Tud ar c'hêrioù gant tud diwar ar maez, tud a bep seurt neuze.*

*Soazig : Reiñ tro d'an holl da implij ar yezh war ar pemdez, zoken an dud a vev pell pe a labour e galleg. Tud zo n'o deus nemet teir sizhun vakañsoù hag a labour en ul labouradeg a-hed ar bloaz hag a zeu e KEAV. Evito n'eo ket vakañsoù ma vezont o teskiñ : labour spered eo.*

*Nora : Eskemm, dizoleiñ dre an eskemm, ober anaoudegezh gant tud, krouiñ liammoù, treuzkas, ober gant ar brezhoneg. N'eus ket kalz lec'hioù e Breizh lec'h ma vez krouet ur vuhez kevredigezhel e brezhoneg. Disheñvel eo eus Diwan peogwir n'o deus ket ar vugale choazet da zont (er skolioù Diwan). KEAV a zo evel ar festoù-nnoz, ul lec'h ma vez gwelet tud a bep oajoù. Pal KEAV a zo treuzkas, ober eus ar brezhoneg ur yezh kevredigezhel ha tiegezhel war un dro. Al lodenn-se, treuzkas er familh a zo nevez a-walc'h hag a-bouez bras eo. Digor eo bremañ ivez d'an dud n'o deus ket a vugale. Gallout a ran me ivez treuzkas ma skiant-prenet peogwir on bet desavet en brezhoneg em familh.*

*Emmanuel : Pal KEAV a zo saveteiñ ar yezh, treuzkas anezhi dre ar soubidigezh. Lakaat ar brezhoneg da vezañ bev.*

- Petra blij deoc'h e KEAV ?

*Camille : Ur gumuniezh eo. Plijus eo ar c'hentelioù, bev, gant c'hoarioù. Startijenn a zo. Atalieroù noz ivez. Hag ouzh taol eo ret azezañ e-kichen ar re-all. E Skaer e oa taoliadoù bras, e giz-se e oa ret deomp komz gant tud n'anavezemp ket, a oa barrekoc'h (evidon bepred), ha hep an dra-se marteze n'hor dije ket kredet komz ganto. Ar siop siarad a zo efedus ivez. E giz-se, en un aergelc'h distanet eo aes kregiñ da gomz.*

*Bemmanuel : Bevañ e brezhoneg, brezhoneg nemetken. An aergelc'h, an dud a zo hegarat, sikourus evit lakaat ar re all da gomz, hep barnañ. Tu zo da gomz gant an dud, en un doare simpl. Plijus eo ivez an atalieroù am eus graet bloaz goude bloaz : skrivañ, Istor Breizh, lennegezh, radio... Mont a rafen a-walc'h evit ar c'hembraeg, met n'em bo ket amzer ar bloaz-mañ. An dud a ra war-dro a ra ul liamm gant hengoun KEAV. Tud zo a rebech ar spered « hengounel » a zo, met se a blij din. Ar santimant hon eus da zaremprediñ bed ar vrezhonegerien, ar stourmerien gentañ. Chom a ra spered ar « gwim<sup>10</sup> » e KEAV.*

*Quentin : Pa vezer o teskiñ brezhoneg eo diaes kaout fiziañs ha gallout komz, kregiñ gant ar gaoz. Aze eo aesoc'h peogwir e kejer ouzh tud a bep seurt liveoù brezhoneg ganto. Kalz a basianted o deus, Ne vezer ket o soñjal out « null » gant da vrezhoneg dister. Zoken ma truchez un tammig, ez peus tro da gaozeal brezhoneg da vat. Pep tra a vez graet e brezhoneg. Souezhet ha plijet on bet en ur welout, en ur erruout, ez eus kalz tud a-benn ar fin o komz brezhoneg. Komprenet em eus ne oan ket ma-unan « le dernier des Mohicans » met lod e oan eus ur strollad brasoc'h evit*

---

<sup>10</sup> Dave da film « Ar Gwim » a gont istor familhoù brezhonegerien o deus dalc'het da zesevel o bugale e brezhoneg daoust da bep tra en XXvet kantved, ha dreist-holl goude an eil brezel bed. Soazig Daniellou, *Ar gwim*, Kalanna, 2015.



*ma soñjen. Anavezout a raen un nebeud tud eus Naoned met al lod brasañ n'anavezen ket.*

## **Obererezhioù**

Petra vez graet e staj hañv KEAV ?

Erruout a reer d'ar Sul da noz. Servijet e vez un digor kalon en diavaez, just dirak dor al lise. Mont a reer da gavout Anna, evit paeañ ha kaout ur gambr. Dav eo degas hon dafar kousket ha malizennoù. Goude se e vez pred Mari Glazioù war al leton dirak antre al lise. Strolladoù bihan a vez, adkavout a reer alies mignoned pe tud anavezet gwelet a-raok en ur staj pe e lec'h all (ur vanifestadeg, ur stourm evit ur skol, ul lec'h stourm, ar Redadeg...).

Goude ar pred e vez un emvod er sal c'hoariva, gant ur brezegennig gant Gwen. Lavaret en doa e miz Gouere e oamp 200 hep ar vugale. Reiñ a ra koñsignoù evit ar vuhez a-stroll pe ar surentez, gant mousfent. Kemenn a ra deomp emañ o vont da leuskel plas da Wenhael Besnard evit ren en e blas hiviziken, gant tuilaj e mod ar vro, an hini koshañ o sikour an hini yaouankañ da gemer ar c'harg.

Kinnig a ra deomp ar skipailh kenaozourien, a zo niverus (tud ar gegin, kelennerien, animatourien), etre 30 ha 40 den. Tamm-ha-tamm e vo galvet da heul, gant o c'helenner, an dud hervez o strollad (kentelioù pe obererezhioù all, hep disoñjal brezhoneg er familhoù).

### **Abadennoù (c'hoariva, filmoù)**

Bep bloaz e pad staj KEAV div sizhun, met posubl eo dont evit ur sizhunvezh nemetken hag alies e vez kinniget un abadenn da nebeutañ e diavaez ar greizenn, en ur sal e kreiz-kêr Kastellin. Tro am eus bet da welet ur strollad c'hoariva (Ar vro Bagan, Plourin...) pe ur film nevez savet (Lann vras).

Bez' vez ivez prezegennoù pe filmoù kinniget da noz er greizenn, er sal c'hoariva. Bez e oa ar bloaz-mañ, un den en doa beajet kalz e Europa hag Amerika hep arc'hant, en ur c'houlenn bod ha boued ha plas en ur c'harr-tan, en eskemm da istorioù, kontadennoù pe kanaouennoù. Kontet en deus e raktres hag e veaj. Dedennet e oa ar stajidi hag o doa ur bern goulennoù da sevel outañ. Ar gelennerien hag an aozourien a gemer perzh e pep tra evel ar stajidi. En em gavout a reer neuze war ar memes live, en tu all d'ar c'hentelioù. Soñj am eus ivez eus prezegennoù all kinniget gant stajidi pe tud all a youl vat : prezegennoù diwar-benn ar plantoù pe ur ouiziegezh bennak. N'eo ket bepred un dra vicherel, evel-just. Met krouiñ a ra liammoù, deskiñ a reer traoù. Evel m'eo bet merzet gant Hugues Pentecouteau, e kinnig KEAV d'e stajidi kemer perzh e buhez ar c'hamp, kemer ar gaoz,

kinnig ar pezh a ouzont<sup>11</sup>.

### ***Siop siarad d'al Lun da noz (kentañ devezh ar staj-hañv)***

Ar *siop siarad* eo un dra ispisial e KEAV evit ober anaoudegezh gant ar re all. Ur c'hoari eo hag a dalvez e kembraeg : ar stal (gwerzhañ) gerioù. An dud a ra daou gelc'h, an eil e-barzh egile, met memes niver a c'hoarierien e-barzh pep hini. An dud a dro evit bezañ tal-ouzh-tal ha gellout eskemm, e-pad ur predig 2 pe 3 munutenn, merket gant ar gasourien (an dud a gas ar c'hoari). Komz a reer e giz-se gant unan all : en em ginnig, sevel goulennoù, lavaret eus pelec'h e teuer, komz eus ar familh... War-lerc'h pep prantadig, ar c'helc'h diavaez a dro, hag en em gavout a reer dirak un den all. Un doare efedus ha plijus eo da lakaat an dud da gomz kenetrezo, dichipot, daou ha daou, gant n'eus forzh piv ha da implijout o gouiziegezh e brezhoneg. Un doare ivez da ziskornañ ar gaoz ha da gemer fiziañs evit an nevez-vrezhonegerien. Ar c'hoari-se a vez graet d'al Lun da noz goude ar c'hentelioù, buan a-walc'h e penn-kentañ ar staj neuze.

### **Mont da gaozeal gant tud ar vro**

Mont da gaozeal gant tud ar vro a zo unan eus an obererezhioù reoliek a vez e KEAV. D'ar Merc'her pe Yaou d'abardaez e vez graet strolladoù mesket (a bep seurt liveoù) kaset gant ur c'helenner, unan a vestroni ar yezh eus un tu hag an darempredoù eus un tu all evit kaozeal gant tud ar vro. An dud-se a zo tud war an oad, peurliesañ brezhonegerien a-vihanik, ar pezh a zo « arouez » ar brezhoneg gwir evit ar stajidi, nevez-vrezhonegerien anezho. Klasket e vez aesaat ar gaoz gant ur profig (ur voutailhad sistr da rannañ), ar c'helenner a c'hell sikour evit kas war-raok ar gaozeadenn. Un dra brizius e c'hell bezañ met n'eo ket aes. Prizius eo peogwir eo un dro evit an dud-se (brezhonegerien a-vihanik, tud kozh, troc'het alies eus implij pemdez ar yezh) da gaozeal brezhoneg, gant tud disheñvel diouto. Un digarez eo da staliañ un dreuzell etre bed ar vrezhonegerien a-orin hag hini ar re o deus desket dre gentelioù. Diaes eo ivez peogwir e c'hell chom bout ar gaozeadenn, ken bras an diforc'h etre an dud : tud eus kêr, tud diwar ar maez, tud yaouank, studierien o deus c'hoant da adperc'henniñ ar yezh ha reoù a zo bet soubet e sevenadur Breizh diwar ar maez. N'eo ket aes en em gompren, kavout traoù da lavaret an eil d'egile, traoù o deus ur ster, a zo dedennus evit an daou... Seul vrasoc'h an diforc'hioù, seul stankoc'h ar skoilhoù d'an eskemm.

Evit tud ar vro, eo un digarez ral da gomz e brezhoneg, ar braz anezho a zo pase 80 vloaz. Evit stajidi KEAV, hag a zo bet mesket a-raok, e c'hell bezañ ur souezh o welout pegen disheñvel, diaes da intent e c'hell bezañ ar brezhoneg, hervez ar c'horn-bro hag hervez an dud ivez. Tud zo e-touez ar

---

11 Hugues Pentecouteau, « L'engagement dans une formation immersive », *Savoirs* 2016, p 80.

reoù gozh a zo techet da chaokat kaozioù, ar pezh a zo diaes da gompren, hag evel-se e vije e galleg ivez. Un evezhiadenn am eus klevet a-berzh ur stajiad, en deus lavaret :

*Meur a doull a zo, n'on ket boas da zaremprediñ tud kozh, diwar ar maez, a zo stag ouzh ar relijion, ouzh an douar hag ouzh ar brezhoneg. (Tudi)*

Meur a ziaester evit kompren an eil hag egile.

Met pinvidik e c'hell bezañ ivez. Graet em eus ur weladenn a-seurt se gant ur strollad awenus en diskar amzer. Bez e oa ganeomp ul labourer douar (yaouank a-walc'h) hag a oa kontant da c'houlenn traoù diwar-benn an teknikoù, an ostilhoù, ar c'heriaoueg implijet, ar c'hudennoù ekologel : al loened, ar girzhier... Ha gant se, gant un hanterour efedus, e oa bet dedennus ar gaozeadenn evit an holl, a gav din.

### **Kan**

Ouzhpenn d'ar c'han kinniget gant kelenner-mañ kelenner da greisteiz, ez eus ur staj kan kinniget e Plañvour gant Sofi, war un dibenn-sizhun. Kelaouet e oan bet dre bostel peogwir e oan en ul listennad stajidi. Ar c'heloù a vez kaset dre al lec'hienn Internet ivez. Lakaet em boa ma anv gant 20 den all. Sofi he deus kaset ar staj e-pad daou zevezh : kanañ a ra, klask a reomp tapout an ton hag ar son. Adkregiñ a ra, respont a reomp. Deskiñ a reomp a bep seurt : kanoù da zañsal, kanoù da gerzhet, kan-ha-diskan. Bez e oa bet da noz ur veilhadeg, gant ur strollad kanerezed o tont, ha tud pedet evit kontañ istorioù. Kinniget e oa bet d'ar stajidi kemer perzh en ur ganañ, pe en ur zañsal. Un aergelc'h plijus a oa : oadoù mesket, evajoù, sonerezh, skuizhder fin un devezh tremenet asambles o rannañ sevenadur ha dudi. D'ar Sul e oamp bet o pourmen hag o kanañ ar pezh a oa bet desket en dibenn-sizhun. Sofi he doa diskouezet deomp he c'horn-bro e Plañvour hag ar savadurioù dibad a oa bet goude ar brezel evit lojañ an dud pa oa distrujet kement a savadurioù. Pep hini ac'hanomp a c'helle, hervez e c'hoant, reiñ lañs d'ur ganaouenn ha tro hor boa bet ivez da doullañ kaoz an eil gant egile.

### **Kentelioù**

5 live brezhoneg a vez savet . Daou evit an dud o devez nebeut a

ouiziegezh, met n'int ket deraouidi peogwir eo ar brezhoneg yezh nemeti ar staj, neuze o dez desket brezhoneg e-pad daou vloaz da nebeutañ e kentelioù noz. Al liveoù a-us a zo ampartoc'h. Daou gelenner a vez bep tro ha peurliesañ e reont pep hini an hanter eus ar prantadoù kelenn : un eur ha kard diouzh mintin ha kement-all en abardaez. Bez'vez ivez obererezhioù all kinniget a-hed ar sizhun : 2 gentel kembraeg (live deraouidi hag ul live all), c'hoariva, radio, kanañ, distagadur-

pouez-mouezh, krouiñ e brezhoneg, kazetennerezh... Soñj am eus eus ar c'hentelioù am boa kemeret perzh enno er bloavezhioù kentañ : desket em boa traoù dre ar brezhoneg, diwar-benn sevenadur Breizh, ar gevredigezh, al lennegezh. Kinniget e oa bet deomp sevel un eztaoladenn diwar-benn ur sujed a blije deomp. Ur plac'h eus Bro-Alamagn he doa kinniget un eztaoladenn diwar-benn ar minorelezhioù e Alamagn. Me am boa kinniget un eztaoladenn diwar-benn krapat er gwez, ar pezh a blije din pa oan bugel. Pep hini en doa tro da ezteurel e ouiziegezh, da glask mont war-raok ha da vezañ anavezet evit un dra ispisial, lod eus e identelezh, dirak ur strollad bihan a-walc'h. Ne ra ket aon e giz-se, ingal e vez an dud.

Bez ez eus e giz-se tro 12 strollad disheñvel evit an dud deuet. En em gavout a reer etre 5/6 ha 15 e-barzh pep strollad. Ar c'hentelioù a vez etre 9e ha kreisteiz ha 2e ha 5e en abardaez, gant un troc'h ½ eur e-kreiz.

Kemeret em boa perzh e miz Gouere tremenet er strollag Kembraeg 1. Eizh den a oa e-barzh ar strollad, tri studier ha tud koshoc'h, unan anezho a oa o chom e Savoie. Chomet e oamp asambles evit ar c'hentelioù a-hed ar sizhun, neuze krouet hon eus ur strolladig, bevet hon eus traoù asambles, komzet hon eus un tammig kembraeg etrezomp hag gant ar strollad Kembraeg 2. Gant ar re-se hor boa pleustret evit ar c'hanaouennoù kanet d'ar Gwener noz, en abadenn fin ar sizhun. Div gelenner e oa, ur Vreizhadez hag ur Gembreadez. Kelenn a raent e brezhoneg peogwir e oamp deraouidi tout e Kembraeg. Farsus ha broudus eo deskiñ ur yezh all e giz-se, keniterv d'hor yezh-ni. Ur bern gerioù boutin a zo etre an div. Pa ne anavezer ket ar gerioù skrivet, eo an distagadur a heñch ac'hanomp hag ivez soniadoù saoz a-wechoù : sorri, gweld ffrindiau, hen ffasiwn (distaget hen *fashion*), snobyddlyd (distaget *snobbidish*).. Meskajoù soniadoù iskis... A ra deomp c'hoarzhin hag a vroud ac'hanomp. Plijus eo deskiñ dre ar brezhoneg. Un emglev a sav etrezomp hag an aergelc'h a zo plijus. E penn-kentañ ar sizhun, ar re n'int ket boas da zeskiñ traoù, yezhoù... a c'houlenn ur bern displegadennoù hiniennel evel : met petra dalv resis, petra eo ar brezhoneg evit ar ger-se ? Met tamm-ha-tamm an holl a asant mont pelloc'h ha buanoc'h en ur heuliañ hon div gelenner e gant o hentenn bev.

### **Ar prantadoù etre : ehanoù, tavarn, predoù...**

En ehanoù, da greisteiz, da noz e c'heller choaz levrioù : en antre bras hag en trepas e vez diskouezet levrioù an tiez embann pennañ e brezhoneg. Kejañ gant tud ha komz ganto a c'heller ober ivez. Moaien vez d'ober se diouzh an noz ivez goude koan ha da vare ar predoù.

Da greisteiz e vez kan : lod eus ar gelennerien a ginnig ur sonenn a c'hell bezañ dañset ivez (hervez ar sonennoù). An holl strolladoù a vez mesket. Tud zo a c'hell choaz diskuizhañ pe mont da

welout o bugale er greizenn dudi, pe lenn en ur c'horn, met kalz tud a vez laouen o kanañ hag a-wechoù o tañsal asambles. Dichipot eo, dirak ar savadur. Neb a venn az a e-barzh ar c'han pe an dañs.

Ar pred a vez servijet etre 12e30 hag 1e30 goude kreisteiz. Ur self eo. Lostenniñ a ra an dud, peogwir e vez leun mat ar c'hamp, hag a grog da gaozeal gant o amezeien, e giz- se ivez e vez graet anaoudegezh gant an dud. Ne chomer ket gant ar memes tud bep tro, neuze hor bez tro da gaozeal gant a bep seurt tud, a bep seurt oadoù, a bep seurt korn-bro. Stajidi hag aozourien a vez asambles ouzh taol. Menegiñ a ra Gwen Huon e oa bet graet a-ratozh-kaer gant e dad :

*Ronan Huon a blije dezhañ bezañ gant an deskarded, evit o sikour, heñchañ anezho. N'en deus ket disoñjet an deskard e oa bet. Ouzh taol e veze ganto, klask a rae chom hep en em gavout atav gant brezhonegerien ampart a blij dezho en em gaout asambles<sup>12</sup>.*

Diskouez a ra Hugues Pentecouteau en e studi<sup>13</sup> meneget a-raok e c'hell bezañ implijet al lec'hioù bevañ ivez evel ul lodenn eus ar bedagogiezh (soubidigezh e brezhoneg) : er c'hambreier pe er salioù-dour e kej ar stajidi an eil ouzh ar re all, diouzh ar mintin hag en noz. Ar re n'int ket deuet gant o familh a vez mesket gant tud a liveoù disheñvel. Reiñ a ra tro da eskemm un nebeud gerioù ha frazennoù pa vez vak warnomp. Krouet e vez e giz-se un takad sokial brezhoneger penn-da-benn, e degouezhioù ordinañ ar vuhez : kousket, debriñ, en em walc'hiñ...

### **Obererezhioù all**

Ar c'hentelioù a oa betek 3e goude merenn en hañv tremenet (d'ar Merc'her) evit reiñ tro d'ar re a felle dezho mont da gerzhout asambles e Tromeni Lokorn, nepell eus Kastellin. Emgav a oa bet roet eno evit en em gavout etrezomp. An droiad kerzhout a oa 12 km. Evit ar re ne felle ket dezho mont hag ar familhoù gant bugale vihan e oa bet kinniget mont d'an aod, da bPloeven. An holl en em gave eno forzh penaos tro 8 e noz evit ar pik-nik. Mont a reer asambles, en ur genweturin d'al lec'hioù-se, un digarez da doullañ kaoz c'hoazh. Al lec'h-se a oa bet choazet peogwir e oa bugale ar greizenn-dudi o kampiñ eno evit 2 pe 3 devezh. Pred Mari Glazioù a oa evit an holl war an draezhenn pe un tammig en a-dreñv kentoc'h abalamour d'an avel sklas en nozvezh. Un abardaevezh hor boa tremenet war an draezhenn neuze, gant 40 den, ar familhoù gant bugale en o-zouez a-raok ar pik-nik evit an holl. Reoù o doa degaset c'hoarioù (mollky, kartoù) ha kinniget da c'hoari tro-dro dezho.

*Bez ez eus eus an obererezhioù all abaoe 2008 mui pe vui. Goulennet e oa bet diganeomp. C'hoariva a voe an hini kentañ. War-lerc'h hon eus kinniget a bep seurt traoù. N'eo ket atalieroù*

12 Gwenaël Huon, *Al Liamm*, niv. 345, pp 62-79.

13 Hugues Pentecouteau, « L'engagement dans une formation immersive », *Savoirs* 2016, p 79.

*peogwir e vez heuliet a-hed ar sizhun. Er bloaz-mañ hon eus kinniget bale ha kaozeal, berzh en deus graet. Neuze hor boa lakaet kriterioù ispisial : bezañ bet e KEAV dija, bezañ brezhoneger ampart ha baleer ampart : bezañ gouest da gerzhout 15 km hep paouez e-kreiz, pe e-kreiz ar sizhun ! (AAB)*

Bloavezhioù all pa oan bet e KEAV em boa kemeret perzh e strolladoù disheñvel evel ur strollad c'hoariva, ur strollad skrivañ danevelloù. Desket hor boa ur bern traoù a-fed stummañ un danevell, kavout an awen, skrivañ diwar un daolenn, pe santadurioù, skrivañ asambles. Graet hor boa poelladennoù a-hed ar sizhun ha war-lerc'h en doa pep hini produet un danevell ha diskouezet d'ar re all. Reoù a oa bet embannet e *Al Liamm*. An dra-se a ro lañs, a vroud d'ober un dra e brezhoneg, da implijout hor barregezh war ar yezh evit kas ur raktres war-raok. Degas a ra fiziañs, emfiziañs hag ul liamm gant an dud o deus rannet ar mareoù-se ganeomp. Reoù en hon touez o deus skrivet (a-raok ha war-lerc'h) levrioù e brezhoneg. Anaoudegezh vat ivez hon eus evit an dud a-vicher : skrivagnerien, kelennerien, kanerien, kazetennerien, aktourien... a ro deomp eus o amzer evit kas ar brezhoneg war-raok met ivez sevenadur ha liammoù sokial.

### **Kemer perzh er vuhez a-stroll**

Ur skipailh tud a sikour er gegin abaoe un nebeud bloavezhioù e Kastellin. Ne vezont ket paeet. Stajidi int, o deus goulennet kemer perzh er staj digoust. Rentañ a reont servij er gegin en eskemm da gemer perzh er staj (war an eurvezhioù vak) digoust.

*Evit ar boued, e oa bet tud ar skol amañ (lise al labour-douar e Kastellin) o doa servijet deomp ar boued ar bloaz kentañ. Paeet e vezent hag ar servij a oa e galleg. Met al lezenn a zo bet cheñchet ha ne c'hellont ket mui, n'eo ket mui aotret. Neuze, savet hon eus ur servij gant un dek, daouzek bennak a dud a youl vat. C'hoant o deus da zont e KEAV met a-wechoù ne c'hellont ket paeañ neuze kinnig a reomp dezho labourat er gegin. Hag e giz-se pep tra zo e brezhoneg, neuze ur skipailh a zo, labouret e vez e brezhoneg penn-da-benn ganto. Ne vez ket fardet ar predoù ganeomp, met gant un embregerezh e Brest. Tommet e vez ar meuzioù nemetken amañ. A-raok e labouremp gant Vitalis, kudennoù a oa, neuze ar bloaz-mañ eo gant un embregerezh nevez E penn ar Bio. Kudennoù a zo ivez peogwir emaint o kregiñ met... N'haller ket kaout pep tra : boued bio, choaz ha prizioù izel, kementad... E-touez hor stajidi, a labour a youl vat, reoù a labour kalz evit ma'z afe endro pep tra.(tommañ, servij, skaotaj, naetaat, kenklañ...) Gallout a reont heuliañ un nebeud kentelioù, met pas pep tra.(GH)*

Un daolenn a vez er sal-debriñ evit goulenn gant ar stajidi lakaat o anv evit kemer perzh er servij ha naetaat ar sal goude ar pred (ur skipailh bihan bep tro). Goulennet e vez ivez tud evit

naetaat ar privezioù, an trepasioù e-kerzh ar sizhun. Kemer perzh ha merañ ar vuhez a-stroll a zo ul lodenn eus an aergelc'h ivez. D'ar Sadorn vintin ivez pe e fin an dibenn-sizhun evit ur staj berroc'h e vez sañset ar berzhidi naetaat al lec'h. Labour vez etre ar privezioù, ar salioù-dour, an trepasioù hag an derezioù. Mont a ra war-raok an aozadur met n'eo ket aes lakaat an holl da gemer perzh en un doare efedus. Dont a ra eus pell, an doare rannañ al labourioù : Ronan Huon a rae al listri er bloavezhioù kentañ<sup>14</sup> !

Ne vez ket plaen bepred ar vuhez a-stroll. Gwechall e oa anat e oa diaes kousket pa veze ar c'hamp e Skaer pe a-raok. Da vare Ronan Huon, e klemme eus ar boan en doa da gousket, abalamour d'an dud o tremen, d'an trouz, ha da drubuilhoù a bep seurt. Kustum eo bet ivez an dud d'en em gavout evit riboulat hag evañ banneoù gant mignoned hag an nozvezhioù a echu a-wechoù en trouz e-touez ar stajidi a vez dija o kousket.

*Nora : Ar pezh a zisplij din e KEAV ? Tud n'int ket doujus ouzh kousk ar re all.*

*Camille : Distreiñ bep bloaz ne oa ket aes ha gant ar vugale, hag a oa bihan, ne oa ket aes. Al lec'h, e Skaer ne oa ket mat evit dont gant reoù bihan.*

## **Hag ar vugale ?**

Ur poent heverk eus KEAV koulskoude eo e c'heller dont gant ar vugale. Ur staj evit ar familhoù eo. Er bloavezhioù kentañ e oa dreist-holl tud dizimez. Tamm-ha-tamm int deuet da vezañ koupladoù hag int deuet en-dro gant o bugale. Degemeret e vez ar vugale etre pevar bloaz ha daouzek er greizenn dudi. Evit ar grennarded koshoc'h eo hervez an niver anezho. Adalek 17 vloaz e c'hellont bezañ animatourien. Neuze, evit kazi pep oad e vez ur c'hinnig. Deuet e oan-me meur a wech gant ma bugale. A-wechoù o doa kemeret perzh e strollad ar grennarded, a-wechoù en ur strollad evit a re « vras », a-wechoù e oant deuet gant kamaladed hag o doa savet traoù, gant un tamm sikour : videoioù da skouer.

E-touez an obererezhioù kinniget dezho er greizenn dudi e oa bet *land art* : savet o doa ur mandala dibad gant delioù, traezh, meinigoù ha dafar a-seurt. Meur a wech e oa bet kinniget d'ar re etre 10 ha 13 pe 14 vloaz mont war varc'h-houarn a-hed ar stêr Aon ha mont da gampiñ. Bep tro o doa prientet un tamm arvest a vez kinniget d'ar Gwener noz, e fin ar staj : pep strollad a ra ul lodenn eus un arvest : pezh c'hoari, kanaouenn. E fin ar staj, pep hini a c'hell diskouez un dra en deus desket ha kemer perzh en un obererezh hollek : farsus e vez, a-wechoù fromus, rannet e vez ur maread plijus e brezhoneg.

---

14 Youenn Olier, meneget gant Huon Gwenaël, *Al Liamm*, niv. 345, pp 62-79.

### 3 - Brezhoneg er familhoù

*Anna Ar Beg : N'eo ket gant ar skol e vo salvet ar yezh, n'eo ket a-walc'h. Kinniget hon eus brezhoneg er familhoù, e penn-kentañ e oa 5 pe 6 familh. Ha war-lerc'h hon eus ouzhpennet 2 dibenn-sizhun, unan en Diskar-Amzer hag egile en Nevez-Amzer, er C'hab, e Brasparts, e Karaez. Bez ez eus bet 60/80 den bep tro. War Enez Vazh ez eus bet muioc'h eget 100 den. Muioc'h a dud a oa un dra vat, evit reiñ c'hoant ha reiñ skouer d'ar familhoù ha d'ar vugale. Digoret e oa bet d'an dud divugel neuze. Kinniget e veze traoù evit ar familhoù, traoù evit an dud divugel ha bodet e vezent a-wechoù.*

*Gwen Huon : Savet hor boa ur greizenn dudi evit ar vugale. Met c'hoant hor boa da zegemer familhoù en un doare ispisial ha se oa koustus. Ar vugale a bae nebeutoc'h, met ezhomm ez eus plas evit degemer anezho. C'hoant hor boa da sevel un teul evit ar Redadeg. Savet hon eus un enklask neuze. An dra-se a zo bet graet gant Hugues Pentecouteau, a zo sokologour, en deus savet ur studiadenn e brezhoneg e Skol Veur Roazhon 2, ha Katell Chantreau. Savet e oa bet diwar enrolladennoù tud o doa bugale o doa c'hoant da zesevel e brezhoneg, war ar mod kudennoù ha diskoulmoù, ha klask kompren perak a-wechoù e oa bet c'hwitet, da lavaret eo e oa tremenet ar familh eus ar brezhoneg d'ar galleg.*

Sophie Pochet he doa kroget d'ober war-dro « Brezhoneg er familhoù » e 2012. Kinnig a ra degemer ar familhoù, da lavaret eo ur bugel pe meur a hini gant e dud, pe unan anezho da nebeutañ, evit ur sizhunvezh asambles, eus ar mintin betek an noz, war lusk ar c'hentelioù. Kroget e oa bet an obererezh-se e KEAV un tammig en a-raok. Met d'ar mare-se e oa ret kavout un den all evit reiñ lusk d'ar strollad.

*Sophie Pochet : Goulennet e oa bet ganin, peogwir e oan o tesevel ma bugale e brezhoneg. War-lerc'h hon eus graet un taol-esaer gant an dud divugel ivez, evit leuniañ ar staj.*

*E penn-kentañ e oa bet un enklask graet gant Hugues Pentecouteau ha Katell Chantreau diwar-benn treuzkas ar yezh er familhoù hag ul labour em boa graet-me evit ar Skol Veur.*

*Ar pezh a blijed din a oa sikour an dud da grouiñ liammoù e brezhoneg en o familh.*

*Bodet e vez asambles ar vugale hag o zud hag e vez kinniget dezho ober traoù :*

*- rimadelloù, kanaouennoù, dañsoù, istorioù*

*- da eil c'hoarioù er-maez*

*- labour-dorn pe keginad hag er-maez adarre : pourmen, c'hoarioù, amzer war an draezhenn, pourmen a-hed ar stêr...*



*Un amzer a zo evit pleustriñ evit abadenn ar Gwener noz. Ur paotr eus Divskouarn a zo ganeomp. Bez ez eus un nebeud koupladoù, o live yezh a zo liesseurt. Ur c'houplad a zeu eus Polonia, ar gwaz a zo Breizhad. Ar vugale er strollad bremañ, a zo etre 8 miz ha 10 vloaz.*

*Dieuboc'h eo spered an dud pa gemeront perzh e « brezhoneg er familhoù » peogwir n'eus ket da geginañ, d'ober ar pourvezioù, da walc'hiñ ar*

*vugale. Amzer o deus evit ober traoù all. Evidomp eo un tamm evel « ur vilajenn evit desevel ur bugel ».*

*Harpañ a reomp ar gerent war implij ar brezhoneg, ha gant ar skouer, ar vugale a implij muioc'h mui a vrezhoneg.*

Ur strollad « brezhoneg er familhoù » a vez neuze da vare staj an hañv ha daou zibenn-sizhun da vareoù all eus ar bloaz.

*Gwen Huon : C'hoant hor boa d'ober ur sizhun ispisial ur wech ar bloaz ha war-lerc'h un dibenn sizhun hir. Sikouret omp bet gant Ti ar Vro Kemper. Deuet ez eus bet kanerien, bep tro e oa un tem (an dour, ar stered). Un dibenn-sizhun hor boa c'hoant da ober war Enez Vazh met pet den a vije ? 40 ? 50 ? Diaes e oa gouzout en a-raok, neuze hon eus divizet da zigeriñ da tout an dud, d'an dud divugel ivez, e giz-se ez eus muioc'h a dud. Traoù a zo bet aozet evit ar familhoù ha traoù evit ar re all. 100 den ha muioc'h a zo bet. Obererezhioù a zo bet : dizoleiñ ar bezhin, istorioù, kejañ ouzh peizanted eus ar vro. Mareoù holl asambles a oa ivez gant ur quizz, kan...*

Ar raktres-se a ziskouez mat a-walc'h petra eo raktres KEAV : ober eus ar brezhoneg ur yezh pemdez, bezañ gouest da implijout ar brezhoneg e pep degouezh ; adsevel liammoù e brezhoneg er familhoù, ar pezh a zo bet paouezet trumm abaoe daou pe tri rummad tud e Breizh hag adsevel ur gumuniezh yezh diskaret war an dro. Ouzhpenn da gemmoù an ekonomiezh a zo bet a-bouez bras<sup>15</sup>, ar youl politikel da ziverkañ ar brezhoneg he deus troc'het ar familhoù. Mezh a zo bet graet d'ar vugale a gomze o yezh er skol ha d'o zud. Ar re gozh ne gredent ket mui komz o yezh d'o bugale, pe bugale vihan, neuze a oa didalvoudekaet o gouiziegezh. Al liamm a rank bezañ etre mamm ha bugel en ur ganañ kanaouennoù, kontañ istorioù, lavaret gerioù c'hwek, a zo bet troc'het. Troc'het ivez an treuzkas etre tad ha bugale : deskiñ ur vicher, teknikoù, anavezout an endro, an natur, ar c'houlzioù-amzer. Sevenadur ur bobl a zo bet diskaret e giz-se. Taget eo bet al liamm a stag ar vugale ouzh ar sevenadur dre garantez evit o zud hag o familh. Broudet gant redioù an ekonomiezh ez ae kuit ar Vretoned eus o bro evit kavout labour e kêr. Broudet gant ar Stad e tilezent o yezh war an dro. Savet

---

15 Malo Morvan, *Définir la langue bretonne*, Paris, Université Paris Descartes, 2017, p 714.

e oa bet ivez ur rouedad hentoù-houarn evit kenderc'hel da greizennañ ar galloud hag an ekonomiezh e Pariz. Politikel eo ivez ar c'hemmoù ekonomikel.

Ur raktres a-bouez eo neuze sikour an tadoù ha mammoù da adkavout hent ur yezh hag ur sevenadur ha kinnig anezho dre gaer ha n'eo ket dre heg.

*Laouen on o tont evit brezhoneg er familhoù, eme Fanny, peogwir e welan tud o deus memes kudennoù ha me evit desevel ar vugale e brezhoneg. N'eo ket gwir vakañsoù, pa m'eus pevar bugel hag ur babig en o zouez, met reiñ a ra kalon da genderc'hel.*

Mat eo gallout eskemm gant tadoù ha mammoù all diwar-benn desevel ar vugale e brezhoneg. Ar pezh a lavar Sophie ivez :

*Sikour a reomp an dud evit n'en em santfent ket o-unan o klask desevel o bugale e brezhoneg. Me oa bet en ur strollad kerent yaouank gant Divskouarn hag hor boa kroget en ur eskemm diwar-benn sujedoù evel : reiñ bronn d'ar babigoù, al lienn adimplij, ar skerb dougen ha temoù a-seurt.*

En dibenn-sizhun a zo bet e Karaez ar bloaz-mañ, em eus gallet gwelout penaos e ya en-dro. Ar program a ginnig obererezhioù en a-raok evit desachañ ar familhoù hag ar vugale. An dud gour divugel a c'hell dont ha kemer perzh e obererezhioù disheñvel. Bodet e vez ar strolladoù evit ur sonadeg diouzh noz, gweladenn ur mirdi, ar predoù, an nozvezh. 150 den o deus kemeret perzh (tro 50 bugel ha 100 den gour). N'eus kentel ebet war un dibenn-sizhun met ur weladenn, ur bourmenadenn e kêr Karaez pe el lanneier, evit an dud divugel pa ra ar familhoù traoù all : labour dorn, c'hoarioù.

*Aze em eus graet ur raktres : desevel ma bugale e brezhoneg ha krouiñ un endro, ur rouedad tud evit komz brezhoneg tro-dro d'am familh. C'hoant am eus bet e vefe ur yezh evito, ha mont pelloc'h evit ar skol nemetken.(...)A-bouez eo diskouez ez eus un doare da vevañ e brezhoneg e-maez ar skol, donoc'h evit ar skol. An dra-se : komz e brezhoneg er familh, krouiñ un endro e brezhoneg evit ar vugale a zo ral, ral eo ar choaz-se am eus graet, met frouezhus eo. (Yann)*

Seblant a ra bezañ aesoc'h desevel bugale e brezhoneg bremañ eget a-raok, pa seller ouzh elfennoù evel ar c'hentelioù evit an dud gour, ar stummadurioù gant ur pal micherel war c'hwec'h miz, ar c'hampoù vakañsoù evit ar vugale, ar skolioù divyezhek, an dafar pedagogel a bep seurt embannet. Diskouez a ra an holl elfennoù-se ar brezhoneg war an takad publik, evel ar panneloù-hent ha seblant a ra reizhekaat ar fed desevel bugale e brezhoneg. Koulskoude, e chom an dra-se ur choaz ral, graet gant nebeut-tre a dud... Ha diaes. En un endro galleger tout, e vez bepred ar brezhoneg un eil yezh. Petra a vir ouzh an dud da zesevel o bugale e brezhoneg ? Menegiñ a ra Sophie Pochet un nebeud diaesterioù : al live yezh tizhet gant ar gerent, an diouer a souten a-berzh an endro. Choaz ar gerent a vo bepred goulennetaet gant an amezeien, ar familh, ar vignoned ha

neuze, skuizhus eo... Hag e c'heller douetañ. Emzalc'h ar priedoù a zo a-bouez ivez : pe e rann ar pried memes soñj ha barregezh war ar yezh hag e vo aesoc'h sevel ar raktres, pe n'eo ket brezhoneger hag e/he emzalc'h ouzh ar brezhoneg hag ouzh choaz egile/eben a zo pouezus-bras. Aesoc'h eo moarvat desevel ar vugale e brezhoneg pa vezer harpet er skol. Met n'eo ket ken simpl ha se : en ur skol divyezhek ne vez ket bepred pozitivel skeudenn ar rann brezhoneg, en ur skol holl droet war ar galleg. Er skolioù Diwan ivez, eo a-bouez sell an endro war ar brezhoneg. Komzet e vez galleg war ar porzh, alies (bepred?) peogwir eo yezh an endro ha riskl a zo e vefe sellet ouzh ar bugel a gomz brezhoneg, evel ur « plouk ».

*Ni oa lorc'hus eus ar fed komz brezhoneg. Setu perak e kavan trist gwelet bugale e Diwan o deus mezh o komz brezhoneg (pa'z eo bet graet plouked anezho gant bugale ar skol c'hall).(Nora)*

Dibar eo KEAV neuze e meur a geñver. Savet eo bet evel ur benveg stourm evit ar yezh. En eil lodenn emamp o vont da studiañ penaos ez a en-dro ar mennad.

## II – Hag ur benveg evit saveteiñ ar brezhoneg e vefe ?

Diskouez a ra Hugues Pentecouteau en e dezenn *Devenir bretonnant* ez eus tri abeg pennañ evit deskiñ brezhoneg hag a zo kenderc'hel ul liamm gant ar rummadoù a-raok, treuzfurmiñ an den a zesk, peotramant implijout evit ur vicher, evel un ostilh sokial talvoudus<sup>16</sup>. Bez' e c'hellomp neuze en em c'houlenn petra eo pal KEAV. Saveteiñ ar brezhoneg ? Sevel ur bed bihan disheñvel ha zoken kontrol d'ar sevenadur pennañ, ur patrom iskulturel pe enepkulturel ? Ur patrom enepkulturel a c'hell bezañ termenet evel savet evit enebiñ ouzh ar sevenadur pennañ. Met ne vir ket outañ da vezañ ul lodenn eus ar sevenadur pennañ, ur skeudenn kontrol, distummet marteze, ur c'hleuz e-barzh ar pezh a zo leun, ur melezour. Pal KEAV n'eo ket dre ret memes hini ha pal ar berzhidi unan hag unan. Paliou pep hini a c'hell bezañ mui pe vui disheñvel. El lodenn-mañ emañ e sell da dreiñ tro-dro d'ar pezh am eus sellet outañ el lodenn gentañ, en un doare disheñvel : da lavaret eo goulennata ar pezh a zo talvoudus evit ar brezhoneg. Petra zegas KEAV a-fed yezh ?

### 1 - Un utopiezh ?

#### Un enezenn vrezhonek

Ur bed bihan a vrezhonegerien lec'h m'emañ ar brezhoneg yezh nemeti a zo un utopiezh er bed a-vremañ. Ne c'hell ket bezañ. En ur mod, n'eo ket ar bed gwir, n'eo ket ar vuhez gwir. Ur benveg, ur strategiezh eo kentoc'h. Petra a c'houlenn ar stourmerien evit ar brezhoneg ? Ne c'houlennont ket ar plas pennañ evit o yezh, met ur plas. An diforc'h etre ur yezh minorelaet hag ur yezh pennañ (gant ar sevenadur a ya ganto) eo ne c'houlenn ar yezh minorelaet nemet bezañ. Ne dalv ket eo gwelloc'h, talvoudusoc'h, bravoc'h, sklaeroc'h evit ar yezhoù all, met e tellez nemet ur plas<sup>17</sup>. Pezh zo, e rank ur yezh bezañ talvoudus evit kaout ur plas. Rankout a ra bezañ yezh nemeti e lec'h-mañ lec'h pe da vareoù zo. Mod-all, e vo komzet ar yezh voutin d'an holl, a vo moarvat ar galleg, bep tro ma'z eus un den n'eo ket brezhoneger. N'eus plas ebet ken evit ar yezh minorelaet. Ret e oa enebiñ evit reiñ plas d'ar brezhoneg neuze ha feal e chom spered KEAV da hini e ziazezourien :

*Krouet ha renet eo bet ar c'hamp gant tud a oa dezho ur pal : difenn sevenadur Breizh e pep keñver, diorren ar brezhoneg gant spered Gwalarn, da lavaret eo lakaat ar yezh da vezañ war an hevelep live hag ar yezhoù all ; ober eus ar brezhoneg ur benveg stourm he n'eo ket ur benveg studi*

16 Hugues Pentecouteau, *Devenir bretonnant*, Rennes, Presses Universitaires de Rennes, 2002, p 61.

17 « Introduction ». PNUD, 2004. Programme des Nations Unies pour le développement. *Rapport sur le développement humain : la liberté culturelle dans un monde diversifié*. Paris : Économica, p 9.

*hepken.(...) Krouet ha renet eo bet gant tud a selle war-du an dazont na n'eo ket war-du an amzer dremenet.*<sup>18</sup>

KEAV n'eo ket ur bed en e-unan neuze, met a c'hell bezañ un ostilh evit brezhonekaat (un tammig) ar gevredigezh, reiñ barregezhioù d'an dud da implijout ar brezhoneg e pep degouezh eus ar vuhez. Ar barregezhioù-se a c'hell bezañ implijet e lec'h all.

*Ha nann, nann, nann ! An divyezhegezh n'eo ket ar pal ! Ober gant ar brezhoneg an hini eo. Bezañ gouest da implijout ar brezhoneg e pep degouezh eus ar vuhez. (AAB)*

Abae an deroù ez eus bet eus ar raktres-se :

*Pal ar c'hamp a vefe'ta an dra mallusañ d'ober : n'eo ket kenteliañ met boazañ ar re yaouank da gomz o yezh, a lavare Vefa De Bellaing e 1947. Hag evit difenn ar raktres-se e oa ret kaout ur feiz divrall e dazont ar brezhoneg*<sup>19</sup>.

Savpoentoù disheñvel a c'hell bezañ diwar-benn o fal e-touez an dud a gemer perzh e KEAV. Kaozeal brezhoneg e-pad ar staj a zo reolenn ar c'hamp. Met hervez an dud, e c'hell bezañ ar pal diorren barregezhioù an dud e brezhoneg pe sikour da sevel ur gevredigezh a vefe digoroc'h war ar yezhoù bihan, neuze ur gevredigezh divyezhek.

*KEAV n'eo ket ur bed unyezhek, ar soubidigezh e brezhoneg a zo un doare met n'eo ket ar pal. Ar soubidigezh a zo ret evit kempouezañ an endro galleger tro-dro. Ul lec'h pleustriñ eo. Ar c'hampoù divyezhek n'int ket efedus a-walc'h evit komz. Evidon, an divyezhegezh eo ar pal. Dav vo deskiñ, stummañ an dud. Kavout a rafen mat e vefe kinniget klasoù divyezhek evit an holl evel e Euskal Herria. (Emmanuel)*

*Ul lec'h evit sevel ur rouedad hag un endro brezhoneger eo bet evidon. Gallet em eus kaout mignoned vras hag eskemm ganto diwar-benn raktresoù tro-dro d'ar brezhoneg.(...) An dud o deus mennozhioù disheñvel, evel en ur familh : diwar-benn an deskadurezh, ar relijion, tu kleiz, tu dehoù.... Liesseurt eo ar rouedad. Un tammig evel al lise Diwan eo. Goude bezañ bet er skolioù hag er skolajoù e pep korn Breizh, en em gav an dud el lise. Memestra eo, KEAV eo kalon ar steredenn. Gouzout a rez : relijio a zeu eus religare a zo krouiñ ul liamm, evel en ur familh.(Yann)*

Evit Yann, eo al liammoù etre an dud hag a vez an dra bouezusañ : ur rouedad tud troet war ar brezhoneg ha gouest da sevel raktresoù evit ar yezh. Ur familh, ur gumuniezh troet war ar

---

18 Ar Beg Anna, *KEAV, ar bloavezhioù kentañ*, Hor Yezh, Roazhon, 1988, p 224.

19 Anna Ar Beg, *KEAV, ar bloavezhioù kentañ*, Roazhon, Hor Yezh, 1988, p 39.

brezhoneg eo. Ur benveg eo evit stummañ an dud ivez. Ar barregezhioù prenet e KEAV a c'hell bezañ talvoudekaet er vuhez micherel, er skol, gant ar vugale.

*Kalz a zanvez-skolaerien hag a zanvez-kelennerien a zeu bremañ peogwir e rankont ober evit kaout ur skoazell digant ar Rannvro. N'hon eus ni kevrad ebet, n'eo ket ni a resev an arc'hant. Ret eo deomp just ober ur facturenn dezho. Ma ne zeu ket an dud n'o deus ket ar skoazell. An dra-se a zo evit ar studieren e MI e Kelenn, e ESPE sant-Brieg, en IFSEC e Brest hag e Roazhon 2. Aon hon eus bet e penn-kentañ e plantfent ur spered fall e-barzh ar staj peogwir e oant rediet da zont, met n'eo ket c'hoarvezet. Tud plijus a zo bet bepred ha n'eo ket bet cheñchet spered KEAV ganto. (AAB)*

## **Un emgav evit stourmerien**

*KEAV eo ur greizenn stummañ evit an deskadurezh, darempredet gant kelennerien ha skolaerien eus an tri rouedad : Diwan, ar prevez hag ar publik. An div sizhun staj a zo e penn-kentañ ar vakañsoù hañv, an dud all e-maez an deskadurezh o deus nebeut a vakañsoù. Un dibab don eo evit an dud a zeu e KEAV : bevañ gant ar yezh ha labourat eviti.(Yann)*

Un emouestl don e c'hell bezañ evit an dud-se a labour en deskadurezh. Tremen ul lodenn eus o vakañsoù oc'h en em stummañ war ar brezhoneg hag o kreñvaat liammoù gant tud a vicher evelto. Un emouestl etre e c'hell bezañ ivez evit tud o deus c'hoant da implijout ar brezhoneg en o micher. Donder o emouestl a zo hervez an dud. Ul lec'h evit sevel raktresoù hag eskemm diwar o fenn eo KEAV.

*Tud a bep seurt kornioù-bro am eus gwelet eno, a bep seurt rannyezhoù, oadoù, micherioù, tud a zo en em stummet war ur rannyezh hag a zo deuet da vezañ kelennerien brudet pe a-bouez war-lerc'h. Adalek 2000 em eus bet ar raktres sevel ur skolaj Diwan e Liger-Atlantel hag em eus brudet ar raktres-se e KEAV. Bet e oan bet 4 gwech o tifenn raktres ar skolaj en emvod meur Diwan ! Unan eus prezidanted Diwan en doa lavaret din, evit farsal, e vefe saveteet ar brezhoneg pa vije ur skolaj e Liger-Atlantel, evit lavaret ne vefe morse !(Yann)*

Dispar eo ul lec'h emvodañ e giz-se evit ar stourmerien war ar yezh pe ar sevenadur : kaout an dro da eskemm, da grouiñ, da vezañ anavezet, da gejañ gant tud « vrudet », skrivagenrien, aktourien, kanerien, kazetennerien... e meteier sevenadurel ar brezhoneg, da reiñ kalon evit ar stourm a gendalc'h a-hed ar bloaz, da vrudañ ur raktres... A-fetepañs-kaer eo dalc'het an aergelc'h

broudu-se :

*Bez' emañ KEAV ul lec'h evit en em gavout, eskemm menozioù e-pad un nebeud devezhioù, krouiñ darempredoù ha liammoù a vignoniezh.*<sup>20</sup>

Santout a reer an traoù en un doare disheñvel eno ha posubl eo e c'hellfe bezañ un arnodva evit raktresoù all evit ar brezhoneg. Pa oa bet ar wagenn sevenadurel er bloavezhioù 1970, e oa bet krouet strollad ar Vro Bagan hag ar skolioù Diwan diwar mennozhioù un nebeut tud o deus brudet o raktres. Bremañ ivez ez eus raktresoù evit ar brezhoneg : krouiñ skolioù nevez, magourioù, ar Redadeg, ar Prizioù evit dazont ar brezhoneg, an Ubapar, an DABU, darvoudoù sevenadurel, saloñsoù al levrioù, strolladoù sonerezh ha c'hoariva... Dav eo kaout lec'hioù evit krouiñ, evit eskemm, evit reiñ lañs. KEAV a zo unan eus ar plasoù-se.

## 2 - Hag ur ghetto bihan e vefe ?

### Ur bed bihan ha kloz

Gant war an dro 250 stajiad (ar vugale en o-zouez) eo KEAV ur gevredigezh vihan. Stadet em eus e oa tro 100 den gour en dibenn-sizhun *Brezhoneg er familhoù* e miz Du e Karaez hag hanterkant bugel. Kavet em eus ur rentañ-kont eus skol-hañv 1997 e-barzh Al Liamm hag a zisplege penaos e oa an dasparzh eus an dud d'ar c'houlz-se er skol Joliot-Curie e Skaer, gant redioù start war an niver a dud. Etre 120 ha 130 den a oa ouzh taol bemdez : 91 stajiad er sihunvezh kentañ, 88 en eil sizhun, 11 bugel er c'hentañ sizhunvezh, ha 16 en eil, 24 kelenner evit ober war o zro. 34% eus ar stajidi a oa chomet e-pad an div sizhunvezh, 60% eus ar gelennerien, da lavaret eo 45 stajiad, 4 bugel, 14 kelenner. E 1997 e oa bet nac'het degemer 50 den, dre ziuver a blas<sup>21</sup>.

Ur bed kloz eo ivez, a seblant bezañ serret warnañ e-unan. Merzet em boa da skouer, da vare ar 14 a viz Gouere, eo al lec'h nemetañ (pe dost) lec'h ma c'heller dianavezout ez eo ar Fest Broadel. Memestra e oa da vare Halloween pe an Hollsent. Bet e oan e dibenn-sizhun KEAV d'ar c'hentañ a viz Du e Karaez evit ar familhoù ha ne oa ket implijet temoù Halloween pe an Hollsent, na meneget an anvioù zoken en degouezh. Kinniget e oa bet da vare staj miz Gouere mont e-maez ar c'hamp evit an droveni e Lokorn pe mont war an draezhenn. Ar re a oa gant « Brezhoneg er familhoù » o doa emgav war an draezhenn met evit an dud gour all e oa bet roet an titouroù e mod-se : « evit ar re a zo kristen, gall a reont mont d'an droveni ». Seblant a rae bezañ ur merk, ur gleizhenn, sin un identelezh negativel. Bez e oa bet tud o vont di, koulskoude, un doare farsadenn e oa ivez emichañs, met a c'hell bezañ kemeret evel goaperezh. Mont d'ur pardon, pe d'un droveni, a

<sup>20</sup> Anna Ar Beg, *KEAV, ar bloavezhioù kentañ*, Roazhon, Hor Yezh, 1988, p 226.

<sup>21</sup> Gwenaél Huon, *Al Liamm* niv. 308/309, 1998, pp 440-444.

c'hell bezañ evel un darvoud sevenadurel. N'eus ket ezhomm da vezañ kristen. Mont a rae an dud evit ar blijadur da vale... N'eo ket kloz da vat ar c'hamp, en un doare fizikel. Chom a ra digor e-pad an deiz. C'hwitañ war ar c'hentelioù a c'heller ha mont da bourmen pe ober prenadennou e ti Leclerc. C'hoarvezet e oa bet, war a seblant, en amzer dremenet, er bloavezhioù 1960 da skouer, pa veze ar re yaouank oc'h enebañ ouzh ur rummad koshoc'h. Mont a raent da gafeta ha da c'hallegañ maez ar c'hamp hag e implijent ar c'hamp e-giz un ostaleri<sup>22</sup> evit debriñ ha kousket. Met ur bed bihan distag eo memestra KEAV, disheñvel eus ar bed tro-dro. Mont a reer d'an draezhenn pe da gaozeal gant tud ar vro met e-barzh framm KEAV, neuze, n'eo ket er-maez da vat. Ul lec'h « hud » eo, hervez meur a desteni, peogwir e santer eno an traoù en un doare disheñvel. Ur bed all a zo, kuzhet eo a-dreñv pe e-barzh ar bed-mañ.

*Ya, ur bed bihan eo. Muioc'h a lec'hioù e giz-se a vefe dispar. Mat e vefe ma hor befe unan e Naoned. Ur bed kenstur eo, ha ret eo adsplujañ e-barzh ar bed « normal » war-lerc'h. Marteze eo ar memes tra e kampoù all, yoga, pe sonerezh... (Emmanuel)*

*N'eus riskl ebet, pa weler stad ar galleg er gevredigezh, e c'hellfe bezañ ur ghetto. N'eus riskl ebet evit ar vugale, emaint o vont da zeskiñ galleg. (Nora)*

Ur bed bihan eo gant tud a zo a-du war traoù zo, pas war pep tra. Gallout a reont dont gant o mennozhioù politikel, ma ne reont ket bruderezh evito. Emaint memestra eus ar memes bed evit pezh a sell ouzh ar brezhoneg, pe enebañ ouzh ar sevenadur pennañ, hini Bro C'hall. Un doare enepkultur eo. Gallout a ra bezañ gwelet evel tud a zo « etrezomp-ni », *entre-soi*, evel m'eo bet merzet gant Hugues Pentecouteau, pe Malo Morvan<sup>23</sup>. Burutellet eo bet er memes doare ar skolioù Diwan : skolioù bihan, gant bugale ne oant ket niverus, hag a zeue eus meteier sokial damheñvel, hag a veze pe a vije bet desavet etrezo, en ur ghetto bihan. Gwir e c'hell bezañ betek ur serten poent. Kavet ez eus bet diskoulmoù, evel ar beajoù, en eil derez, ar pouez lakaet war ar yezhoù, ar raktresoù arzel... Burutellet e c'hell bezañ KEAV evit se ivez : bezañ ur bed bihan ha kloz. Met n'eo nemet ur mareig e buhez an dud. Digor eo KEAV war e endro ha war ar bed gant ar fed eo etrekeltiek hag ar c'hinnigoù liesseurt a-fed sevenadur, gouiziegezh... Unan eus perzhioù dibar KEAV eo ivez bezañ splujet d'ar poent-se en ur bed « kenstur ». Skrivet e oa bet e-barzh unan eus levrioù aour ar bloavezhioù kentañ, gant Ronan Huon :

*Hon hunvre a zo deuet da wir ha bep bloaz ez eo ur frealz hag un dudi klask krouiñ familh vras*

---

22 Gwenaél Huon, *Al Liamm* niv. 345, pp 62-79.

23 Malo Morvan, *Définir la langue bretonne*, Paris, Université Paris Descartes, 2017, p 766.



ar brezhoneg<sup>24</sup>.

## Ur familh ?

*Ur familh vras eo KEAV. Graet em eus mignoned vras eno. Ur spered broadel a zo. Sur a-walc'h ez peus bet ar santimant-se ivez, ur wech distroet d'ar vuhez « normal », bezañ kollet en ur vro all. Evit kavout lec'h ar staj, dija, n'eo ket aes, un avañtur eo. (Yann)*

*Ya, ur bed bihan eo. Pa gomzomp brezhoneg e seblant serret d'an dud tro-dro, an dud a soñj dezho eo iskis. N'ouzon ket petra respont da se. Pa vez un den en ur strollad, unan nemetken na gomz brezhoneg, e vo komzet galleg gant an holl evitañ. (Camille)*

Gallout a reer bezañ lakaet diaes gant an dra-se : komz brezhoneg nemetken a seblant iskis, serret d'an dud a zo tro-dro, ma ne gomprenont ket, seblant a ra diseven. Ar Vretoned a zo tud re seven : goulenn a reont digarez evit komz o yezh.

*Evidomp n'eo ket seven komz brezhoneg pa vez unan ha ne gompren ket, met e kembraeg ne oa ket e giz-se. Pa vez unan en ur strollad na gomz ket ar yezh e vez ebarzhiet memestra, gant ur sell, pe un nebeud gerioù ha tremen a ra mat e giz-se. (Maiwenn)*

N'eo ket e giz-se avat evit ar c'hembraeg, hervez testeni Maiwenn. Hervez an darempred nerzh etre ar yezhoù hag an dud eo : ne vo ket memes emzalc'h gant ar gomzerien ma'z int sur eus o gwir da gomz yezh-mañ-yezh. Asuroc'h eo statud ar c'hembraeg e Kembre eget hini ar brezhoneg e Breizh. Hervez niver ha statud an dud eo ivez : ma vez ur strollad mignoned o komz eo mui pe vui ingal an holl, met un den gour e-barzh ur strollad tud yaouank, pe un tad pe ur vamm, en do ur statud disheñvel hag a lakay cheñch yezh aesoc'h moarvat. Lakaet diaes pe get, an dra-se a zo hervez emzalc'h an nann-vrezhonegerien tro-dro a -benn ar fin.

*Ma gwaz ne gomz ket brezhoneg met asantiñ a ra e vefe komzet en e gichen. Prezidant Skoazell ar skol (Diwan) eo, neuze dedennet eo gant ar brezhoneg, met ne fell ket dezhañ komz. Ma mamm, er c'hontrol, a oa an hini nemeti na gomze ket brezhoneg er familh, met kavout a rae reizh e komzfemp nemet galleg pa oa ganeomp. An emzalc'h a oa disheñvel. (Sophie)*

Divarc'het e c'heller bezañ ivez eus an diavaez, gant emzalc'h pe respontoù lod eus an emsaverien, hag a chom dall ouzh ar pezh a oa c'hoarvezet en Emsav da vare an Eil Brezel Bed.

---

24 Gwenaél Huon, *Al Liamm* niv. 345, pp 62-79.

Dall int ouzh emzalc'h disfizius Roparz Hemon, en doa labouret er radio e brezhoneg e Roazhon, dindan aotrouniezh an Alamaned etre 1940 ha 1944. Ezhomm a zo neuze sklaeraat : displegañ perak e vez « azeulet<sup>25</sup>» Roparz Hemon gant tud an Emsav (marteze eo mont pell memestra) : n'eo ket evit e obererezhioù e-keñver an Alamaned met evit e labour yezhoniour, skrivagner, hag ar pezh en deus graet evit saveteiñ ar yezh ha reiñ unvaniezh dezhi. E genlabour a zo bet implijet betek re evit dispriziañ an Emsav a-bezh. N'eo ket bet dalc'het kont gant an Emsav eus darvoudoù ar Brezel evit sklaeraat anezho ha klas kempenn an traoù, evel ur gouli kozh. Chom a ra amsklaer neuze ha bepred un abeg evit burutellat holl mennozhioù an Emsav hag ar yezh war un dro.<sup>26</sup>

Mennozhioù strizh a vez a-berzh lod eus tud an Emsav en deiz a hiziv a-fed politikerezh lod eus an emsaverien a c'hell chom stag ouzh o mennozh diwar-benn Breizh, bezañ Breizhad, un emzalc'h disfiz ouzh ar Stad C'hall, hep bezañ gouest da zisplegañ pe da eskemm diwar-benn-se gant tud n'int ket ali ganto. Lakaat a ra an dud all da vezañ diaes. Bezañ brogarour a-enep Bro-C'hall ne c'hell ket degas un ali pozitivel a-berzh ar muiañ-niver.

Chom a ra douetañs neuze : gwelet eus an diavaez e seblant iskis kenañ ul lec'h a seurt se, doare sektenn ma ne gomz an holl nemet brezhoneg ennañ. Arguzenniñ en tu all a c'haller ivez en ur lavaret da skouer eo relativel ar poent-se. Gwelet eus tu ar c'hallegerien eo souezhus. Met e pep lec'h er bed, ez eus lec'hioù unyezhek. Evit ar yezhoù bihan, eo ret krouiñ anezho, sevel ur framm espres-kaer. Etrebroadel eo ivez KEAV, etrekeltiek : bep bloaz e teu tud eus an estrenvro evit komz brezhoneg ha krouiñ liammoù tro-dro d'ar yezh. Digor eo neuze d'ar Gelted tramor ha da dud an estrenvro o deus c'hoant da vevañ e brezhoneg. Digor eo ivez d'an endro tost. Un testeni am eus bet diwar-benn kanañ ha dañsal war plasenn ar marc'had e Kastellin, en hañv tremenet. Memes doare eo gant ar fed mont da gaozeal gant tud ar vro : n'eo ket troc'het ar c'hamp eus e endro, nag eus annezidi ar vro. Testenioù kozh a zo eus festoù aozet gant tud ar vro abaoe ar c'hentañ kampoù<sup>27</sup>.

Bezañs, boud ar brezhoneg a ro da dañva d'ur sevenadur hag a ro tro da dizhout talvoudegezhioù hollvedel.

*Eleonore : Glad dizanvez an denezh eo. Un doare da zerc'hel ar pezh a zo a-bouez er vuhez, un ostilh brav ha barzhoniell eo ouzhpenn. An hêrezh a zo bet roet din a-benn ar fin : un hêrezh blijus a zegas buhez hag a zoug ac'hanon. Solutoc'h on abalamour d'ar brezhoneg, reiñ a ra nerzh d'am buhez.*

---

25 Hugues Pentecouteau, « Stratégies identitaires en Bretagne contemporaine », *Amnis* [En ligne], 2 | 2002, mis en ligne le 30 juin 2002, consulté le 11 décembre 2019. <http://journals.openedition.org/amnis/142> ; DOI : 10.4000/amnis.142

26 Ronan Le Coadig, « Le fruit défendu », *Cahiers internationaux de sociologie*, 2001, pp319-339

27 Anna Ar Beg, *KEAV er bloavezhioù kentañ*, Roazhon, Hor Yezh, 1988.

Emskiant ar vrezhonegerien, evel Eleonore, pe get, emaint o tifenn un doare ispisial da welout ar bed, liesseurtes ar sevenadurioù, a-enep un hollvedeladur unton a rafe d'an holl dud komz memes mod.

## **Hag hengounel eo KEAV ?**

Met hengounel eo KEAV ? Ma chom eno spered ar stourmerien gentañ e talv ivez eo chomet maez an amzer moarvat. Ur familh eo, marteze, met gant tud a bep seurt oajoù ha meteier o deus o soñj war ar bed. Petra eo bed ar brezhoneg'ta ? Un hengoun difiñv ha maez an amzer, un tammig koshaet gant Emsaverien neptu a-fed politikouriezh peogwir n'o deus ket fiziañs er strolladoù gall, pe kentoc'h tud yaouank engouestlet er stourmoù a-vremañ ?

*Anna Ar Beg : Ar spered n'eo ket cheñchet. Daou briñsip a zo : brezhoneg nemetken ha tud a youl vat. Un trede a zo ivez : gallet hon eus delc'her betek bremañ peogwir omp chomet distag eus ar strolladoù politikel.*

*Emmanuel : An dud a ra war-dro a ra ul liamm gant hengoun KEAV. Tud zo a rebech ar spered « hengounel » a zo, met se a blij din. Ar santimant hon eus da zaremprediñ bed ar vrezhonegerien, ar stourmerien gentañ. Chom a ra spered ar « gwim » e KEAV.*

Graet eo a-ratozh-kaer ha n'eo ket dre zegouezh :

*Anat eo o deus ur bern tud yaouank ha marteze koshoc'h dizoloet an Emsav dre ar c'hampoù. Dizoloet o deus labour dihehan ha leun a feiz an Emsaverien. Graet o deus anaoudegezh gant ar skrivagnerien vrudetañ an Emsav o kontañ o oberennoù dezho war-eeun a-wechoù. Ha kement-se en deus roet c'hoant da lod da genderc'hel da studiañ ar yezh, d'ober skol vrezhoneg d'o zro, d'ober bruderezh, da bremañ levrioù, da grouiñ kelaouennoù pe strolladoù tud yaouank<sup>28</sup>.*

Treuzet eo memestra gant spered an amzer. Hervez ur stajiadez all :

*Soazig : N'emañ ket KEAV ur bedig bihan disrannet eus ar gevredigezh. N'eo ket ur bed kloz. Sorc'henoù ha kudennoù an amzer hag ar gevredigezh a vez kavet e KEAV evel e lec'h all.*

*Youenn : Ar pezh a c'hell desachañ ar re yaouank war-zu ar brezhoneg eo klask un identelezh. Dedennet int neuze gant ar stourm evit an endro, evit ur bed reishoc'h, evit gwirioù ar merc'hed, ha n'eo ket gant kaozioù ar re gozh. Un troc'h a zo gant rummad ar re gozh.*

---

<sup>28</sup> Anna Ar Beg, *KEAV, ar bloavezhioù kentañ*, Roazhon, Hor Yezh, 1988, p 226.

Prederiet eo ar stajidi gant ar pezh a c'hoarvez tro-dro dezho ha ne blij ket dezho a-wechoù an doare da implijout ar brezhoneg evit politikerezh pe evit gwerzhañ traoù. Skeudenn ar brezhoneg a zo sanket er bed a-vremañ met gwelet anezhi liammet ouzh an embregerezhioù evit gwerzhañ a c'hell bezañ feukus.

*Soazig : Gouel Broadel ar brezhoneg n'eo nemet un darvoud kevalaour. Pedet e vez ar pennoù bras hag an embregerezhioù. Met n'eo ket se a gas an traoù war-raok evit ar brezhoneg.*

Dedennet gant ar stourmoù a-vremañ eo lod bras eus an dud a gemer perzh e KEAV. Gwir eo da nebeutañ evit ar re yaouankañ. Skol ar stourm e c'hell bezañ neuze, evit lod. Un diforc'h a zo memestra etre ar pezh a zo gortozet en a-raok gant ar berzhidi, ma teuont evit ar wech kentañ, hag ar wirionez.

Ur souezh e c'hell bezañ, betek ur serten poent :

*Ewen : Ur skeudenn am boa eus bed ar brezhoneg. Me grede e vefe tud gant mennozhioù heñvel e bed ar politikerezh. Met liesseurtoc'h e oa eget em dije soñjet. Boas on da zaremprediñ tud yaouank e bed ar brezhoneg, an holl a zo douget war-zu ar stourmoù sokial ha n'eo ket war ar yezh nemetken. E KEAV e oa marteze muioc'h a stourmerien evir ar yezh.*

Ur bedig a-gleiz hag ekologour neuze, pe skeudenn maez an amzer un Emsav a-politikel. Ur familh eo... Degemeret e vez an holl met n'int ket a-du war pep tra.

*Emmanuel : Bed ar vrezhonegerien gozh a zo marv da vat, echu eo gant ar rummad brezhonegerien a-vihanik, o deus desket war barlenn o mamm, hag a gomz brezhoneg o c'horn-vro. Ar re-se, forzh penaos, ne reont netra evit ar yezh. Mezh o deus zoken.*

Derc'hel a ra un hengoun neuze, ar spered n'eo ket cheñchet, seblant a ra memestra ar bed chomet a-sav, evel a-istribilh er-maez... E-pad ur sizhun, ne reder ket war-lerc'h arc'hant na labour, metro na tren... Chom a reer en ur bed bihan all, treuzet memestra gant goulennoù ha nec'hamantoù ar bed.

## **Ha peseurt yezh a vez komzet eno ?**

Hag ar yezh neuze, peseurt yezh a vez desket ha komzet ? Yezh ar vro, yezh an hendadoù, pe yezh ar vugale, brezhoneg « divlaz » Diwan ? N'eus respont anat ebet. Tud zo a lavar eo reizh e cheñchfe ar yezh, e vefe muioc'h yezh an dud yaouank, un tamm divlas ha plaen, evel Emmanuel ha

Yann.

*Emmanuel : Ar brezhoneg desket gant an dud bremañ, n'eo ket dre ret ur yezh paouroc'h. Ur yezh plaen, hep pouez-mouezh, ya, met ne vo ket paouroc'h evit se. Bev eo ar yezh, cheñch a raio ha reizh eo.*

Kavet e vez ivez e KEAV brezhonegerien a-vihanik. Tuilaj a zo bepred. Ur meskaj etre deskarded ha tud ampart eo. Ha tud zo a gomz brezhoneg ur c'horn-vro, saourusoc'h, blazusoc'h. Ur choaz eo evito, peotramant o deus desket e giz-se. Pinvidigezh a roer e giz-se d'ar yezh. Ur striv a vez ret ober e penn-kentañ evel evit mont da welout tud ar vro. Intent ne zeu ket diouzhtu, adalek ar gerioù kentañ. Met ur prof eo a-benn ar fin. Ar memes tabut a zo bet tro-dro da Roparz Hemon, just a-walc'h : unaniñ ar yezh skrivet, met betek pelec'h ? Bezañ aketus ouzh an disheñvelderioù, degemer anezho evel pinvidigezh, evel teñzor ar brezhoneg, met betek pelec'h ? Aze, n'eus ket a dabut. Graet e vez gant an dud evel m'emaint. Ur blijadur eo, da skouer, deskiñ sonioù ha gwerzioù gant o fouez-mouezh, o gerioù lec'hel, hep distummañ anezho evit ma pegfent ouzh ur « standard ». Klasket e vez e KEAV mont pelloc'h gant ar brezhoneg, neuze e vo degemeret ur yezh « standard » ma c'heller derc'hel ur gaozeadenn, met bepred ez eus tu da vont pelloc'h, da zeskiñ muioc'h, gwelloc'h, neuze pinvidikaat ar yezh, evit ar re o deus c'hoant.

## **Ha doareoù all a vefe ?**

Ha penaos ta krouiñ un aergelc'h ma c'hell diwan ar brezhoneg enni e mod-all ? Mennozhioù all a zo estreget KEAV ? Perak n'eus ket bet krouet ur c'hamp all, pe meur a hini ? Un nebeud perzhidi o deus mennozhioù pe raktresoù :

*Nora : Ret e vefe diorren ha digeriñ meur a GEAV e meur a lec'h. Da skouer em boa gwelet e Belfast e oa lec'hioù evel un davarn, ur preti, ur stal levrioù... lec'h ma veze degemeret an holl ha me ne gomzen ket Iwerzhoneg, met gouestlet memestra d'an Iwerzhoneg. Mod-all, bez zo un nebeud familhoù brezhonegerien a zo bet oc'h en em staliañ an eil e-kichen ar re all, ur seurt gaeltacht<sup>29</sup> ma fell dit.*

Ewen a lavare din e oa bet souezhet peogwir e oa bet lavaret dezhañ ne vefe marteze ket plas ken e staj KEAV, p'en doa lakaet e anv diwezhat a-walc'h. Soñjal a rae dezhañ : perak n'eus ket unan all ? Un drede sizhun ? Met un aozadur bras eo evit degemer 250 den e-pad ur sizhun, bod ha boued. Ezhomm zo eus ur skipailh tud a youl vat bras a-walc'h evit prientiñ, kavout ul lec'h, aozañ,

---

<sup>29</sup> Takad ma oa anavezet e oa an Iwerzhoneg ar yezh pennañ ennañ, e kornôg ar vro, en un doare ofisiel, gant Republik Iwerzhon.

buheziñ, kelenn, boueta...

*Ewen : Disheñvel eo e Yezhoù ha Sevenadur amañ e Sant-Ervlan. An holl implijidi a gomz brezhoneg, komzet e vez brezhoneg er greizenn met n'eo ket troc'het eus ar bed tro-dro. Galleger eo an endro. N'eo ket brezhoneg hepken neuze.*

Gouestlet eo ar greizenn Yezhoù ha Sevenadur da sevenadur Breizh. Savet eo bet evit reiñ bod da veur a gevredigezh troet war-zu ar brezhoneg : ur skolaj Diwan, ar gKDSK hag a zo ur vediaoueg troet war zanvez Breizh, kentelioù an noz, ar gevredigezh a ro kentelioù brezhoneg e Liger-Atlantel ha bremañ kevredigezhioù all evel ur skol Diwan, un magouri e brezhoneg, div radio, Skol an Emsav... Gouestlet eo da sevenadur Breizh ha d'ar brezhoneg met n'eo ket unyezhek. Diaesoc'h eo da zerc'hel ar mennad-se a-hed ar bloaz, eget war ur pemzektez. Degemeret e vez kalz tud dedennet tro-dro d'an obererezhioù... e galleg.

### 3 - Ha reizh eo ?

#### **Difennet eo komz galleg ?**

Ha reizh eo klozañ 250 den en ur skol evit lakaat anezho da gaozeal brezhoneg ha difenn outo komz galleg ? Ha « difennet » eo da vat ? Ar ger-se a zo bet meneget meur a wech en atersadennoù : n'on ket sur e tere d'an degouezh. Sur on e vez implijet galleg evit marc'hata, prientiñ ar staj, kaout ur gevrad evit bod pe boued. N'eo ket distag KEAV eus ar bed tro-dro ha ma'z eo ret ober gant ar galleg e vez graet, sur eo. Da vare ar staj-hañv, avat, e weler an disoc'h : ur c'hamp-hañv e brezhoneg hepken. Met, ma weler ur c'hoñversant dirak al lise e Kastellin o c'houlenn digor, pe un tremeniad o c'houlenn e hent, e vo komzet gantañ e galleg, ma c'houlenn ! N'eo ket difennet komz galleg, met un dae eo, hag ur c'hoari : sinet o deus an dud, asantet o deus, goulennet o deus zoken ! Klask a reont seveniñ ar c'hefridi kinniget er c'hoari ! A-wechoù ne vez ket aes peogwir e teu tud n'o deus ket ul live uhel e brezhoneg, peotramant familhoù n'int ket boas da vont e brezhoneg. N'eus kastiz ebet avat. Pep hini a ra eus e wellañ.

*Catherine : Ar wech kentañ e oan deuet e Skaer e oan e kentelioù an noz, e live 2. Diouzhtu em boa komprenet. Aes-tre e oa din kompren. Kompren a raen pep tra. Met evit komz e oa un afer all. Ha bremañ, bloavezhioù war-lerc'h e c'hellan lavaret em boa komzet e giz-se (chuchumuchu) e galleg d'an dud. Met en ur grediñ e komzen brezhoneg. Mesket e oa em fenn. Ne oan ket o c'hortoz e vefe ken diaes. Evel ur bugel daou vloaz e oan, ankeniet...*

*Nora : N'eus riskl ebet, pa weler stad ar galleg er gevredigezh e c'hellfe bezañ ur ghetto. N'eus riskl ebet evit ar vugale, emaint o vont da zeskiñ galleg. Arabat eo livañ gevier d'ar vugale. Gallout a reont gwelout petra eo stad ar brezhoneg er gevredigezh ha kaout c'hoant da gomz memestra. Marvet eo ar re gozh evel-just, met muioc'h a dud yaouank youlek a zo evit komz brezhoneg. Ganto emañ dazont ar brezhoneg, gant ar re yaouank o deus desket brezhoneg hag o deus c'hoant d'en em stummañ peogwir eo int o deus choazet ar brezhoneg, ar pezh n'eo ket gwir evit bugale Diwan pe an hentenoù divyezhek.*

Komz a ra Nora eus an diforc'h etre choaz bezañ e vakañsoù pe oc'h en em stummañ gant tud all o deus choazet da gomz brezhoneg hag bezañ er skolioù hep bezañ bet choazet. Ma vez diaes da vevañ ar soubidigezh war ar pemdez er skolioù, eo peogwir ne vez ket choazet. Ha dav vez ober ar striv bemdez, en ur c'henarroud (ar skol) a zo dija, dre natur, redius. Arabat ober ar c'hontrol eus ar pezh a oa bet graet en amzer dremenet ha pinijañ ar vugale peogwir ne gomzont ket brezhoneg. Ur gudenn moral eo : ar vugale n'int ket binviji evit ma chomfe bev ar brezhoneg. Kenderc'hel a ra Nora da arguzenniñ war an tu se :

*Nora : Arabat eo lavaret d'ar re yaouank eo ret komz brezhoneg evit saveteiñ ar yezh, bepred ! An dra-se n'eo ket yael tamm ebet. Arabat lakaat gwask war ar vugale, ne servij da netra. N'eo ket dezho da saveteiñ ar yezh. Evel-just, ar vugale n'int ket ur benveg evit saveteiñ ar yezh. Dazont ar brezhoneg a zo kentoc'h gant tud yaouank o deus choazet komz brezhoneg. Evit ar re a zo bet desavet e brezhoneg n'eus ket tu da c'houzout a-raok an oad gour hag-eñ e vo efedus pe get. Ha c'hoazh !*

Bugale Diwan n'o deus ket choazet mont d'ar skol e brezhoneg. Lakaat bec'h warno, lavaret dezho emaint o vont da saveteiñ ar yezh pe er c'hontrol e vo lazhet ar yezh ganto, me ne gomzont ket, n'eo ket yac'h ha n'eo ket efedus. Meneget eo gant Malo Morvan, en e dezenn, evel pouez ar vezh c'hoazh. Ne echuer morse bezañ kablus abalamour d'ar brezhoneg.

*(Pa gomzemp galleg etrezomp), hor boa droed da gaout ur gentel buhezegezh, ret e oa deomp stouañ hor penn pa veze lavaret deomp en un doare sirius e treuzvezfe ar yezh abalamour deomp pe e vefemp kiriek eus he marv ma kendalc'hfemp<sup>30</sup>.*

Artifisiel eo en ur mod peogwir e krou ur bedig kenstur lec'h m'eo cheñchet penn d'ar vazh : ar

---

30 Malo Morvan, *Définir la langue bretonne*, 2017, p vi préambule.

« Nous avons généralement le droit à une leçon de morale, il nous fallait alors baisser la tête en s'entendant dire gravement que la survie de la langue dépendait de nous, et que nous serions les responsables de sa mort si nous continuions. »

yezh nemeti, dre zibab, n'eo ket ar galleg. Ur framm eo, a ro un digarez da gomz brezhoneg lec'h ma ne vefe ket ken aes, ken frouezhus en ur mod all. Hag ur c'hoari e c'hell bezañ ivez war ken berr amzer. Un dae eo hag a zo asantet gant ar berzhidi : ober pep tra e brezhoneg.

## **Ha reishoc'h eo ar gevredigezh vihan-se krouet gant KEAV ?**

Marc'had-mat eo KEAV. Ar poent-se a zo bet merket din evel unan dibar ivez. 280 € ar sizhunvezh eus ar Sul noz betek ar Sadorn kreisteiz, bod ha boued enno. Ur priz a zo evit ar studieren hag an dud dilabour : 240 €. Hanter priz eo evit ar vugale dindan 15 vloaz.

Tud zo a gemer perzh ivez hep paeañ, diwar o goulenn. Labourat a reont er gegin, e brezhoneg, evit ar stajidi all. Kemer a reont perzh e obererezhioù zo met pas en holl (hervez ezhommoù ar gegin).

*Anna Ar Beg : Tud a youl vat eo tud ar gegin. Ne c'hellomp ket diskenn priz ar staj, neuze hon eus kinniget d'ar re a c'houlenn ganeomp dont, met o deus kudennoù evit paeañ, labourat evidomp. Ha klot a ra a peu pre. Il den a zo er gegin ha diouzh an ezhommoù e c'hellont kemer perzh ouzh ar c'hentelioù hag an obererezhioù all.*

*Gwen Huon : Evit ar boued, e oa bet tud ar skol amañ o doa servijet deomp ar bloaz kentañ. Paeet e vezent hag ar servij a oa e galleg. Met al lezenn a zo bet cheñchet ha ne c'hellont ket mui. Neuze savet hon eus ur servij gant un dek daouzek bennak a dud a youl vat. C'hoant o deus da zont e KEAV met a-wechoù ne c'hellont ket paeañ neuze kinnig a reomp dezho labourat er gegin. Hag e giz-se pep tra zo e brezhoneg, neuze ur skipailh a zo, labouret e vez e brezhoneg penn-da-benn ganto.*

Evel ar gelennerien pe an animatourien a ra war-dro ar vugale, e labour tud ar gegin a youl vat e-pad ar c'hamp. Goulenn a reont ha lod a zistro bep bloaz. N'eo ket memes labour met an holl a gemer perzh en un oberenn voutin.

*Gwen Huon : Reoù a labour kalz evit ma'z afe en-dro pep tra. Gallout a reont heuliañ un nebeud kentelioù, met pas pep tra.*

Koulskoude, ne c'hellont ket mouezhiañ en emvod meur, er c'hontrol d'ar gelennerien. Neuze, ne vez ket sellet ouzh o labour evel un emouestl ken don hag hini ar re a ro kentelioù, moarvat...



## Unvaniñ pe rannañ ar gevredigezh ?

Ha reizh eo ivez skignañ ur yezh a c'hell rannañ ar gevredigezh ? Rebechet e vez er mare-mañ ouzh ar skol katalan bezañ ur benveg broadelour ha skignañ ar mennozhioù a zizalc'hidigezh<sup>31</sup>. Goude renad Franco e oa bet divizet gant an holl strolladoù politikel reiñ emrenerezh d'ar pobloù tro-dro er c'hontrol eus ar pezh a oa bet graet da vare Franco. A-du e oa an holl strolladoù bras war ar poent-se. Ar skol dre soubidigezh a oa deuet da vezañ anavezet ha publik. Soñjet e oa bet evel ur benveg a unaniezh : e giz-se ne vije ket eus ur skol evit ar Gatalaniz, dispartiet eus ar skolioù kastilhan evit an dud a zeue eus rannvroioù all pe an enbroidi, pe an dud neptu. An holl a vije ebarzhiet er skol e Katalaneg. Ar memes skol a zo tamallet bremañ da grouiñ ar goulenn disparti, ken kreñv e c'hell bezañ pouez ar yezh war ar speredoù<sup>32</sup>. A-du gant an dizalc'hidigezh e vije an dud a zo bet er skol katalan padal ne vije ket ar re a zo bet e skolioù all. Met, ma'z eo bet hollek ar sistem skol-se, ne dalvez ket eo a-du gant an dizalc'hidigezh al lod brasañ eus ar re a zo bet er skol er vro, o deus o gwrizioù er vro ? Graet e vije bet al labour gant ar skol pe kentoc'h ar gevredigezh hollek, troet muioc'h muiañ war-zu ar mennad-se ? E Breizh n'eo ket e giz-se bepred. Ken bihan eo an niver a vugale a c'hell deskiñ brezhoneg, ken bihan an niver a dud gour a c'hell deskiñ hag o deus tro da implij, eo se an abeg da vezañ dispartiet kentoc'h. Ur merk a zisheñvelder eo, a c'hell bezañ gwelet en un doare negativel. Ha gwelet e vez en un doare negativel alies. En ur c'henarroud ken disheñvel, ne c'heller ket kaout memes goulenn. Ar skolioù divyezhek a ro tro d'un darn bihan eus ar vugale d'ober gant ar brezhoneg. Gant an dud gour avat, eo ur choaz a ra lod eus o identelezh. Pa vez rebechet ouzh Diwan sevel ar vugale en un etrezomp-ni (entre-soi), ar pezh a c'hell bezañ rebechet ouzh KEAV ivez, n'eo ket kement-se tud Diwan a c'houlenn met peogwir n'eus ket a ginnig heñvel en Deskadurezh Stad. Evit KEAV avat, degemer ar galleg a zo nac'hañ ur plas d'ar brezhoneg.

## 4 - Keñveriañ gant stajoù all

### Evit deskiñ ur yezh keltiek all

Lavaret em eus meur a wech e oa disheñvel KEAV eus ar stajoù all. Keñveriañ a c'heller ouzh an doareoù da zeskiñ yezhoù all evel Kembraeg pe Iwerzhoneg, yezhoù keltiek all. E spered KEAV

---

31 Sandrine Morel, « En Catalogne, la langue comme arme politique », *Le Monde*, 14 décembre 2019.

32 Christophe Barret, *La guerre de Catalogne*, Paris, Les éditions du Cerf, 2018, p 24.

hag a-du gant an aozourien kentañ, eo etrekeltiek KEAV, neuze a-viskoazh ez eus bet « kendirvi » d'ar Vretoned o kemer perzh. Ur c'henlabour a zo bet gant kelennerien pe studierien e Aberystwyth e bro Gembre. Ur rouedad mignoniezh a zo etre an daou du eus Mor Breizh. Pe e vefe gwir pe ul lodenn eus ur sevenadur « ijinet », n'eus forzh. Evit sevel an identelezh vreton, e c'helver istor ar Vretoned a oa deuet eus Bro Gembre ha Breizh Veur, da lavaret eo enezenn Preden, en un doare hollekoc'h, d'an Arvorig, 1500 vloaz zo. Gwrizioù boutin en deus an div yezh, ar brezhoneg gant ar c'hembraeg, evel m'eo bet diskouezet gant labourioù ar yezhourien<sup>33</sup>. Mil bloaz zo, ne oa nemet ur yezh keltiek komzet eus an daou du da Vor Breizh e Arvorig, Kembre ha Kerne Veur. Lod eus an dud dedennet gant ar brezhoneg neuze a c'hell bezañ dedennet ivez mui pe vui gant ar yezhoù keltiek all, « kenitervezed » d'ar brezhoneg.

Evit deskiñ kembraeg, ez eus meur a lec'h posubl : stajoù hir pe hiroc'h. Unan a oa e Llambed, hag a zo bet dilojet da Gerdiz. Reoù all a zo e Bangor, e Norzh bro Gembre, en Aberystwyth (ur gêr war an aod e kreiz ar vro, gant ur Skol Veur), e Nant Gwrtheyrn. N'eo ket keñveriaabl gant KEAV peogwir int holl dalc'het gant ensavadurioù deskadurezh ha n'eo ket gant tud a youl vat. An holl, war a seblant, a zegemer an deraouidi, ar pezh a dalvez n'eus hini ebet e soubidigezh penn-da-benn. Ker eo ivez ouzhpennañ d'ar c'hentelioù bod ha boued hag a zo koustus pa n'eus ket un aozadur gant tud a youl vat evel e KEAV. Padout a ra ar staj e Kerdiz c'hwec'h sizhun ! Efedus eo neuze sur a-walc'h, met n'eo ket evel KEAV. E bro Gembre, a-benn ar fin, eo anavezet ar yezh, neuze ensavadurioù publik pe parapublik a sav an hentennoù deskiñ. Unan eus an ensavadurioù evit deskiñ kembraeg, *Say something in Welsh*, a ginnig *Bootcamps*, un doare da vont pelloc'h buan gant ar yezh dre stajoù ur sizhun e kembraeg nemetken. N'eus nemet 10 den en ur strollad, ne vez ket roet kentelioù. Ar priz a zo 350 *pounds*, da lavaret eo 410 €, hep ar boued evit ur sizhun.

Memes tra eo evit deskiñ Iwerzhoneg en ur *Gaeltacht* : pinvidik tre eo ar program, kentelioù pe doareoù a bep seurt a zo evit deskiñ, met ker eo peogwir e vez kinniget ar stajoù gant ensavadurioù a vicher : 292 € ar sizhun hep bod na boued. Ar pezh a zo dedennus ivez eo e kinnigont splann war o lec'hienn o deus c'hoant da vrudañ o sevenadur : glad naturel, sonerezh, endro, darempredoù gant an dud a-orin. Ur bajenn degemer e galleg a zo zoken<sup>34</sup> ! Ur *summer school* eo, ur skol-hañv, da lavaret eo hanter studi hanter dudi evel e spered KEAV, a oa bet levezonet just a-walc'h gant seurt raktresoù e penn-kentañ. Choaz a zo etre meur a live, meur a zoare da ober. Kinniget e vez sikour evit kavout bod ha boued, met n'eo kontet e-barzh priz ar staj. Evel e Kembre, eo ensavadurel pep tra. Liammet eo ouzh ar gouarnamant pe gouarnamant ar *county*, ar rannvro.

---

33 Hervé Abalain, *Histoire des langues celtiques*, Paris, Gisserot, 1998.

34 Accessible à [Oideas-gael.com/fr/](http://Oideas-gael.com/fr/), consulté le 12 avril 2020.

## Evit deskiñ brezhoneg

Evit deskiñ brezhoneg, e c'heller keñveriañ ivez gant doareoù all. A-bouez eo kaout meur a ginnig, gallout deskiñ e doareoù disheñvel. N'eo ket gwelloc'h KEAV, met degas a ra traoù ouzhpenn : an unyezhegezh, pe ar soubidigezh, degemer ar familhoù, digor ar c'hamp war an diavaez, kinnig ur vuhez a-stroll don a-walc'h, pep tra graet gant tud a-youl-vat, da lavaret eo evit ur priz izel.

Evit ar stajoù hañv : ur staj e Studi ha Dudi e Plijidi eus al Lun betek ar Gwener, gant bod ha boued, a zo 350 €, 250 € hep pred noz na bod. Ur staj gant Skol an Emsav a zo 350 € met un distaol a c'hell bezañ. Staj ar Falz a zo 260 € priz leun. Un diforc'h a zo pa vez tud a youl vat o kelenn, peotramant tud a-vicher.

Darempredet em eus ivez, da skouer, Kentelioù an Noz, e Naoned, ur gevredigezh a-gozh, he deus lidet he 30 vloaz e 2015, hag a ro kentelioù e pep lec'h e Liger-Atlantel. Kentelioù war pevar live a zo hag obererezhioù ouzhpenn a vez kinniget. N'eo ket a-youl-vat penn-da-benn ar gelennerien, ur gopr o deus. Obererezhioù ouzhpenn a vez kinniget gant ar gevredigezh, hag an obererezhioù liesseurt a zo digor d'an holl izili, da lavaret eo, e vez mesket al liveoù ha ne vez ket graet an obererezhioù e brezhoneg penn-da-benn. Stajoù un devezh, un dibenn-sizhun pe ur sizhunvezh a vez kinniget, evel e Studi ha Dudi e Plijidi, pe e Roudour. Roudour a ginnig ivez a bep seurt traoù evit deskiñ brezhoneg : stajoù c'hwec'h miz, kentelioù noz ha stajoù ur sizhunvezh. En holl stajoù brezhoneg em boa heuliet (Roudour, Studi ha Dudi, Kentelioù an Noz) e veze dreist-holl labouret evit deskiñ. N'eus nemet e KEAV e vez pouezet kement war ar pleustriñ hag e vez graet pep tra e brezhoneg. Diazev ar staj eo. Chom a ra dibar evit se.

Tu zo ivez da zeskiñ brezhoneg, gant ur pal micherel, e c'hwec'h miz, leun-amzer gant yalc'hadoù a-berzh Rannvro Breizh. Ar pezh a ra an dud deuet e Skol an Emsav e Sant-Ervlan, pe e Roazhon. Un daouzek bennak a stajidi a labour e-pad 6 miz, 30 eurvezh bep sizhun, o teskiñ brezhoneg. Oberiant-kenañ eo an hentenoù, diazezet war ar gomz hag eñvorenn ar jestroù, met n'int ket unyezhek, ne vez ket desket dre soubidigezh. E galleg e vez staliet reolennoù ar c'hlas da skouer. Diouzhtu pa vez krouet ar strollad, e vez ret lakaat e plas reolennoù ar vuhez a-stroll ha n'o dez ket an deraouidi ar binvioù yezh evit hen ober e brezhoneg. Ker eo ar stummadurioù-se (tro 4000 €) ha yalc'hadoù a vez evit ma c'hellfe an dud dilabour o heuliañ. Kelennerien a-vicher eo ar gelennerien, gopridi dindan Skol an Emsav. E Stumdi e vez kinniget memes doare kelenn, gant ur stummadur hir, c'hwec'h miz evit an deraouidi, hag ur stummadur ouzhpenn, evit donaat hag ur pal

michereel arbennikoc'h : war-zu ar vugale vihan da skouer. Yalc'hadoù ar Rannvro a c'heller kaout evit heuliañ ar stummadurioù-se. E meur a lec'h ez eus tu d'en em stummañ e giz-se.

Ar c'hevredigezhioù am eus meneget aze (Skol an Emsav ha Kentelioù an Noz dresit-holl peogwir e anavezan anezho ez-personel) a resev arc'hant publik, ar pezh a zo mat evit arc'hantaouiñ ar brezhoneg ha reiñ ur « gwir da vezañ » un doare *reizhekaat* d'ar yezh. Met disheñvel-tre eo eus KEAV evit se ivez. Diaes eo keñveriañ gant ur gevredigezh a implij stummourien a-vicher evit kelenn.

### III – Penaos sevel liammoù en ur bed disrannet ?

En ur sevel ma enklask, em boa c'hoant da c'houzout petra a zegas KEAV d'e berzhidi ouzhpenn evit ar yezh . Ur staj brezhonek eo, hag ur gevredigezh vihan eo ivez gant tud a vev asambles en ur skol e-pad ur sizhunvezh pe ziv. C'hoant em boa studiañ penaos e yae en-dro ar gevredigezh-se. Ur gevredigezh a ya en-dro gant tud o deus palioù boutin pe a gav ur ster o vevañ asambles. Dav vez dezho sevel liammoù etrezo.

#### 1 – Sevel liammoù sokial

##### **Arallekadur**

Klasket em eus kompren ha dielfennañ ar ger *aliénation* e galleg da gentañ. *Arallekadur* e brezhoneg a c'hell ezteurel diouzhtu ar pezh a dalv da vat. Me a grede e talvez *troc'het diouzh al liammoù* : ret eo anzav n'em eus ket kavet an dalvoudegezh-se. *Gwerzhañ* eo dreist-holl, gwerzhañ ar pezh ne c'hell ket bezañ gwerzhet, ha neuze dont da vezañ estrenien ouzhip hon-unan. Ma werzhomp un dra a zo ul lodenn ac'hanomp : hor c'horf, hon empenn, hor yec'hed, evit krakvevañ (al labourerien a ra se hervez Marx<sup>35</sup>, ar c'horf a vez gwerzhet gant labourerezed ar reizh, an empenn evit ar re foll, pe evit an dud troet da sot gant embregerezhioù ar skrammoù hag ar bruderezh) e teuomp da vezañ estrenien ouzhip hag ouzh ar bed. Ne gomprenomp mui netra eus ster ar bed hag ar vuhez. Laeret ez eus bet hor buhez diganeomp. Mirout ouzh an dud da implijout yezh o zud, yezh o bro, a zo unan eus an doareoù da « werzhañ ar pezh ne c'hell ket bezañ gwerzhet », da virout outo da sevel o identelezh. Pa vez merket ar sevenadur gant ar vezh, gant merkoù negativel dre forz klevout stereotipoù negativel<sup>36</sup>, e teur ivez da vezañ estren ouzh ar bed tro-dro, estren outañ e-unan. Soñjet em eus en doare ma seblant din e vezer arallekaet gant ur bern traoù er gevredigezh a-vremañ ha klasket em eus daveennoù ha mennozhioù evit sevel ar gevredigezh war diazezoù all.

##### **Raksoñjoù da zistruj**

Kinnig a ra Jacques Généreux skeudenn ur gevredigezh gwelloc'h, da adsevel, en e levrioù : da gentañ *La dissociété* ha da heul *L'autre société*. Diskouez a ra enno hon eus soñjoù faos diwar-benn

---

35 Karl Marx, *Manuscrits de 1844*, Paris, Flammarion, 2006, 243 pages.

36 Ronan Le Coadig, « Le fruit défendu » *Cahiers internationaux de sociologie*, 2001, pp319-339

ar gevredigezh, soñjou a zo bet kelennet deomp gant an ideologiezh liberal, er skol, er gevredigezh, er familh. Da gentañ, ar soñj omp hiniennoù, dieub diouzh ar re all ha dieub da sevel ur gevrat gant ar gevredigezh, m'hon eus c'hoant da gavout surentez. N'eo ket e giz-se, emezañ, ne vezer ket frank diouzh liammoù. Ar babig n'eo ket deut frank war an douar, met divarrek a-grenn da greskiñ, da dreuzvevañ hep tad na mamm aketus tro-dro dezhañ. Al lodenn vihanañ eus ar gevredigezh neuze a vefe ar familh ha n'eo ket an hinienn, an den. Ral eo e vefe emren ar familh vihan-se ha distag eus ur familh vrasoc'h... Ur vojenn all, hervezañ, eo teorienn Descartes<sup>37</sup> : *cogito, ergo sum*, da lavaret eo *gouest on da soñjal ha neuze ez eus ac'hanon, ur sujed on, distag eus an natur*. Ar pezh a zo naturel ha bev : al loened, ar gwez, ar plantoù n'int ket sujedoù peogwir ne c'hellont ket soñjal o-unan. Lakaet int da objedoù ha da zanvez a c'hellomp implijout evel hon eus c'hoant. Gwelout a reer bremañ an droug eo gouest ar mennozh-se da ober : distag eus an natur e c'hell bezañ an dud ha krediñ a reont bezañ a-us, ar sujedoù nemeto. Mennozhioù all ar Sklêrijenn a c'hell bezañ goulennataet ivez : an Araokadur degaset gant ar skiantoù hag ar skiant vat, ren ar spered war ar fromoù pe ar relijion, tout pezh a sach an dud « war-zu an amzer dremenet » sañset. Ar sevenadurioù minorelaet ne c'hellfent bezañ nemet testeni an amzer dremenet, hag an dud stag outo, tud warlerc'hiet, hervez teorienn an Araokadur.

Er gevredigezh liberal, e teskomp ivez ez eo ur redadeg ar vuhez, ur stourm ouzh ar re all evit bezañ an hini kentañ, an hini gwellañ. N'eus ket plas evit ar re chomet war-lerc'h, re wan pe re laosk evit kaout o flas, tizhout o fal er gevredigezh. Ar mennozh-se a zo bet brudet ivez gant teorienn an emdreñ gant Darwin<sup>38</sup> diwar-benn ar gevezerezh, evel doare da wellaat ur ouenn, ur spesad. Ur brezel a-berzh pep hini ouzh an holl re all n'eo ket an dra a c'hell ober deomp bezañ evurus na dieub, hervez Jacques Généreux. Er c'hontrol, kaout liammoù niverus hag a bep seurt eo an dra a ro frankiz deomp, da vont ha dont etre ar strolladoù, da gavout hor plas ha da sevel hon identelezh. Ezhomm hon eus, hervezañ, da vevañ evidomp, drezomp ha war an dro, da vevañ evit ar re all ha gant ar re all. Ar pezh a zo a-bouez, en ur raktres politikel, eo adsevel liammoù ha reiñ dre-se frankiz d'an dud, ebarzhiet er gevredigezh dre liammoù liesseurt ha frouezhus.

Kavet em eus dedennus ar mennozhioù-se evit studiañ doareoù hag efedoù KEAV war e berzhidi. Dont a ra ar berzhidi eus meteier disheñvel, diwar ar maez, eus kêr. Mennozhioù disheñvel o deus, betek ur serten poent, peogwir eo desachet an holl gant ar brezhoneg, brezhonegerien (da nebeutañ un tammig) ha lod bras anezho emañ o micher e bed an deskadurezh. Dont a reont da gKEAV evit en em vodañ tro-dro d'ar brezhoneg, evit kaout gouiziegezh war o yezh hag o sevenadur met ivez evit sevel darempredoù sokial troet war ar brezhoneg. Klask a reont nerzh da

---

37 René Descartes, *Discours de la méthode*, Paris, J'ai lu, 2013, 76 pages.

38 Charles Darwin, *L'origine des espèces*, Paris, Flammarion, 2008, 178 pages.

gas o stourmoù evit ar yezh. Memes doare o deus da sellout ouzh ar yezh hag an doare d'he zreuzkas. Stummet e vez emzalc'h an dud gant sell ar re all tro-dro dezho. Ma vez lavaret deomp a-hed ar bloaz : met perak emañ o teskiñ brezhoneg ? Da betra servij ? Komz a rez brezhoneg ouzh da vugale? Diwall, n'ez peus ket aon ez afent da gemmeskañ pep tra ha da gaout dale war ar re all ? Tamm-ha-tamm e vezer distabilaet gant ar burutelloù. Ezhomm zo da gavout tud a soñj memes mod war ar sujedoù-se evit bezañ broudet da vont war-raok.

Ur soñj all a zo gant Jean-Claude Michéa, ur prederour a oa bet desavet « dre soubidigezh », evel ma lavar eñ e-unan, e metoù ar strollad komunour er bloavezhioù 1950, en ur familh boblek e rannvro Pariz. E luskad ar MAUSS emañ ar prederour, da lavaret eo, e heuilh mennozhioù an anthropologour Marcel Mauss, en doa diskouezet e 1925<sup>39</sup> pouez ar roadenn, ar prof er c'hevredigezhioù kentidik, pe gozh. N'omp ket boudoù ekonomikel da gentañ, met tud prederiet gant ar fed bezañ ha diskouez. Merket eo bet identelezh Michéa gant ur skrid graet gant Anton Makarenko. Klasket en doa en den-se saveteiñ bugale kollet evit ar gevredigezh e Rusia, bugale diroutet pe emzivadad, en ul labourat ganto war talvoudegezhioù ar roadenn, ar vignoniezh, ar c'hensikour, gant nebeut-tre a arc'hant hag a skoazell a-berzh ar galloud, er bloavezhioù 1920. Labour Makarenko a oa bet ur skouer evitañ eus galvadenn ar pedagogour, ar pezh a rank ober evit ar re yaouank. Displegañ a ra Michéa e oa ganet lod eus mennozhioù brudet ar brederourien er XVIIvet kantved, eus ar soñj e oa drouk da vat an dud. Bez e oa d'ar c'houlz-se kement a vrezelioù ma oa bet kendrec'het ar brederourien ne oa mad ebet en denelezh : an dud a vije « bleizi evit ar re all », hervez Hobbes,<sup>40</sup> « divarrek da vezañ gwir ha mat », hervez Pascal<sup>41</sup>. Kinniget e oa bet mennozhioù gant ar brederourien gant ar pal sevel ur gevredigezh ne vije ket re fall, ha n'eo ket un utopiezh pozitivel. An diazez a oa e oa an dud dre ret lorc'hus hag emgar. Ret e oa kavout un diskoulm en ur zerc'hel kont eus an dra-se. Poellek e oa neuze ar brederouriezh liberal pe modern : penaos lakaat da vevañ asambles tud ha ne glaskont nemet o interest personel ? Ma soñjer eo gouest ivez an dud da vezañ brokus, da reiñ, da rannañ, da sikour, ne vo ket savet ar memes raktresoù kevredigezhel. Diskouez a ra ivez ar prederour eo bet dilezet ar mennad cheñch ar gevredigezh gant strolladoù an tu kleiz er bloavezhioù 1980 (unan eus e demoù bras) peogwir int bet gounezet d'ar mennozhioù liberal, bamet m'eo lod bras eus an dud gant mennozh an Araokadur hep bevenn, ar beveziñ hag ar c'hresk ekonomikel. Ar mojennoù ha mennozhioù-se, just a-walc'h, o deus kaset ma freder. A-feur m'on aet war-raok en ma enklask em eus soñjet e c'heller dielfennañ oberoù KEAV e meur a zoare : evit ar yezh, evel-just, met ivez evit sikour da sevel ur gevredigezh

---

39 Marcel Mauss, *Essai sur le don*, Paris, PUF, 2012, 241 pages.

40 Thomas Hobbes, *Leviathan*, Paris, Flammarion, 2017, 240 pages.

41 Blaise Pascal, *Pensées*, Paris, Points Essais, 2018, 438 pages.

disheñvel. Peseurt plas a c'hell bezañ d'ar sevenadurioù minorelaet er bed-se ? Peseurt plas evit an dud, gant o ezhommoù : bezañ karet, bezañ liammet, bezañ anavezet ? Perak ne vefe ket ken naturel d'an dud rannañ, reiñ bod, kenvevañ ? Ne seblant ket naturel peogwir e vez desket deomp eo start ar vuhez hag eo ret strivañ evit krakvevañ.

*Eleonore : Er Skol Veur em eus desket ur bern traoù diwar-benn ar yezh, ar sevenadur pobl. An dra-se en deus degaset din kalz a blijadur. Ar vuhez gwir eo : bezañ gwriziennet er sevenadur pobl, en ul lec'h, disheñvel eo eus ar vuhez a-vremañ. Ar gwirvoud : emaomp o skeiñ outañ ma ne zoujomp ket ouzh reolennoù ar vuhez, ar pezh a welomp aze gant cheñchamant an hin, da skouer. Anavezout hor gwrizioù a zoug ac'hanomp da vezañ aketusoc'h, doujusoc'h ouzh ar re all. Ar Skol Veur a ro alc'hwezioù evit kompren. KEAV a ro deomp un doare, un digarez da vont e darempred gant tud en ur implijout ar yezh.*

Reiñ a ra ar brezhoneg, hervez Eleonore, un alc'hwez evit ur bed disheñvel eus ar bed bevet gant an holl : ar vuhez gwir peogwir e kejer gant tud en un doare fetis, a ro ur ster d'o buhez, o deus gwriziennoù, a zo dedennet gant traoù evel : bezañ aketus ouzh ar re all, doujañ ouzh ar pezh a zo tro-dro deomp. Deskiñ a reer e meur a zoare : ret eo kaout alc'hwezioù ha bevañ an dra- se dre an darempredoù.

Ur gevredigezh all a zo da sevel met penaos ober ? Evit an tu kleiz, eme Michéa, n'eus kinnig all ebet, n'eus raktres bras ebet. Framm ar gevredigezh eo ar c'hevalaouriezh. D'ar gwellañ tout, e vefe ret dasparzh gwelloc'h frouezh ar c'hresk ekonomikel ha stourm ouzh ar gwall zisparti, hervez an tu kleiz. Ne ra ket huñvreal. Met ret eo prederiañ en ur mod all ha diskouez pegen faos eo ar mennozhioù liberal, hag a zo e diazez hor c'hevredigezh direizh. An diazez gwir eo ez omp tud a liammoù, boudoù sokial.

## **Disrannet eo ar gevredigezh e Breizh : ar skoilhoù evit komz**

Lenn ar mennozhioù kinniget a-us en deus graet din bezañ emskiant eus an doare ma ya en-dro ar gevredigezh evit skarzhañ ar brezhoneg hag an darempredoù denel war un dro eus hor buhezioù. Evit reiñ pouez ha buhez d'ar brezhoneg eo ret komz, da lavaret eo bevañ asambles, en ur gevredigezh boutin. N'eo ket a-walc'h gouzout brezhoneg evit komz e brezhoneg. Lakaomp ez eus bet desket brezhoneg gant un den en ur mare eus e vuhez, pe eo bet treuzkaset dezhañ gant e familh, pe er skol, en ur mare ivez, pa oa bihan moarvat. Ne dalv ket emañ o vont da implijout ar yezh en e vuhez pemdez. Termeniñ ar ger *brezhoneger* a ranker ober : liveoù barregezhioù disheñvel a zo dija, etre bezañ gouest da gompren, lavaret un nebeud gerioù, hag ivez komz da vat, kaout an dro da



implij en un doare ingal. Ar sontadeg diwezhañ diwar-benn implij ar brezhoneg (2018) a oa souezhus e meur a geñver peogwir e roe un niver a vrezhonegerien stabil abaoe 2007<sup>42</sup> (tro 207 000 den), ar pezh a oa digredus. N'eo ket memes brezhonegerien, a c'heller soñjal. An dud a respont d'ar sontadeg ar pezh a santont enno o-unan. Evit lod, o deus bet klevet en o endro, pe int gouest da gompren, pe e ouzont un nebeud gerioù hag e c'hell bezañ a-walc'h evit respont e ouzont brezhoneg. Al liveoù a zo dizingal-kenañ. Diglosiezh eo. Emaomp o vevañ en un endro galleger lec'h ma ne implijer ket meur a yezh en un doare ingal ha reoliek. N'eo ket talvoudekaet kalz ar brezhoneg en takad sokial ha publik, neuze an dud o deus gouizigezh e brezhoneg n'o deus ket peurliesañ memes ampartiz e brezhoneg hag e galleg.

Diskouez a ra ar sontadeg n'o dez ket tro kalz eus ar vrezhonegerien da gaozeal brezhoneg. 21% eus ar vrezhonegerien ne gomzont morse ha 37% ral a wech. Evit ar boblañs aterset en un doare hollek, 54% ne glevont morse komz brezhoneg hag 20% a glev brezhoneg tro-dro dezho ur wech ar miz<sup>43</sup>. Chom a ra serret ar brezhoneg er pennoù.

Ken dister eo bremañ al liammoù etre an dud, ken atomizet ar vrezhonegerien, ma n'o dez ket tro da gomz o yezh. Evit ur burzhud bennak : kejañ e tram Naoned pe e metro Roazhon ouzh ur brezhoneger, anavezet ganeomp, pe klevet dre zegouezh, ez eus kentoc'h kantadoù, miliadoù a dud a chom serret o brezhoneg en o fenn.

Distrujet, bruzhunet eo bet sevenadur Breizh gant meur a dra, ar skolioù hag ar Stad, an emdroadur ekonomikel ha sokial, an harlu hag ar c'hêriekadur, hag e chom mut ar vrezhonegerien. N'eo ket a-walc'h kaout ur yezh, ur vouezh, evit komz. Ret eo kavout un dra da lavaret, hag an dra-se eo marteze, ar sevenadur. Kaout un dra voutin etrezomp a ro c'hoant ha ster d'an eskemmoù. Met ne vefe ket reizh lavaret eo bet distrujet sevenadur Breizh gant ar skolioù hag ar Stad nemetken. Bountet o deus war un tu a oa anezhañ dija ha brasaet e efedoù. An hent-houarn en deus kaset miliadoù a Vretoned da Bariz ha lec'hioù all e-maez ar vro. Treuzfurmadurioù an ekonomiezh o deus graet o reuz ivez : digresk niver al labourerien douar, pouez ar c'hêrioù o kreskiñ, donedigezh ar c'hirri-tan hag ar skrammoù, nec'hamantoù ar gevredigezh a-vremañ. Aet eo da get ur sevenadur a seblante difiñv pa oa ar bed o cheñch ken buan. Ne oa mui netra desachus er vuhez diwar ar maez. An treuzfurmadurioù-se a zo bet diskouezet gant Eugen Weber<sup>44</sup>. Ar spas vak evit komz brezhoneg a zo tremenet eus an takad publik d'an takad prevez.

Ma n'implijer ket ar yezh war ar pemdez evit al labour da skouer, ne c'hell bezañ implijet kazi morse. Ret eo kemer perzh en ur c'helc'h stourm evit kaout tro da gomz : kentelioù noz,

42 Fañch Broudic, Pascale Wakeford, *les langues de Bretagne, enquête socio-linguistique*, TMO Régions, 2018.

43 *Idem*.

44 Eugen Weber, *La fin des terroirs*, Paris, Fayard, 1998, 839 pages.

kevredigezhioù stourm, dañs, sonerezh pe me oar. Ha bepred, en holl gelc'hioù-se ha pa vefe ur strollad evit krouiñ pe merañ ur skol Diwan, e vo bepred muioc'h a dud o komz galleg evit brezhoneg. Ha pa ne vefe nemet unan e vefe trec'h forzh penaos, an holl a gomz galleg. Pep hini a c'hell krouiñ pe kemer perzh en ur rouedad lec'h ma krouo liammoù gant an dud tro-dro hag a vo troet ouzh e interestoù (sevenadurel). An interestoù-se a vo danvez an eskemm. N'eo ket evel gwechall, ne z'eer ket da saludiñ an amezeien e brezhoneg ha komz eus traoù pemdeziek ganto (Neuze, goroet ar saout ? Feson glav a zo war an amzer...) N'emaomp ket mui o vevañ e-barzh ur gevredigezh diwar ar maez, diwar obererezhioù al labour-douar pe labourioù ar mor, war lusk ar c'houlzioù-amzer, e kelc'h bihan an amezeien tostañ hag ar familh ledan. PJ Hélias a stade ne oa mui amzer na lec'h ebet ken evit komz brezhoneg (meneget gant H. Pentecouteau<sup>45</sup>)

Komzet e veze ar brezhoneg el labour, er skol, en iliz, en darempredoù gant an amezeien, el labour, er marc'had, er familh. An takadoù a zo bet disteraet evel kroc'hen ur c'havr. Chomet e vije bet dreist-holl an darempredoù familh, ma ne vije ket bet un troc'h ur rummad pe zaou gant ar vezh da gomz brezhoneg hag an aon da virout ouzh ar vugale ar gwir da sevel er gevredigezh... Ur yezh gwriziennet e-barzh ur vro e oa ar brezhoneg, bremañ n'eo ket mui, ur choaz eo komz brezhoneg gant an dud a zo e memes rouedadoù : un implij prevez neuze, gant tud anavezet nemetken.

Evit reiñ tro d'an dud da gomz brezhoneg ez eus ezhomm reiñ ur spas dezho, un takad, a zo bet kollet. Ur spas a dalvoudegezh ne c'hell bezañ roet nemet gant choaz an unyezhegezh e lec'hioù zo pe da vareoù zo. KEAV a zo unan eus ar re-se, ral anezho. An hini nemetañ eo war-bouez Diwan.

« Ur yezh eo hag a zo aet diwar-wel er vuhez sokial abalamour d'ur c'henarroud akulturiñ en deus kaset an dud da cheñch implij ha norm ar yezh<sup>46</sup>. »

An akulturiñ eo an darempred gant ar galleg, lec'h m'eo bet trec'h ar galleg. Lec'h ma oa reizh ha kustum implijout brezhoneg, ez eus bet tremenet d'ar galleg. Ur wech m'eo bet cheñchet ar gevredigezh hag ar pezh a rae ar sevenadur a wechall, ne oa mui tro ebet da implijout ar brezhoneg. An akulturiñ a zo, en degouezh-mañ, an doare m'eo bet treuzfurmet ar c'homz hag an darempredoù etre an dud, eus ar brezhoneg, yezh pemdeziek an niver muiañ a dud e Breizh Izel, d'ar galleg, yezh pennañ ha yezh nemeti an dud e Breizh. Un darempred a zo bet, divyezhegezh a veze d'ur poent bennak, hag a oa bet muzuliet diwar ar maez, e kêr, e kumunioù'zo e Penn-Ar Bed ha lec'hioù all, dreist-holl e fin an naontekvet kantved. Ur wagenn cheñchamant a oa bet goude an eil brezel bed hag he doa kaset da drec'h ar galleg e-korf ur rummad tud.

---

45 Pierre-Jakez Hélias, meneget gant Hugues Pentecouteau, *Devenir bretonnant*, Rennes, Presses Universitaires de Rennes, 2002, p 32.

46 « C'est une langue qui a globalement disparu de la vie sociale et cette disparition est liée à un contexte d'acculturation ayant conduit à un changement d'usage et de norme linguistique. » Pentecouteau, *idem*, 2002, p 23.

Un troc'h a zo ivez etre ar vrezhonegerien a-vihanik, alies tud kozh diwar ar maez, hag an nevez-vrezhonegerien o deus desket er skol pe er stajoù. « N'eo ket ar memes brezhoneg » eo ar frazenn digalonekaus a ra d'an traoù bezañ diaes, ma klasker daremprediñ tud n'o deus ket memes oad, memes boazioù yezh, memes sevenadur e gwirionez, memes sujedoù a interest. Rannet eo ar gumuniezh yezh e giz-se ivez. Hugues Pentecouteau, Malo Morvan goude, o deus diskouezet an troc'h-se en o labourioù : taolioù-esae gant an nevez vrezhonegerien da gaozeal ouzh tud kozh o endro pe o familh hag an diaester d'en em gompren. Nac'hañ komz gant ar re yaouank e brezhoneg a ra lod eus an dud kozh, brezhonegerien a-vihanik. N'eo ket sur an dud, eus an daou du, eus o brezhoneg, re vresk e vez e meur a zegouezh evit kompren pep tra pe en em ober ouzh doareoù egile<sup>47</sup>. Breskder ar yezh pe *insécurité linguistique*<sup>48</sup> a c'hell bezañ graet eus an dra-se. Ar meizad-se a zo bet displeget e labourioù ar glaskerien<sup>49</sup>, evel an diforc'h etre ur skeudenn beurlavat eus ar yezh (evit an den a gomz) hag an doare ma komz e gwirionez. Ma ne vez ket sur e komz brav, e komz falloc'h, ne vez ket sur eus ar pezh a lavar, ne vez ket gouest da gompren bep tro, ober a ra fazioù pe chom a ra mut... Un troc'h all a c'heller merzout etre tud ar c'hêrioù ha tud diwar ar maez en un doare hollekoc'h. Ken bras, ken galloudus, ken pinvidik eo deuet ar kêrioù pennañ bro C'hall da vezañ, evel e lec'h all, ma c'hell bezañ gwarizi ha digompren etre an dud a zo o chom el lec'hioù prizet eus un tu : Naoned, Roazhon, kêrioù touristel an arvor, dreist-holl e Su Breizh, ha tud diwar ar maez eus an tu all, o deus moarvat kudennoù all en o buhez : servijoù publik raloc'h, ur boblañs o koshaat hag o paouraat...

Kompren a reer neuze eo ret adsevel pep tra a c'hell lakaat an dud da gaout c'hoant, da gaout fiziañs, da eskemm, d'ober kevredigezh etrezo.

## Reiñ, degemer, reiñ en-dro

Klasket em eus dre beseurt verboù e c'helled deskrivañ oberoù digoust ha penaos e klot gant ar pezh am eus gwelet ober e KEAV. Kavet em eus doareoù da ezteurel, deskrivet gant verboù, hervez Philippe Descola, en deus studiet an darempredoù etre an dud hag ar boudoù n'int ket tud, e-barzh *Par delà nature et culture*<sup>50</sup>. E studi zo bet savet diwar an Achuaed, ur meuriad Jivaro e Amazonia. Diskouez a ra e wel tud ar C'hornôg an Natur evel un danvez da veveziñ nemetken, er c'hontrol da bobloù Amazonia a ro un dalvoudegezh d'al liammoù gant an douar. Sellet e vez ouzh boudoù an

---

47 Malo Morvan, *Définir la langue bretonne*, Université Paris Descartes, Paris, 2017, p 9.

48 Meizad displeget gant Philippe Blanchet, « Pratiques linguistiques régionales d'élèves de primaire et de collège » Rapport de recherche CREDILIF, Université Rennes 2, 2002.

49 William Labov, *Sociolinguistique*, Les éditions de Minuit, Paris, 1977, 465 pages.

50 Philippe Descola, *Par delà nature et culture*, Paris, Gallimard, 2005, 640 pages.

natur evel sujedoù ha n'eo ket objedoù nemetken, danvez da veveziñ evit an dud. Implijet em eus ivez mennozhioù Mauss diwar-benn an eskemmoù digoust a gaver en holl sevenadurehioù ar bed a-raok ar mennozhioù kevalaour hag en un doare hollvedel.

Reiñ : e KEAV eo tud a youl vat a ro o amzer evit kelenn pe rannañ gouiziegezh, sevenadur hag o yezh. Al labour a youl vat a zo ur roadenn. Nebeut a hierarkiezh a zo e KEAV, met an hini a ro en em gav dre se a-us d'an hini a zegemer ar roadenn. N'eo ket evit se un darempred re zigempouez etre an hini a ro (ar c'helenner) hag an hini a zegemer (an deskard) peogwir ez eus eskemmoù ha plijadur evit an dud a ro. Reoù a zistro alies.

Degemer <sup>51</sup> : ar berzhidi a zegemer ha lod a ro en-dro dre gelenn d'o zro. Emouestlañ a reont en o buhez personel (tremen vakañsoù oc'h en em stummañ hag a-wechoù, ur choaz don : bevañ e brezhoneg). Sevel a reont un dle war ar yezh pe ar sevenadur gant ur redi moral : reiñ en-dro.

Reiñ en-dro, *le contre-don* : en ur dreuzkas ar yezh d'ar skolidi pe d'ar vugale er familh. Ar prof, pe ar roadenn a zegas obererezhioù all, a c'hell bezañ digoust. Paeet e vez evel-just ar gelennerien evit treuzkas en Deskadurezh Stad, met ne vir ket e vefe un emouestl don, ur c'halvadenn.

Diskouez a ra Alain Caillé petra eo ar c'hontrefed eus an tri verb-se : reiñ, degemer, reiñ en-dro : kemer (preizhañ), nac'hañ, (neuze nac'hañ ar re all, ar pezh a c'hellont reiñ, degas deomp), ha mirout. Bezañ emskiant eus petra eo ar c'hontrol a ziskouez pegen a-bouez eo an darempredoù-se er vuhez : reiñ a galon vat, degemer an arallded, reiñ en-dro evit en em santout mat, ar blijadur da gempouezañ, hep ne vefe ur redi kennebeut. Reiñ a rank chom un dibab, un oberenn digoust.

Eskemm : prezegennoù, mont da doullañ kaoz gant tud ar vro, an devezh studi a zo mareoù eskemm ha digor war diavaez ar c'hamp, pe un digor ouzhpenn d'ar c'hentelioù. Eskemm a zo un arz, arz ar gaozeadenn ne'z a ket kalz war-raok, er mare-mañ er bed, met a c'hell bezañ dioreet hag a zo diorreet e KEAV, ouzh taol, el liorz, en davarn...

Preizhañ a zo moarvat un doare da ober war ar re all, met ket ul liamm sokial, n'eo ket un eskemm. Dre chañs ne zeuer ket evit preizhañ.

Gwareziñ ar glad, ar sevenadur : dre ar c'han, an dañs, dre ar c'haozeadennoù, dre ar raktresoù, ar prezegennoù e vez treuzkaset muioc'h evit ar yezh, ar sevenadur.

Produiñ sevenadur dre skrivañ danevelloù, produiñ un abadenn radio, sevel raktresoù evit ar brezhoneg, dañsal, gwerzhañ pe prenañ levrioù, prientiñ dudi evit ar vugale, prientiñ un abadenn e fin ur sihunvezh staj... Desket e vez en ur ober. N'eus nemet se a chom war hir dermen, ar pezh hon

---

51 Antoine Reverchon, « Contre l'individualisme », compte-rendu de Alain Caillé, *extensions du domaine du don*, éd. Actes Sud, 352 pages, *Le Monde Idées*, octobre 2019.

eus graet gant hon daouarn, hor c'horf, ar santadurioù hag ar skiant hon eus prenet. Ur skouer dedennus eo ar c'hoariva, a ro un digarez da gomz ha da implijout lavar ar c'horf war un dro. Gallout a reer c'hoari war ar vouezh, komz izel evel ur chuchumuchu pe kreñvoc'h, treveziñ ar fromoù ha santout anezho, deskiñ doujañs evit roll pep hini er strollad ha war al leurenn, kensikour...En ur vestroniañ muioc'h ar c'homz e c'heller lakaat da zigreskiñ breskder ar yezh.

Treuzkas d'ar re yaouank, d'an danvez kelennerien ha skolaerien, d'ar vugale, d'an dud o teskiñ.

An holl verboù-se a ziskouez pegen frouezhus ha pinvidik e c'hell bezañ an holl oberoù e KEAV hag e kevredigezhioù bihan savet war talvoudegezhioù damheñvel evit sevel ur bed reishoc'h ha plijusoc'h.

## **Sevel darempredoù etrekeltiek pe etrevroadel**

Mont a rin pelloc'h evit deskrivañ al liammoù savet gant Kembreiz pe estrenien abalamour da gKEAV. Bez ez eus bet eus al liammoù-se abaoe penn-kentañ KEAV. Diwar patrom ar skolioù-hañv tramor eo bet savet ar raktres adalek ar penn-kentañ. Degemeret e oa bet Kembreiz pe Kelted tramor adalek ar c'hamp kentañ e 1948 ha meneget eo al liammoù savet meur a wech e kounskrid Anna Ar Beg diwar-benn an dek vloaz kentañ. Broadelour pe brogarour a zo ur ger meneget meur a wech er studiadenn-se hag ar gerioù-se n'int ket a vrud-vat e Frañs, dreist-holl pa zeuont eus ur sevenadur minorelaet. Koulskoude, n'eo ket fall en e-unan karout e vro, ar pezh a zo fall eo kaout argas pe dismegañs ouzh ar re all. Broadelouriezh a vez troet alies en un doare negativel evel un emzalc'h kasoni ouzh ar re all<sup>52</sup>. Mignoniezh, harp, skoazell etre ar broioù hag ar pobloù a c'hell bezañ koulskoude. Er c'hamp kentañ, e oa bet pedet 12 Kembreiz eus *Urdd Gobaith Cymru*, un aozadur kembreat evit ar yaouankiz, en deus 55 000 ezel en deiz-a-hiziv. Un emglev a oa gant an *Urdd* ha plasoù a veze miret evit ar Gembreiz e KEAV, ha reoù all miret evit Bretoned en *Eisteddfod*, ar c'hamp-hañv evit ar yaouankiz e Kembre. An emglev-se a oa er bloavezhioù kentañ met ne badas ket peogwir e oa kudennoù arc'hant gant KEAV ha ne c'helle ket degemer tud evit netra. D'ar c'houlz-se, e oa kalz tud e-touez ar Vretoned bepred na zeuent nemet en un dremen, un devezh pe zaou, neuze ne baeent ket a-walc'h evit ma vefe kempouez ar c'hef. Skoulmet e oa bet an darempredoù etrekeltiek evit reiñ nerzh an eil d'egile ha da heul kamp Kleder (an hini kentañ) e oa bet skrivet gant arc'heskob Kerdiz d'ar gouarnamant gall, evit goulenn ma vefe desket brezhoneg er skolioù (ar pezh zo bet diwezhatoc'h el lezenn Deixonne e 1951). Brezhonegerien a oa bet pedet er c'hamp etrekeltiek e bro Gembre, pennadoù a oa bet eus an daou du e kelaouennoù breizhat ha

---

52 Yuval Noah Harari, *Sapiens, une brève histoire de l'humanité*, Paris, Albin Michel, 2015, 512 pages.

kembreat. An intrudu-se a denn kalz ouzh ar gevelliñ a zo bet graet diwezhatoc'h gant kement a gumunioù e Breizh gant kumunioù all tramor e bro Gembre hag Iwerzhon. Plijadur a veze, war a seblant, evel em eus gwelet ivez er staj 2019, o kanañ sonioù asambles, o keñveriañ gerioù tost, o c'hoari gant ar yezhoù. Graet e veze arvestoù kan, dañs ha c'hoariva evit ar publik er bourc'h ma oa KEAV evit diskouez da dud ar vro ar pezh a veze graet er c'hamp ha moarvat degas arc'hant e kefioù KEAV<sup>53</sup>. Goude un nebeud bloavezhioù e oa bet ul liamm gant ar Friz (un takad e Alamagn, Denmark hag Izel-Vroioù) ivez : un eskemm lizhiri a oa bet hag e oa bet pedet izili KEAV en ur c'hamp eno, gouestlet d'ar sevenadurioù bihan. N'eo ket hep diaesterioù avat e reer seurt darvoud pe emgav : 34 Frizad a zifoup e-kreiz ar c'hamp hep na vefe bet komprenet en a-raok hag « ar Friziz a zo lorc'h enno o tiskouez e ouzont galleg ha diaes eo chom hep respont<sup>54</sup> ! » Ur bern skoulmoù a zo bet e giz-se a-hed ar bloavezhioù, o pinvidikaat buhez ar Vretoned hag hini ar Gembreiz, ar Gerneveuriz, ar Friziz hag un nebeud tud eus broioù all (Skoz, Iwerzhon, Schleswig-Holstein, Alamagn, Izel-Vroioù, Stadoù-Unanet, bro-Saoz, Japan, Rusia, Polonia... diwar testenioù resis hag anoudegezh personel). Kendalc'het eo bet an darempredoù-se gant sikour ar Skolioù Meur, hini Roazhon hag hini Aberystwyth. Mignoned KEAV a zo eno. Tremen a ra studierien war ar brezhoneg ur c'hwec'hmiziad en ur vro estren ha distreiñ a reont, mennetoc'h da gomz o yezh, hag a-wechoù gant mignoned, e KEAV. An div gelenner e oa er strollad kembraeg 1 em boa bet kentelioù ennañ en hañv tremenet, a oa ur Gembredez a gelenn e Roazhon hag ur Vretonez he doa tremenet ur bloavezh e Aberystwyth da vare he studioù.

## **Sevel liammoù gant ar grennarded : petra ro c'hoant d'ar re yaouank da gaozeal brezhoneg ?**

Komzet em eus eus ar strollad Brezhoneg er familhoù e KEAV. Kaset e vez ul labour dispar eno evit harpañ ar familhoù da lakaat brezhoneg en o buhez familh ha da grouiñ liammoù e brezhoneg. Graet e vez evit ar familhoù gant bugale, betek dek pe zaouzek vloaz. Diaesoc'h eo avat lakaat ar grennarded da gaozeal e brezhoneg : emaint o sevel o identelezh, c'hoant o dez da nac'hañ ouzh ar pezh a vez kinniget dezho. Re liammet eo ar brezhoneg ouzh ar skol evit skolajidi ha liseidi Diwan. Hag ar re all, ar re o defe desket brezhoneg er familh nemetken, n'int ket niverus. C'hoant da vezañ evel ar re all, evel-se e savont o fersonelezh, hag o fatromoù a zo e-touez o re, ar re a zo evelto. Troet e vezont war-zu patromoù sevenadurel douget gant ar gevredigezh : heuliadennoù amerikan ha saoz, romantoù evel *Harry Potter*, ar merkoù brudet ha marc'had-mat (Mac Do, KFC), ar

---

53 Anna Ar Beg, *KEAV, ar bloavezhioù kentañ*, Hor Yezh, Roazhon, 1988, p 121.

54 *Idem*, p 142.

gwiskamant, ar c'hiz, o neuz war Instagram<sup>55</sup>. Implijout a reont kalz o skrammoù bihan hag ar rouedadoù sokial. O harozed a zo youtuberien, levezonerien a heuliont war o hezougoù.

Ur choaz eo komz brezhoneg met ur choaz diaes peogwir eo pemdeziek. Tu zo da geñveriañ gant choazioù beveziñ evito pe evidomp. Brav eo choaz debriñ boued vejetarian pe vegan pe choaz beveziñ nebeutoc'h peotramant mont d'al labour war varc'h-houarn met ret eo ober ar choaz-se meur a wech bemdez. Evit kaozeal brezhoneg, bep tro ma tigor ar beg !

Hag evit kerent ar grennarded, n'eo ket aesoc'h eget evit edukatourien ar vugale er skol : en un ensavadur (evel ur skol Diwan) e senter mui pe vui ouzh ar reolenn. Ha c'hoant o deus an tadoù ha mammoù da vreinañ o darempredoù gant o bugale evit stourm evit ar brezhoneg ? Ma ne zeu ket aes ar brezhoneg, ma ne respont ket a youl vat ar bugel, e vez aesoc'h paouez pe ober nebeutoc'h. Digalonekaus e c'hellfe bezañ ma ne ouifed ket ez eus burzhudoù. Ne c'heller ket mestroniañ treuzkas ar yezh d'ar vugale peogwir int tud ha tud dieub d'ober o choazioù. Soubet en un endro galleger, n'eo ket sur e faoto dezho komz brezhoneg. Koulskoude, ez eus spi, pa weler tud yaouank leun a entan, o deus c'hoant da studiañ brezhoneg, da seniñ, da zañsal, da grouiñ traoù e brezhoneg. Studiet eo bet an traoù-se gant Fanny Chauffin, a-dost. Reiñ a ra ar brezhoneg ur vouezh evit ezteurel traoù, santimantoù, mennozhioù, santadurioù. E-touez ar re yaouank, ez eus reoù a zo tapet gant ar c'hoant-se. Tremen a ra alies dre un darempred gant ur sevenadur all. Meneget e vez un testeni a seurt gant F. Chauffin<sup>56</sup>. Meur a hini am eus klevet ivez : ur bloavezh studi en Iwerzhon pe e Kembre en deus roet da gKorentin pe da vMaiwenn muioc'h a c'hoant, muioc'h a youl da implijout ar brezhoneg. An daou a zo troet war ar c'hrouiñ : Korentin a sav filmoù, Maiwenn he deus heuliet stummadurioù war ar c'hoariva. Krouiñ, daremprediñ ur sevenadur minorel all a ro muioc'h a emskiant eus an identelezh ha penaos lakaat anezhi da vleuniañ. Diskouez a ra Fanny Chauffin ivez ez eus bet a bep seurt traoù krouet tro-dro da Ziwan. N'eo ket un intrudu hiniennel pe gant nebeut tud nemetken, met ur rouedad tud kengred a gav doareoù da dizhout o fal : krouiñ festoù, festivalioù, troioù bale, desachañ tud all, krouiñ dafar evit kelenn ha broudañ an tiez embann da broduiñ. Un endro sevenadurel a zo ret evit diorren ar brezhoneg ha reiñ c'hoant d'ar skolidi da implijout ar yezh. Dav eo krouiñ an endro-se. Ma soñjer n'eo ket gant ar skol nemetken e vo salvet ar yezh, n'eo ket gant ar familhoù o-unan kennebeut. Binviji int evit reiñ lañs d'ar yezh. Met n'eo ket a-walc'h. Krouiñ, kaout liammoù a zo un ezhomm bras, evit ar re yaouank ivez. Gouest e vint da adperc'hennañ ar brezhoneg ma kavont plijadur ha mignoniezh gantañ. Spered ar fest-noz a c'hell bezañ ur patrom : kanañ a zo un doare da implijout ar yezh, da lakaat anezhi da zassoniñ, da ezteurel. Liammet eo ouzh an dañs a ro tro da implijout ar c'horf war an dro, da zilezel lentidigezh

55 Séverine Pierron, « Miroir, dis-moi qui est la plus filtrée », *Le Monde* 19 janvier 2020.

56 Fanny Chauffin, *Diwan, 40 ans déjà*, Saint-Brieuc, Yoran embanner, 2017, p 333..

hag aon ha mont war-raok gant ar re all.

*Maiwenn : Graet em boa stajoù dija, met n'em boa morse kelennet c'hoariva. Tud'zo er strollad a oa barrek war ar yezh met dizingal e oa al liveoù. Ar pezh a zegas ar c'hoariva evit ar yezh eo komz kreñv, implijout ar c'horf, ezteurel gant muioc'h a fiziañs. Pa n'o deus ket an dud fiziañs enno evit komz, e c'hell sikour ober c'hoariva.*

Ur fest eo, ur blijadur a c'hell unvaniñ a bep seurt oadoù, a zegas sevenadur war un dro gant ar yezh. E KEAV e vez pleustret ivez war ar c'han, an dañs, ar c'hoariva, ar c'hrouiñ sevenadurel. Lakaat e pleustr an hentennoù-se, sikour an dud da grouiñ, ha da gaout plijadur a zo moarvat unan eus an hentoù frouezhusañ evit derc'hel bev ar yezh ha sevenadur Breizh war un dro.

## 2 – Reiñ c'hoant ha fiziañs d'an dud

KEAV a ro ul lec'h, ur spas, un degouezh hag a ro tro da bep hini da grouiñ liammoù e brezhoneg. Laosket e vez ar pellgomzerioù hezouk milc'halloudus a-gostez evit ur prantadig ha komzet e vez etre an dud. Liammet eo ar yezh ouzh ar sevenadur peogwir e chom didalvoudus ar yezh ma n'hon eus ket ur sichenn, un dra voutin da eskemm.

Diwar-se e c'heller kompren ivez eo diaes spontus evit tud yaouank, da skouer, studierien e kêr, mont da welet brezhonegerien ar vro hag eskemm ganto. Muioc'h evit un diaester evit kompren a zo. Diwar petra e c'heller komz ? Daou hollved disheñvel krenn a glask kejañ met penaos ober ? An ozac'h en e di a gomz eus ar barrez, eus ar vuhez diwar ar maez ha gwechall, eus an iliz ha darempredoù en deus anavezet a-viskoazh tro-dro d'an ti-feurm, d'al loened, d'ar sistr ha d'ar banne kafe. Peseurt dave a c'hell bezañ boutin gant ar re yaouank a zo bet desavet er bloavezhioù 1990 pe 2000 gant urzhiataerioù ha pellgomzerioù hezouk, heuliadennoù amerikan, a vev er c'hêrioù hag a ya da veajiñ e meur a vro ? An daou a gomz galleg ha brezhoneg met diaesoc'h eo kompren an eil egile muioc'h evit ma vefe unan anezho ur peizant kozh e Sina ! N'eo ket ar gerioù a ra defaot met ar sevenadur boutin ! Prizet e vez kalz e-touez en dud a zesk brezhoneg, ar fed bezañ brezhoneger a-vihanik ha komz yezh ur c'horn-vro. Aon a c'heller kaout da vezañ barnet gant ar frazennig-se : n'eo ket ar memes brezhoneg. Disprizet eo bet koulskoude ar yezh evel ur « merk » a zidalvoudegezh pe a ziouiziegezh ha neuze, brezhonegerien a-vihanik hag a-nevez ne gredont ket komz an eil ouzh egile.

*Tudi : Meur a doull a zo, n'on ket boas da zaremprediñ tud kozh, diwar ar maez, a zo stag ouzh ar relijion, ouzh an douar hag ouzh ar brezhoneg.*



Un treuzfurmadur eo ar fed da zont da vezañ brezhoneger hervez H. Pentecouteau<sup>57</sup>. An hinienn, an den a choaz cheñch buhez, en ur mod, en ur zeskiñ brezhoneg. Keñveriañ a ra ar fed-se ouzh cheñch relijion : evel ma vefe an den gounezet d'ar feiz. Un ezhomm eo bezañ anavezet en un doare disheñvel neuze, krouiñ a ra un ezhomm cheñch buhez, cheñch darempredoù sokial. Pa vez graet gant ar familh an ebarzhiañ kentañ er gevredigezh (*la socialisation primaire*) ez eo neuze, un eil ebarzhiañ war diazezoù disheñvel. E KEAV e vez graet ul lodenn eus an treuzfurmadur-se evit kalzig a dud. Ur mare ispisial eus o buhez eo evit an dud pa grogont da vrezhonegañ. Cheñch a reer, betek ur serten poent, darempredoù ha doare da welet ar bed. Gounezet e vez an den d'un doare all da sellout ouzh an traoù. N'eo ket, avat, un identelezh wiroc'h evit an hini gentañ, un tal all eo, choazet, un doare all da gontañ (hon) istor eo. Ma vez keñveriet ar fed cheñch yezh, choaz ar brezhoneg, da vont en ur relijion, e c'hellfe bezañ KEAV ar c'hloerdi, evit ar fideled nevez. Ur manati eo ivez peogwir ez eer di, evit en em gavout en ul lec'h distro diouzh ar bed evit ur sizhunvezh pe pemzektez. Implijout a ran, evel Pentecouteau, ur skeudenn ha sachañ war an neudenn evit diskouez an hent kemeret gant an dud.

A-bouez eo neuze, gallout komz hep bezañ barnet. Krouet e vez e KEAV kondisionoù evit ma vefe posubl : sevel un eztaoladenn, ur brezegenn, komz ouzh taol, pe er *siop siarad*, gant un den dianavezet... a zo kement-all a zigarezioù evit kaout fiziañs. Pedet e vez ar stajidi da gemer e karg mareoù eus ar staj. An holl degouezhioù-se a zo ivez mareoù evit rannañ sevenadur, gouiziegezh diwar-benn al lennegezh, ar plantoù, ar bed, ar filmoù pe pezhioù-c'hoari savet e brezhoneg. Tud koshoc'h ha barrekoc'h a gaver alies a-walc'h evit eskemm ha rannañ o gouiziegezh. Ne vir ket ouzh hiniennoù zo da reizhañ frazennoù un den diampart, pe reiñ kentelioù en ur mare n'eo ket a-zoare...

*Tudi : En noz dremenet e oan o eskemm gant un den, o kontañ dezhañ traoù, hag e oa bepred o troc'hañ ar c'haoz din evit difaziañ ma brezhoneg.*

Diouzh noz, peurliesañ, pa vez digor an davarn, betek diwezhat, e c'heller lavaret o deus an dud muioc'h a fiziañs enno o-unan hag en o barregezhioù yezh, ur wech evet daou pe dri banne bier. Mont da evañ banneoù gant ar vignoned a zo unan eus plijadurioù brudet KEAV. Arabat eo d'ar brezhoneg bezañ bepred sujed ar c'haozeadennoù, pe gwashoc'h, un dachenn emgann. Met, evel e lec'h all, an dud a glask gounit. Zoken m'eo bihan-tout ar chapelig ha nebeut a dud o komz brezhoneg, e vo bepred tud o klask prouiñ emañ ar gwir ganto. Neuze, pismigañ, ober polis ar yezh, burutellat lavarenn pe lavarenn... a c'hoari a-enep ar brezhoneg, pa c'hell lavaret unan hag a zo bet skoliataet e Diwan hag en deus studiet ar yezh war-lerc'h, lavaret en un dezenn : *n'em eus morse*

---

57 Hugues Pentecouteau, *Devenir bretonnant*, Presses Universitaires de Rennes, 2002, pp 87 à 106.

*komzet ar brezhoneg a zoare.*<sup>58</sup> N'eo ket e giz-se e vez savet fiziañs etre an dud. Er c'hontrefed, tremen amzer plijus asambles, klask toullañ kaoz, kavout interestoù boutin, ar blijadur da vezañ anavezet ha da eskemm mennozhioù... a gas an dud da sevel liammoù e brezhoneg.

Un dra heverk a vez graet e KEAV eo arz ar c'haozeal. Kaozeal a vez graet etre ar c'hentelioù, d'ar mareoù vak, ouzh taol, el lost a-raok mont ouzh taol, da lavaret bemdez, meur a wech, gant meur a zen dianavezet er c'hamp. N'eo ket diorreet a-walc'h er gevredigezh a-vremañ, peogwir eo bet erlerc'hiet alies gant doareoù all : dre objedoù teknikel, ar c'haozeadennoù n'int ket mui kaozeal. Sentiñ a reont ouzh reolennoù all. Prevesaet int bet, en ur mod peogwir eo ret prenañ an objed, feurmiñ ar servij koumanantiñ. Gwerzhet e vez ur wech c'hoazh, ar pezh ne c'hell ket bezañ gwerzhet, hor *data*, roadennoù, an titouroù priziusañ ha prevesañ diwar hor penn. Petra eo kaozeal ? Eskemm mennozhioù, savpoentoù, gouiziegezh, titouroù, par-ha-par gant un den ingal, en ur gemer e amzer hag en ur sellout an eil ouzh egile. Ouzhpenn d'al lavar, e vezer kizidik ouzh yezh ar jestroù, sinoù ar c'horf, mousc'hoarzh, fiñvadennoù an dremm. Un arz eo, a vez desket dre forz ober hag a lak muioc'h a zenezh en darempredoù etre an dud. Reiñ a ra galloud, met ur c'hoari eo ivez, hag ur blijadur. En ur zivizout e vez roet priz, talvoudegezh d'egile, hag e vez klasket kompren, reiñ ur ster ha degouezhout war un emglev. Koulskoude, n'a ket ar gaozeadenn war-lerc'h ur pal. Peurliesañ ne servij da netra resis, digoust eo, dieub. Liammet e vez hor soñjoù da reoù unan all, ha graet e vez en un doare lezirek, uvel, hep mont re vuan, just evit ar blijadur. Krouiñ a ra liammoù etre an dud, reiñ a ra deomp un tamm galloud hag ar blijadur da vezañ komprenet, pe da nebeutañ da ezteurel hor soñjoù.

### 3 - Evit adsevel ur gevredigezh hag un identelezh pozitivel e Breizh

Intrudu a vez gant ar Vretoned evit sevel raktresoù sevenadurel : un testeni, skrivet gant Yannik Bigouin<sup>59</sup>, a ziskouez an diaesterioù da gentañ hag a ginnig mennozhioù da heul evit sevel ur gevredigezh disheñvel e Breizh. Gallout a ra bezañ un identelezh-mennad ha n'eo ket un identelezh-stourm nemetken<sup>60</sup>. Diskouezet eo bet gant Manuel Castells e c'hell ur strollad, er bed a-vremañ, sevel e identelezh e tri doare disheñvel. Un identelezh-reizhekaat a vez roet d'ur strollad a-du gant an aozadurioù pennañ, anavezet gant an holl, ar Stad, an Iliz, ar familh... Gwasket e vez ar strolladoù all minorelaet er gevredigezh. Gallout a reont sevel a-enep ar galloud pennañ (identelezh-

---

58 « Je n'ai jamais parlé le bon breton », Morvan, *idem*, p 9.

59 Yannik Bigouin, *Nous te faisons autrement Bretagne*, Yoran embanner, Fouesnant, 2017, 211 pages.

60 Hervez rummadoù termenet gant Manuel Castells, *Le pouvoir de l'identité*, Paris, Fayard, 1999, 538 pages.

stourm) pe klask cheñch ar gevredigezh evit me tegemerfe o zalvoudegezhioù. Identelezh-mennad a vez graet eus an dra-se. Stadañ a ra Bigouin en e levr an doare m'eo bet diskaret al liamm gant an douar e-barzh al labour-douar e Breizh : produiñ muioc'h gant muioc'h a vinvioù koustus, muioc'h a zouaroù, muioc'h a loened, implijet evit o c'hig nemetken. Ur patrom nevez a zo bet savet, n'en deus ket gwellaet kement-se buhez an dud a veve diwar al labour-douar. Ar re-se a zo bet implijet gant ar bankoù hag ar gourmarc'hadoù ha gwasket dindan ul labour digenvez, startoc'h, diliammet diouzh an douar, an endro, al loened, an natur. Arallekadur c'hoazh. Ouzhpenn d'ar yezh ez eus bet tennet diganto ul lod bras eus o buhez sokial. Nebeutoc'h a blijadur evit muioc'h a aezamantoù ? Gwir eo evit lod, met n'eo ket evit an holl. Startoc'h eo ivez ar vuhez diwar ar maez en un doare hollek, zoken evit an dud ne vevont ket diwar al labour-douar. Gant kresk ar c'hêrioù ha dreist-holl ar c'hêrioù bras eo deut raloc'h ar servijoù publik ha prevez war ar maez. Nebeutoc'h a vedisined, a ospitalioù bihan, a servijoù bank, a stalioù, a davarnioù. Ret e vez implijout ar c'harr-tan evit pep tra ha mont pelloc'h-pellañ. Serret e-barzh ar c'harr-tan pe er gêr dirak an tele, e vez troet an dud muioc'h war-zu o buhez personel ha diseblant ouzh gwalleurioù ar bed, kontet bemdez ha dizehan ouzh ar skrammoù. Evit cheñch ar gevredigezh ha sevel patromoù awenusoc'h, ez eus kinnigoù all posubl : Breizh eo kentañ rannvro<sup>61</sup> (pe eil, hervez ar gouarnamant<sup>62</sup>, goude Broioù al Liger...) e Frañs evit an ESS, *économie sociale et solidaire*, pe ekonomiezh sokial ha kengred. Ar patrom-se a glask kempouezañ ar fed gounid arc'hant hag ingalded sokial. Teurel a ra evezh ouzh ur gopr dereat evit pep hini, bezañ talvoudus evit an holl, nac'hañ ar gwall-zisparti hag ar skarzhañ. Reiñ a ra ur vouezh da bep den... Bev eo ivez ar c'hevredigezhioù, hag a ziskouez nerzh al liammoù sokial, troet war-zu ar sevenadur, ar yezh, ar sonerezh, raktresoù boutin a bep seurt.

Kinniget e vez sevenadur d'an dud evel un dra a c'heller beveziñ en deiz a hiziv. An tem-se a zo bet deskrevet ha diorreet kalz, gant Guy Debord, da skouer<sup>63</sup>. N'eus ket mui a sevenadur poblek, met ar sevenadur a zo un arvest, un dra diskouezet d'an dud a chom o c'houzañv (ne vezont ket bepred oberiant) dirak skrammoù. Gwashoc'h c'hoazh eo hiziv ar skrammoù bihan hag hiniennel eget an tele gwechall : gant an tele da nebeutañ, holl dud ar familh a selle ouzh ar memes programmoù hag a c'helle eskemm war-lerc'h neuze e oa ur seurt sevenadur boutin memestra. N'eo ket ken gwir bremañ gant an niver a skrammoù a bep seurt o kreskiñ hag ar c'hoarioù video, an heuliadennoù a vez bevezet drezo. N'eo ket mui ur sevenadur a zieub an dud, peogwir n'o deus perzh ebet ennañ. N'o deus netra da grouiñ, da broduiñ, d'ober. Ne c'hellont ket kreskiñ dre ar sevenadur. Dont a reer ivez da vezañ diseblant ouzh ar pezh a c'hoarvez er bed : dienez, brezelioù, feulster, gant an niver

61 Yannik Bigouin, *Nous te faisons autrement Bretagne*, 2017, p 4.

62 Marie-Hélène Kerouanton, « La place de l'économie sociale et solidaire en Bretagne », *Octant* n° 108, revue de l'INSEE, Mars 2007.

63 Guy Debord, *La société du spectacle*, Paris, Gallimard, 1992, 208 pages.

bras a skeudennoù a welomp gant se, a-hed an deiz, a-hed ar bloaz. Seblant a ra bezañ ordin a-benn ar fin. Ha petra c'heller ober ? N'eo ket se a ra deomp bezañ oberiant. Beveziñ ar sevenadur, ar sonerezh, ar plijadurioù, an istorioù, ar skeudennoù, evel boued hag evaj, setu ar pezh a vez kinniget deomp gant embregerezhioù ar skrammoù hag ar bruderezh. Sellout ouzh an tele pe ar skrammoù a lak ac'hanomp da c'houzañv e-lec'h bezañ oberiant. Treiñ a ra hor soñjoù war un tu n'eo ket bet choazet ganeomp, met gant an embregerezhioù. Diduet omp, just a-walc'h ha ket tuet mat, war pezh a gont. C'hoant hon eus, goude un devezh skuizhus, goude mareoù dipitus, cheñch soñj, bezañ diduet ha n'eo ket prederiañ, en em greizennañ, en em soñjal. Neuze, penaos kavout nerzh evit reiñ ur ster d'hor buhez ?

Ha koulskoude, n'eo ket se a ro o gwalc'h d'an dud. Ur birvilh sevenadurel a zo e Breizh ha desachet e vez ar Vretoned<sup>64</sup> gant stummoù nevez ar sevenadur : sonerezh, festivalioù, yezh... Evit reiñ ster d'ar vuhez eo a-bouez bezañ lod eus ur gumuniezh pe un dra bennak brasoc'h egedomp. Adsevel un identelezh pozitivel a c'hell bezañ un doare. Met petra eo bezañ Breizhad ? Diaes eo termeniñ identelezh Breizh evel-just. Ne respont ket aes an dud am eus aterset d'ar goulenn-mañ : petra eo bezañ Breizhad ? Ha ret eo komz brezhoneg evit bezañ Breizhad ?

*Quentin : D'am soñj eo risklus termeniñ resis petra eo bezañ Breizhad hep lavaret sotoniajoù a-benn ar fin.*

*Naig : Pa oa bet krouet KEAV e oa ar yezh o vervel. Pouezus tre eo ar raktresoù a bep seurt evit reiñ nerzh d'ar yezh. N'eo ket ar memes yezh, emañ o cheñch met naturel eo. Ne soñj ket din emañ o vont da vezañ ofisiel met abalamour da raktresoù a seurt se e chom er gweledva. Chom a ra boud ar yezh. Keit ha ma chomo unan bev e chomo bev ar brezhoneg. Evel ur vozaikenn eo, an holl yezhoù o deus ur plas, arabat lazhañ anezho.*

Un dra bennak o deus ar Vretoned da lavaret d'ar bed, hag an dra-se a c'hell... marteze a rank bezañ lavaret e brezhoneg. Ur plas he deus ar yezh e « mozaikenn » yezhoù ar bed.

Doareoù a zo da zerc'hel bev ar sevenadur : krouiñ, sevel raktresoù asambles. Menegiñ a rin amañ un nebeud raktresoù a ro spi da sevel un identelezh pozitivel, un identelezh-mennad e Breizh, daoust d'an diaesterioù. Raktresoù tro-dro d'an ekonomiezh : e meur a lec'h, e Silieg, da skouer, e Langouet, e Tremargad, ez eus bet savet raktresoù tro-dro d'un ekonomiezh a laka an dud da gentañ hag a glask doujañ d'an douar ha d'an natur. Evel e KEAV, e kaver tud er raktresoù-se o deus c'hoant da sevel raktresoù en o bro, evit bevañ gwelloc'h, bezañ oberiant ha sevel un identelezh-mennad.

---

64 Ronan Le Coadig, « Le fruit défendu » *Cahiers internationaux de sociologie*, 2001, pp319-339

Ur gevredigezh a zo bet savet evit unaniñ seurt esaeoù, savet gant kumunioù : BRUDED<sup>65</sup> eo. Liesseurt eo an temoù : e Langouet, ur gumun 600 annezad, ez eus bet savet tiez ha savadurioù en un doare ekologel, klasket e vez reiñ ur vouezh d'an dud er raktresoù, broudañ ar stummoù nevez a energiezh (gant an heol, pe savadurioù neptu a-fed beveziñ energiezh), ha gwareziñ yec'hed an dud : eno ez eus bet savet an areteoù a-enep al louzoù-amprevaned. E Tremargad (200 annezad) ez eus bet savet ivez un ekonomiezh disheñvel : chanterioù keodedel evit aozañ plasenn ar bourc'h, stalioù-koñvers kengred dalc'het gant an dud ha digor d'an eskemmoù, ul labour-douar bio, savet gant loened diwar prinsipoù ar permakultur. Diazezet eo war un doare disheñvel da verañ ar gumun ivez : ul listenn da bep dilennadeg nemetken, hag ur prantad c'hwec'h vloaz nemetken evit ar maer. Ur patrom demokratel eeun eo. E Silieg, e oa bet savet tiez ekologel en ur pennkêr, ne zispignont ket muioc'h a energiezh eget na produont. Meur a raktres troet war-zu al liammoù sokial ha naturel a zo : tiez evit lakaat da gejañ an dud a bep seurt oajoù, ul lec'h evit meskañ an dud a labour en takad sokial, loened evit derc'hel a-ratre ar gweledva. Troet eo bepred war-zu an annezidi, ebarzhiañ an holl ha reiñ da bep hini an tu da gemer perzh.

An holl raktresoù-se a zo e kumuniezhioù bihan a-walc'h. Meur a labour enklask<sup>66</sup> a ziskouez e c'hellomp anavezout da vat, ha santout liammoù fetis, gant 150 den mui pe vui. Sevel kumuniezhioù kalz brasoc'h a zistag al liammoù-se. Gouest omp gant hon empenn ha gant an deknologiezh da genlabourat gant muioc'h a dud : an embregerezh, ar vroad, met n'eo ket liammoù denel a c'heller kadarnaat gant ur gaozeadenn pe ul liamm fizikel (en em welet). KEAV a zo ivez ur gumuniezh vihan. Ar c'hamp brezhonek brasañ eo met chom a ra war skeul an dud. 150 den pe 200 den a zo ur bed bihan'lec'h ma c'heller anavezout an dud. Leun-chouk e vez memestra. Ne c'hell ket bezañ brasaet, hervez e aozourien. Unan all a c'hellfe bezañ evit ledanaat ar raktres, met un afer all eo.

Divizout peseurt buhez hon eus c'hoant da ren ha n'eo ket redek gant al lanv... Bez ez eus meur a raktres enep-kulturel pe *alterlec'hioù* a seurt-se o sevel er mare-mañ. Meneget int bet da skouer e-barzh ar gazetenn *Le Monde*, evel ur fed sokiologel a-vremañ<sup>67</sup>. E ZAD Ker-Itron-al-Lann, evel-just, bremañ m'eo bet dilezet ar raktres Stad sevel un aerborzh, eo ret ijinañ penaos bevañ, ha kinnig doareoù all degemerapl hag aotret. Ma ne vez ket graet e vo implijet al lec'h evit kêriekaat hag e vo betoñs e mod-pe-vod. Dav eo dont a-benn da sevel un dra bennak neuze. A bep seurt mennozhioù a sav war al lec'h ha bev eo an tabutoù diabarzh. *Oasisoù* a vez graet eus seurt lec'hioù pa heuliont mennozhioù Pierre Rahbi<sup>68</sup> : sevel lec'hioù skouer, patromoù all, a ro ur plas d'an dud a youl vat, a

65 BRUDED : Bretagne Rurale et Urbaine pour un Développement Durable

66 Yuval Noah Harari, *Sapiens, une brève histoire de l'humanité*, Albin Michel, Paris, 2015.

67 Nicolas Truong, « la France des « contre-sociétés » et des « oasis », *Le Monde*, 14 décembre 2019.

68 Pierre Rahbi, *la part du colibri*, Editions de l'Aube, La Tour d'Aigues, 2018.

zouj ouzh an natur hag an endro. Mennozhioù Pierre Rahbi a zo troet war-zu al liammoù gant an natur. Kinnig a ra gwriziennañ an dud muioc'h ouzh an tiriad hag an amzer dre an agroekologiezh. Krouet en deus al luskad *Colibris* diwar an danevell vrudet : al labousig o kas dour war ar goadeg distrujet gant an tan. Pep hini a c'hell ober e lod evit gwellaat pe saveteiñ ar bed. Ur c'hamp e brezhoneg penn-da-benn a zo un alterlec'h ivez, un intrudu evit sevel ul lec'h disheñvel a zouj ouzh identelezh an dud hag a ginnig ur patrom all.

Savet ez eus bet ivez raktresoù tro-dro d'ar sevenadur : ur sevenadur n'eo ket da vezeziñ, met da grouiñ. Bev-mat eo ar festivalioù e Breizh, reoù sonerezh pe sinema ha saloñsoù al levrioù : e Gwenrann, Gwened ha Karaez. Ur politikerezh Rannvro a zo tro-dro d'al levrioù ha d'al lenn, evit broudañ an dud da skrivañ ha da lenn.

Heverk eo ivez ar strolladoù troet d'ar sevenadur dre gomz, sonerezh, kan ha c'hoariva. Menegomp da skouer, Strollad ar Vro Bagan a labour diwar-benn a bep seurt sujedoù liammet ouzh Breizh hag a vrud temoù evel istor Breizh, misterioù, an divroañ, ar stourmoù sokial. Ur strollad a vesk tud a-vicher hag amatourien, evit deskiñ d'ar bobl. Lakaat a ra da labourat sonerien, grafourien, buheziñ a ra atalieroù er skolioù. N'o deus skoazell ebet gant Rannvro Breizh. O gerioù-stur a zo : unaniñ, treuzkas<sup>69</sup>. O istor a zo bet kontet e-barzh an teulfilm « Botoù-koad dre-dan ». Ganet eo ar strollad da vare ar wagenn sevenadurel e Breizh er bloavezhioù 70. En ur gevredigezh serret tro-dro d'ar relijion ha d'un identelezh negativel, o doa c'hoant ar re yaouank o deus savet ar strollad, bevañ un dra all.

*Da gentañ e oa kalz a c'halleg en oaled, eme Marivon Berthou<sup>70</sup>, met dre forz krouiñ liammoù e brezhoneg ha bevañ e brezhoneg dre ar c'hoariva, e oa muioc'h a vrezhoneg hag e oa bet kaozeadennoù etrezomp diwar-benn sevel ar vugale e brezhoneg. Kristina a oa stourmerez hag a lavare : ya, ret eo sevel ar vugale e brezhoneg. Me, avat, a oa klouaroc'h. Echu eo, a gave din, ha ne vo ket aes evit an darempredoù... Met graet em eus diwezhatoc'h, sevel ma bugale e brezhoneg, ha dre-se eo deuet aesoc'h, komz ouzh va mamm e brezhoneg...*

D'ar c'houlz-se, o doa ar re yaouank o deus savet ar strollad, ar santimant e veze gwerzhet Breizh d'an arme, d'an douristed, evit sevel marinaoù, kazinoioù ha kreizennoù nukleel. Ar spi o doa da lakaat an dud da cheñch mennozh evit ar brezhoneg pe sujedoù all. Da vare Molière e oa *castigat ridendo mores*<sup>71</sup> ur ger-stur evit ar c'hoariva. C'hoariva engouestlet e oa hini ar Vro Bagan pe *agit-prop*, hervez Jakez Ar Born, evit lakaat ar bobl da zihuniñ, eme Goulc'han Kervella<sup>72</sup>. Ur

69 Yannik Bigouin , *Nous te faisons autrement Bretagne*, 2017, p 226.

70 Soazig Daniellou, *Botoù-koad dre-dan*, Kalanna, 2014.

71 Reizhañ an techoù dre ar c'hoarzh.

72 Daniellou, *idem*, 2014.

benveg stourm e oa, hervez Bob Simon<sup>73</sup>.

Kumunioù zo a c'hell bezañ oberiant evit gwareziñ ha treuzkas ar glad pobl : e Sine, er Morbihan (8000 annezad), da skouer, e vez broudet an dud da lidañ festoù ar bloaz a zo merket en hengoun, en un doare simpl, naturel ha gant o amezeien. War lec'hienn ar gumun e kaver ivez ur greizenn sevenadurel gouestlet d'ar sevenadur met ivez meur a raktres evit unvaniñ an annezidi tro-dro d'ar sevenadur : sevel hentoù glad evit ober anaoudegezh gant istor hag endro ar gumun, ur raktres arz ar straedoù lec'h ma vez goulennet gant an holl kemer perzh er Poullang, krouiñ ur vozaikenn ramzel gant dremmoù an annezidi...

Adkavout a reomp aze meur a zoare a zo e KEAV : bevañ e brezhoneg, krouiñ e brezhoneg, lakaat an dud da gemer perzh, da ezteurel pe ober anaoudegezh, ur stumm deskadurezh ar bobl eo. An holl raktresoù sevenadurel a zo, a gav din, ur spi da sevel un dra bennak en ur bed disrannet. Diaes eo kompren ster ar bed bremañ. N'eus ket mui a dalvoudegezhioù a zo gwir evit an holl, n'eo ket mui renet emzalc'h an den gant an Iliz pe reolennoù hollek, « sakr » ar gevredigezh. Seblant a ra bezañ da bep hini da gavout e hent. Met petra dalv, hep ar re all ? Dav eo krouiñ, sevel kumuniezhioù gant talvoudegezhioù boutin evit reiñ ster d'ar bed. Talvoudegezhioù KEAV am eus adkavet e meur a raktres sevenadurel ha yezhel meneget a-us. Bleuniañ a reont asambles, evel da vare gwagenn sevenadurel Breizh er bloavezhioù 1970. Spi a c'heller kaout e rofent skouer d'ar gevredigezh hollek.

## **Klozadur gant savpoent ar berzhidi war dazont ar brezhoneg**

Gwelet hon eus er studiadenn eo KEAV ur staj brezhonek dibar : an hini brasañ eo gant 250 den bep sizhun, bep hañv, da lavaret eo 400 den disheñvel bep hañv (reoù a chom evit an div sizhun), an hini koshañ dalc'het bep hañv abaoe 1948, da lavaret eo muioc'h eget 70 vloaz. N'eo ket deskiñ brezhoneg a vez graet eno met kaozeal, pleustriñ, donaat anaoudegezh ar brezhoneg ha war un dro daremprediñ sevenadur Breizh dre atalieroù hag obererezhioù a bep seurt (kan, c'hoariva, skrivañ, radio...). Degemeret e vez familhoù a-bezh evit soubañ an holl en un aergelc'h e brezhoneg savet gant youl an holl. A youl-vat eo ar gelennerien a ginnig kentelioù hag obererezhioù, ha dre-se en em gavont evel ar stajidi o kemer perzh er vuhez a-stroll : debriñ asambles, chom er memes kouskva, kaout memes dudioù e-pad ur sizhunvezh (pe ziv). Evit kempouezañ an diouer a vrezhoneg a zo en endro e kinnig KEAV ur skoazell evit sevel bugale e brezhoneg, er greizenn dudi hag e Brezhoneg er familhoù. En ur astenn ar pezh am eus gallet gwelet e c'hellomp soñjal ez eus moarvat 2000 den disheñvel a zo tremenet e KEAV e-korf an 10 vloaz tremenet (400 bep hañv, met ret eo diskontañ

---

<sup>73</sup> Daniellou, *ibid*, 2014.

ar re a zistro ingal), ha marteze 1000 den ouzhpenn bep dek vloaz a-raok peogwir e oa nebeutoc'h a dud : lakaomp 5000 den a vefe tremenet e KEAV abaoe ar bloavezhioù 80. A-bouez eo evit ar brezhoneg kaout seurt ensavadurioù ouzhpenn da Ziwan, d'ar Skolioù Meur, d'an Deskadurezh divyezhek prevez pe publik, d'an aozadurioù evit deskiñ d'an dud gour : kentelioù noz, Skol an Emsav, Roudour, Studi ha Dudi, Ar Falz... Kemer a ra ur plas a-bouez e-touez ar skolioù brezhonek. Gallout a ra bezañ keñveriet ivez ouzh ar raktresoù a vil-vern a zeskadurezh pobl troet war-zu ar sevenadur hag ar yezh e Breizh : c'hoariva, kan, festivalioù, kevredigezhioù, sonerezh a skign sevenadurezh Breizh hag a ro ur spi hag ul lañs da sevenadur Breizh. Ur vouezh eo evit Breizh ha krouiñ a ra liammoù, rouedadoù etre ar Vreizhiz evit kinnig traoù ha n'eo ket burutellat nemetken. Gant raktresoù sevenadurel denel, uvel, e c'heller sevel un identelezh-mennad e Breizh ha klask sevel an dazont asambles. Troet eo war-zu ar yezh hag ar sevenadur war un dro. Gant seurt raktresoù e c'heller kaout spi da grouiñ un identelezh pozitivel e Breizh, troet war-zu ur gevredigezh kengred, raktresoù war skeul an dud (kumuniezhioù denel), lakaat an dud da vezañ oberiant evit gwellaat o buhez.

Reiñ a rin ar gomz adarre d'ar berzhidi evit klozañ :

*Yann : A-bouez eo diskouez ez eus un doare da vevañ e brezhoneg e-maez ar skol, donoc'h evit ar skol. An dra-se : komz e brezhoneg er familh, krouiñ un endro e brezhoneg evit ar vugale a zo ral, ral eo ar choaz-se am eus graet, met frouezhus eo.*

*« Toute bonne graine honore le semeur » eme Glenmor.*

Hadañ, lakaat da ziwan an had ha kaout ar blijadur da zastum a zo al labour abostolerezh a zo bet graet gant KEAV ha gant izili KEAV en o familh, en o labour pe o buhez pemdeziek.

*Yann : Fiziañs am eus e-keñver dazont ar brezhoneg, bepred e vo tud mennet evit komz brezhoneg ha sevel raktresoù. Evel un eil lise Diwan, pe Yezhoù ha Sevenadur, ar greizenn sevenadurel e Sant-Ervlan. Kizidik e vo bepred peogwir eo start ober traoù a seurt-se e Bro C'hall. Met muioc'h a dud a zo o teskiñ, tud o deus diazezoù a galite.*

Doareoù disheñvel a zo da welout dazont ar brezhoneg. Evit Yann e chomo moarvat choazioù hiniennel pe minorel, tud mennet evit reiñ buhez d'ar brezhoneg ha krouiñ raktresoù kevredigezhel, pe sevenadurel tro-dro d'ar brezhoneg. Ezhomm o deus ar stourmerien da gaout ul lec'h, un arnodva evit eskemm, krouiñ, tapout nerzh evit o raktresoù.

*Emmanuel : KEAV n'eo ket ur bed unyezhek, ar soubidigezh e brezhoneg a zo un doare met n'eo ket ar pal. Ar soubidigezh a zo ret evit kempouezañ an endro galleger tro-dro. Ul lec'h pleustriñ eo.*



*Ar c'hampoù divyezhek n'int ket efedus a-walc'h evit komz. Evidon, an divyezhegezh eo ar pal. Dav vo deskiñ, stummañ an dud. Kavout a rafen mat e vefe kinniget klasoù divyezhek evit an holl evel e Euskal Herria.(...) Ur statud publik evit ar brezhoneg a vefe ur bazenn dija. Evit poent, n'eo ket divyezhegezh, met diglosiezh a zo. Ma vefe implijet ar brezhoneg er servijoù foran, er melestradurezh, e cheñchfe skeudenn ar brezhoneg ha sell an dud war ar yezh. Evidon, n'eo ket an unyezhegezh an hent nemetañ evit ar brezhoneg. Me gav din eo an divyezhegezh. A-fed priñsipoù e plij din kalz muioc'h. Ur bed unyezhek a zo re baour.*

Evit Emmanuel, eo re baour ur bed unyezhek. KEAV a c'hellfe bezañ neuze un doare da zigeriñ ar gevredigezh war-zu al liessevenadurezh, ur gevredigezh a asantfe an divyezhegezh da skouer. Ijinañ a reer neuze evit Breizh, ur galloud brasañ evit ar Rannvro (hag harzoù all evitañ moarvat!) hag ur politikerezh yezh mennet evit kas war-raok an divyezhegezh ha perak pas an teiryezhegezh gant ul lañs evit ar c'hallaoueg.

*Catherine : Ar yezh zo un dra a denn ouzh ar galon. Iskis eo, ar brezhoneg n'eo ket ur yezh estren. Met desket e vez evel ur yezh estren. N'on ket evit kompren ar pezh a lavar tud zo, da skouer : ha c'hwi ho peus desket en un doare intellectuel, evidon-me e oa naturel. Pe, evit an dud a zo bet bugale pa oa o zud o komz brezhoneg etrezo : lavarout a reont e komzent e brezhoneg kuit da vezañ komprenet gant ar vugale. An dra-se a gavan spontus. Komz a raent peogwir e oa o yezh. Ne gomzer ket, kuit da vezañ komprenet ! Pep hini a zesk evit abegoù disheñvel : diaes eo respont d'ar goulenn perak ez peus desket brezhoneg.*

Ur choaz hiniennel, kaset gant a bep seurt abegoù ne c'heller ket displegañ en un doare aes, setu ar pezh eo deskiñ ha choaz komz brezhoneg, evit Catherine. Hervez personelezh pep hini eo, emezi, ar pezh a c'hell desachañ un den a c'hell argas unan all.

*Nora : Pa seller ouzh an amzer dremenet, gwir eo, eo aet ar brezhoneg kalz war zigresk abaoe 150 vloaz'zo, met abaoe 50 vloaz'zo n'eo ket ken gwir. Ar re gozh a zo marvet evel-just, met muioc'h a dud yaouank youlek a zo evit komz brezhoneg. Int eo a zo dazont ar brezhoneg, ar re yaouank o deus desket brezhoneg hag o deus c'hoant d'en em stummañ peogwir int o deus choazet ar brezhoneg, ar pezh n'eo ket gwir evit bugale Diwan pe an hentennoù divyezhek.*

Ar youl eo, a ra an diforc'h, eme Nora. Dav eo kaout fiziañs e youl an dud yaouank, mennet da reiñ un dazont d'o yezh. Arabat kontañ war un treuzkas dre ar skol, ne vo ket ar muiañ-niver eus ar vugale oc'h heuliañ an hent-se ha n'eo ket prouet o do c'hoant da genderc'hel gant an hent-se o buhez-pad. War an tu-se e cheller mont ivez, en ur heuliañ Fanny Chauffin hag ar mennozhioù niverus tro-dro d'ar c'hrouiñ sevenadurel. N'eo ket a-walc'h gant ar skol evit reiñ c'hoant da

implijout ar yezh, gwelloc'h eo ma vez adperc'hennet ar sevenadur gant ur youl, peogwir eo fentus, brav, barzhonius, peogwir eo yezh ar vignoniezh, ar yaouankiz, ar blijadur.

*Maiwenn : Reiñ a ra lañs, ober a rafe vat din distreiñ. Ma buhez a zo e brezhoneg met KEAV a ro youl ha startijenn. Ur spered stourm a zo eno. Ar brezhoneg eo ul liamm gant va familh, va bro, va mignoned.*

Kemer perzh e KEAV, evit peurzeskiñ brezhoneg pe ar blijadur da adkavout ur gumuniezh, a c'hell bezañ un doare da dapout krog er vuhez, en un doare disheñvel, kemer galloud en-dro ha krediñ cheñch buhez, darempredoù sokial, pe esaeañ traoù nevez. Ur c'hinnig eo evit kemer an hent adarre, un hent all marteze. Cheñch darempredoù sokial a zo unan eus an doareoù, ober anaoudegezh gant tud all, lenn, sellout ouzh pezhioù-c'hoari, kemer perzh ivez ha n'eo ket beveziñ nemetken, bezañ awenet evit sevel raktresoù ha sellout ouzh ar vuhez en ur mod all. Ar pep pouezusañ eo ar perzh oberiant a c'heller tapout e KEAV hag er vuhez en diavaez war-lerc'h.

# TAOLENN

I – Dibarded staj KEAV.....	4
1 – Eus istor KEAV da gKEAV en deiz a-vremañ.....	4
Ar raktres.....	4
An diazeourion.....	7
Ar re o deus kendalc'het.....	8
2 – Kemer perzh ha sellout ouzh mont en-dro ar staj.....	10
Atersadennoù.....	10
Obererezhioù.....	15
Hag ar vugale ? .....	21
3 - Brezhoneg er familhoù.....	22
II – Hag ur benveg evit saveteiñ ar brezhoneg e vefe ? .....	26
1 - Un utopiezh ? .....	26
Un enezenn vrezhonek.....	26
Un emgav evit stourmerien.....	28
2 - Hag ur ghetto bihan e vefe ? .....	29
Ur bed bihan ha kloz.....	29
Ur familh ? .....	31
Hag hengounel eo KEAV ? .....	33
Ha peseurt yezh a vez komzet eno ? .....	34
Ha doareoù all a vefe ? .....	35
3 - Ha reizh eo ? .....	36
Difennet eo komz galleg ? .....	36
Ha reishoc'h eo ar gevredigezh vihan-se krouet gant KEAV ? .....	38
Unvaniñ pe rannañ ar gevredigezh ? .....	39
4 - Keñveriañ gant stajoù all.....	39
Evit deskiñ ur yezh keltiek all.....	39
Evit deskiñ brezhoneg .....	41
III – Penaos sevel liammoù en ur bed disrannet ? .....	43
1 – Sevel liammoù sokial.....	43
Arallekadur.....	43
Raksoñjoù da zistruj.....	43
Disrannet eo ar gevredigezh e Breizh : ar skoilhoù evit komz.....	46
Reiñ, degemer, reiñ en-dro.....	49
Sevel darempredoù etrekeltiek pe etrevroadel .....	51
Sevel liammoù gant ar grennarded : petra ro c'hoant d'ar re yaouank da gaozeal brezhoneg ?	52
2 – Reiñ c'hoant ha fiziañs d'an dud.....	54
3 - Evit adsevel ur gevredigezh hag un identelezh pozitivel e Breizh.....	56
Klozadur gant savpoent ar berzhidi war dazont ar brezhoneg.....	61

## STAGADENNOU

- Stag 1 : follenn-nij KEAV
- Stag 2 : dibenn sizhun Karaez
- Stag 3 : program c'hoariva
- Stag 4 : danevell Sophie Pochet

## LEVRLENNADUR

- ABALAIN Hervé, *Histoire des langues celtiques*, Paris, Editions Gisserot, 1998, 127 pages.
- AR BEG Anna, *Kamp etrekeltiek ar vrezhonegerien, ar bloavezhioù kentañ : 1948/1957*, Roazhon, Hor Yezh 1988, 228 pages.
- AR GAG Ivon, « Istor berr KEAV », 1997, [en ligne] accessible à <http://www.keav.bzh/petra-eo-keav/keav-a-hed-ar-bloavezhioù> , consulté le 12 octobre 2019  
ou dans *Al Liamm*, n°304, 1997.
- BARRET Christophe, *La guerre de Catalogne*, Paris, Les éditions du Cerf, 2018, 171 pages.
- BIGOUIN Yannik, *Nous te faisons autrement Bretagne*, Yoran embanner, Fouesnant, 2017, 211 pages.
- BLANCHET Philippe, « La Glottophobie », conférence donnée à Saint-Herblain le 5 novembre 2019.
- BLANCHET Philippe, « Pratiques linguistiques régionales d'élèves de primaire et de collège »  
Rapport de recherche CREDILIF, Université Rennes 2, 2002.
- BROUDIC Fañch, « quelques études sur l'usage du breton », [en ligne] langue-bretonne.com.  
Consultable à :  
<http://archive.wikiwix.com/cache/?url=http%3A%2F%2Fwww.langue-bretonne.com%2Farticles%2FBothorelAndre.html> consulté le 8 décembre 2019.
- BROUDIC Fañch, WAKEFORD Pascale, *les langues de Bretagne, enquête socio-linguistique*, TMO Régions, 2018.
- CASTELLS Manuel, *Le pouvoir de l'identité*, Paris, Fayard, 1998, 538 pages.
- CHAUFFIN Fanny, *Diwan, pédagogie et créativité*, Université Rennes 2, 2015, 603 pages.
- CHAUFFIN Fanny, *Diwan, 40 ans déjà*, Saint-Brieuc, Yoran embanner, 2017, 357 pages.
- CHOUCHAN Nathalie, « notes de lecture » sur DESCOLA Philippe, *par delà nature et culture*, dans *cahiers philosophiques*, Réseau Canopé, 2008, p 111 à 125.
- DANIELLOU Soazig, *Ar gwim*, 2015, Kalanna.
- DANIELLOU Soazig, *Botoù-koad dre-dan*, 2014, Kalanna.
- DARWIN Charles, *L'origine des espèces*, Paris, Flammarion, 2008, 178 pages.
- DEBORD Guy, *La société du spectacle*, Paris, Gallimard, 1992, 208 pages.
- DESCARTES René, *Discours de la méthode*, Paris, J'ai lu, 2013, 76 pages.

DESCOLA Philippe, *Par delà nature et culture*, Paris, Gallimard, 2005, 640 pages.

FAVEREAU Frañsez, « Per Penneg, gwir gelenner », *Al Liamm* n° 267/268, 1991.

« La grande régression, Jacques Généreux, décryptage » article sur Agoravox  
<https://www.agoravox.fr/actualites/economie/article/la-grande-regression-jacques-83820>

GENEREUX Jacques, *la dissociété*, Seuil, points essais, 2006, 608 pages.

GENEREUX Jacques, *l'autre société*, Seuil, points essais, 2011, 391 pages.

HARARI Yuval Noah, *Sapiens, une brève histoire de l'humanité*, Paris, Albin Michel, 2015, 512 pages.

HOBBS Thomas, *Leviathan*, Paris, Flammarion, 2017, 240 pages.

HODGKINSON Tom, *L'art d'être libre dans un monde absurde*, Paris, Les liens qui libèrent, 2018, 333 pages.

HUON Gwenael, « Ronan Huon ha KEAV », *Al Liamm*, n° 345, 2003.

HUON Ronan, « Vefa de Bellaing », *Al Liamm*, n°308/309, 1998.

HUON Ronan, « va c'henlabour gant Langleiz », *Al Liamm* n° 171, 1975.

HUTIN Jeanne-Emmanuelle, « comment combattre le morcellement du pays ? », entretien avec Jérôme Fourquet, *Ouest-France*, 16 novembre 2019.

« Introduction ». PNUD, 2004. Programme des Nations Unies pour le développement. *Rapport sur le développement humain : la liberté culturelle dans un monde diversifié*. Paris : Économica, p. 1-12.

KEROUANTON Marie-Hélène, « La place de l'économie sociale et solidaire en Bretagne », *Octant* n° 108, revue de l'INSEE, Mars 2007, accessible à [https://www.associations.gouv.fr/IMG/pdf/insee\\_place\\_ess\\_bretagne.pdf](https://www.associations.gouv.fr/IMG/pdf/insee_place_ess_bretagne.pdf), consulté le 8 novembre 2019.

LABOV William, *Sociolinguistique*, traduction par A. Kihm de *Socio-linguistic Patterns*, avec une introduction de Pierre Encrevé. Les éditions de Minuit, Paris 1977, 465 pages.

MALLEGOL Pierre-Marie, *Et les Bretons créèrent Diwan*, Yoran Embanner, 2018, 162 pages.

MARX Karl, *Manuscrits de 1844*, Paris, Flammarion, 2006, 243 pages.

MAUSS Marcel, *Essai sur le don*, Paris, PUF, 2012, 241 pages.

MAYADE-CLAUSTRE Julie, "Le don, que faire de l'anthropologie », *Hypothèses*, 2002, p 229 à 237, accessible à <https://www.cairn.info/revue-hypotheses-2002-1-page-229.htm>, consulté le 8 octobre 2019.

MBEMBE Achille, « l'identité, pourquoi faire ? » *Le Monde des Livres*, 31 octobre 2019.

« Conversation avec Jean-Claude Michéa », anonyme, *A Contretemps*, n° 31, juillet 2008, accessible à <http://acontretemps.org/spip.php?article217>, consulté le 22 novembre 2019.

MOREL Sandrine, « En Catalogne, la langue comme arme politique », *Le Monde*, 14 décembre 2019.

MORVAN Malo, *définir la langue bretonne*, Paris, Université Paris Descartes, 2017, 1429 pages.

OTTENHEIMER Ghislaine, « Pythie », portrait de Jérôme Fourquet, auteur de *L'archipel français*, Seuil, 2019, 384 pages, dans *Challenges*, 14 novembre 2019.

PASCAL Blaise, *Pensées*, Paris, Points Essais, 2018, 438 pages.

PAUGAM Serge, « le lien social, entretien avec Serge Paugam », réalisé par Anne Châteauneuf-Malclès, pour l'ENS de Lyon, accessible à <http://ses.ens-lyon.fr/articles/le-lien-social-entretien-avec-serge-paugam-158136>, consulté le 26 décembre 2019.

PENTECOUTEAU Hugues, *Devenir bretonnant*, Rennes, Presses Universitaires de Rennes, 2002, 294 pages.

PENTECOUTEAU Hugues, SERVAIN Pierre, « l'engagement dans une formation immersive en langue bretonne, le cas de KEAV, Kamp Etrekeltiek ar Vrezhonegerion », *Savoirs* 2016, pp 73 à 87.

PENTECOUTEAU Hugues, « Stratégies identitaires en Bretagne contemporaine », *Amnis* [En ligne], 2 | 2002, mis en ligne le 30 juin 2002, consulté le 11 décembre 2019. <http://journals.openedition.org/amnis/142> ; DOI : 10.4000/amnis.142

PIERRON Séverine, « Miroir, dis-moi qui est la plus filtrée », *Le Monde*, 19 janvier 2020.

POCHET Sophie, *Treuzkas ar yezh a rummad da rummad*, Skol Veur Roazhon 2, 2016/2017.

RAHBI Pierre, *La part du colibri*, La Tour d'Aigues, Editions de l'Aube, 2018, 51 pages.

REVERCHON Antoine, « Contre l'individualisme », compte-rendu de CAILLE Alain, *Extensions du domaine du don*, éd. Actes Sud, 352 pages, dans *Le Monde Idées*, octobre 2019.

SANSOT Pierre, *Le goût de la conversation*, Desclées de Brouwer, 2003, 201 pages.

TRUONG Nicolas, « la France des « contre-sociétés » et des « oasis », *Le Monde*, 14 décembre 2019.

VALLERIE Erwan, « Per Penneg, gwir vrezhoneger, gwir emsaver », *Al Liamm* n° 267/268, 1991.

WEBER Eugen, *La fin des terroirs*, Paris, Fayard, 1998, 839 pages.



## ▶ PELEC'H-PEGOULZ ?

Dalc'het e vo Skol-Hañv 2019 KEAV e Kastellin e lise ar Stêr Aon (lise labour-douar ha liorzhouriezh).

Div sizhuniad studi ha dudi a vo kinniget :  
> Sizhunvezh kentañ : 7-13/07/2019  
> Eil sizhunvezh : 14-20/07/2019

Eus ar Sul da noz betek ar Sadorn, goude pred kreisteiz

E-pad an div sizhun-se e vo degemeret ar vugale 6-13 vloaz gant ur skipailh buhezourien en un « alsh »

E-pad ar sizhun gentañ e vo degemeret ar grennarded 14-16 vloaz

## ▶ PEGEMENT ?

(Ar prizioù a zo evit ar c'hentelioù, ar boued hag al lojeiz)

Priz ur sizhuniad staj : 280 €  
Studierien amzer-leun ha tud dilabour diwar desteni : 240 €

Ret eo paeñ an hanter a-raok ar staj kas ar chekenn gant ar folenn-enskrivañ da gKEAV.

**Un niverenn stummadur dibaouez  
a zo gant KEAV**

## KAMP ETREKELTIEK AR VREZHONEGERION

Skol-hañv KEAV a zo anezhi ur bodad tud laouen oc'h en em gavout asambles evit klevet ha komz brezhoneg a-hed an devezh hag e-pad ur sizhun, pe ziv ; bevañ e brezhoneg ha reiñ tro d'an deskarded da zeskiñ ar yezh o soubañ er brezhoneg a-hed an amzer.

Anez gouzout diazezoù kentañ ar brezhoneg (ur bloavezh studi pe zaou) n'hall ket staj KEAV dougen frouezh deoc'h. D'an deraouidi e tegasomp soñj e vez aozet stajoù evite er memes mare.

Degemeret e vez bugale ha krennarded gant o zud en un ALSH (Accueil Loisirs Sans Hébergement) pe en ur gevrenn « Yezh ha Dudi ».

### Kentañ ha diwezhañ evezhiadenn e galleg

Le stage d'été de KEAV, c'est plus d'une centaine de personnes heureuses de se rencontrer pour entendre et parler breton. Pour chacun, le faire, c'est un choix, un plaisir : pour respecter cette volonté commune, chacun choisit de s'exprimer uniquement en breton. Cet effort est également un élément indispensable de l'apprentissage. Le stage de KEAV est connu pour cela. En s'inscrivant, chacun est donc conscient de l'engagement auquel il souscrit.

### LE BRETON EST LA SEULE LANGUE UTILISÉE PAR TOUS AU COURS DU STAGE.

Le stage ne peut profiter véritablement qu'aux personnes ayant des bases élémentaires suffisantes du breton. Nous rappelons qu'il existe des stages pour débutants à la même période.

E Kuzul ar Brezhoneg emañ KEAV

KEAV  
22 hent Moulouen 29000 KEMPER  
Pgz : 02 98 95 59 31  
Postel : keav@keav.bzh  
Lec'hienn : keav.bzh



# Skol HANV

Mont war-raok  
Bevañ e brezhoneg

# 2019

**KASTELLIN**  
7-13 a viz Gouere  
14-20 a viz Gouere

**Kamp Etrekeltiek Ar Vrezhonegerion**



# PETRA VO GRAET ER C'HAMP ?

(Eus 9e da 12e hag eus 2e da 5e)

E pep sizhun e vo dav da bep hini ac'hanoc'h dibab etre :

## Bezañ en ur strollad studiañ ar brezhoneg

Studiañ ar brezhoneg a strolladoù bihan a vo graet. Pemp strollad a vo diouzh live an dud. Ar re na gomprenont ket aezet pe na gaozeont ket plaen a vo o flas en unan eus ar strolladoù 2a, 2b pe 3. Ar re a vo uheloc'h o live a vo en o bleud er strolladoù 4 pe 5.

Dre testennoù pe c'hoarioù e vez studiet ar brezhoneg, ar c'heriaoueg, ar yezhadur hag an distagadur, diouzh doare pep kelenner. Lakaat ar stajidi da gaozeal e mod pe vod diouzh o live eo ar pal. Karget-mat e vo ar sizhuniad kentelioù evel-se

## Bezañ en ur rummad studiañ un danvez

Ar re a oar komz ha skrivañ mat brezhoneg a c'hall bezañ en ur rummad evit pleustriñ war un danvez dre ar brezhoneg. N'eo ket un « dra da zibab » evit ar re a heulio ar c'hentelioù war ar brezhoneg. A-hed an devezh e vo labourer war an danvez dibabet hag e-pad ar sizhun. Dibab un danvez a ranker ober hag unan nemetken.

E-maez ar c'hentelioù, evit an holl :  
 Da greisteiz : kan (ha dañs hervez an animatour)  
 Goude 5 eur (hervez an deizioù) : pourmenadennoù, c'hoarioù, mont da welet tud eus ar vro, ober sport, kemer perzh e kaozadennoù, staloù labour a bep seurt, sellet ouzh filmoù...

Ar vugale a zo etre 6 ha 13 vloaz a vo degemeret bemdeiz en ur greizenn dudiañ eus 9 eur vintin da 5 eur endev. Ar grennarded etre 14 ha 16 vloaz a vo degemeret ar sizhun gentañ en ur gevrenn « Yezh ha dudi ». Nullet e vo ma n'eus ket a-walc'h a enskrivadurioù.

Ar vugale yaouankoc'h evit 6 vloaz a chomo a-hed an devezh e karg o zud. Degemeret e vint er rummad « Brezhoneg er familhoù » savet evito gant sikour Diskouarn.

## AR SIZHUN GENTAÑ

### Ar c'hentelioù war ar brezhoneg

Ar stajidi, lodennet diouzh o live etre pemp strollad, a gaozeo hag a studio brezhoneg e kentelioù un eur ha kart, un eur a-wechoù, gant daou gelenner d'an nebeutañ.



## AN EIL SIZHUN

### Ar rummadoù war un danvez

Pemp rummad kentelioù war bep a zanvez a vo evit d'an dud a oar kaozeal ha skrivañ mat a-walc'h brezhoneg da bleustriñ war un danvez a blij dezhe. Setu an temoù, an danvezioù :



Hervez niver an dud enskrivet, pe abalamour d'un dra dic'hortoz all, e c'hall unan bennak eus ar rummadoù pe eus ar c'hentelioù bezañ lamet kuit eus ar program. Titouroù, program ar rummad-mañ-rummad, a gavoc'h war hol lec'hienn. Kaset e vo ar program deoc'h ma c'houlennit.

Displegadennoù war an doare da gelenn a vo bep sizhun evit an danvez skolaerien/kelennerien.



Gwener 1añ, Sadorn 2 ha Sul 3 a viz DU 2019

E kreizenn Kerampuilh e KARAEZ



UN DIBENN-SIZHUN  
E BREZHONEG  
E-KREIZ AR VRO

Evit ar familhoù gant bugaligoù ha bugale, hag evit an dud deuet

**AON 'PEUS RAK AR BLEIZI ?**



Gant souten :



Departamant  
Penn-ar-Bed

Renerezh-rannvro  
ar yaouankiz, ar sportoù  
hag ar c'henstag sokial  
e Breizh

### Gwener 01/11/2019

5e 1/2 - 6e 1/2 : **degemer** ar vugale gant o zud hag an dud deuet all

6e 1/2 : banne **digor-kalon**, 7e : **piknik**, degaset gant pep hini

8e : **abadenn sonerezh** evit ar vugale hag an holl, **KANevedenn**, gant Marion Gwenn, Katell Kloareg, Séverine Valomet

### Sadorn 02/11/2019

8e 1/2→9e1/2 : **dijuni**

*evit ar vugale gant o zud :*

10e-11e : ober anaoudegezh **dre c'hoari, kanañ, dañsal**

11e-12e : **labour-dorn** war tem "**Ar Bleizi !**"

*evit an dud deuet :*

10e-12 : **Karvez** hag hec'h istor, **gweladenn heñchet** gant **Ifig Rémond**

12e1/2 : **merenn**, pourvezet gant ar greizenn

*Strollad ar vugale (ar gerent a vo e karg eus o bugale) :*

2e→3e 1/2 : **kousk-aez** evit ar re vihanañ ; prantad sioul evit ar vugale vrasañ : **labour-dorn**, war tem «Ar bleizi !», levrioù

adalek 3eur 1/2 : **Mirdi ar Bleizi er C'hloastr-Plourin**, merenn-vihan

*Strollad an dud deuet :*

adalek 2e war-zu ar C'hloastr-Plourin, triad ha **Mirdi ar Bleizi**

*evit an holl :*

6e1/2 : banne **digor-kalon**

7e : **koan**, pourvezet gant ar greizenn.

8e Sonadeg : **kanaouennoù** diwar-benn ar bleizi gant **Gwenhael hag Izaouen Besnard**

9e-1/4 : **c'hoarioù** evit an holl, ouzh taol (*an den-bleiz...*)

### Sul 03/11/2019

8e30→9e30 : **dijuni**

10e→kreisteiz :

*evit ar vugale gant o zud :* **tresañ**, livañ ha c'hoari, tem «Ar bleizi !», **ar fromoù hag ar santadoù**

*evit an dud gour :* mont da welet **brezhonegierien eus ar vro**

12e 1/2 : **merenn**, pourvezet gant ar greizenn

2e→3e : **kousk-aez** evit ar re vihanañ, ur **c'hoari** evit ar vugale vrasañ hag an dud gour a-gevret gant **Sten Charbonneau**

3e1/2 : **bilañs**

4e : **fin** ar staj

### Priz an dibenn-sizhun

Gant : dijuni, merenn ha koan ar Sadorn, dijuni&merenn ar Sul + bod ar Gwener hag ar Sadorn noz. Da bep hini da baeañ ar gwin evet ouzh taol.

Da zegas : piknik ar Gwener noz, ur sac'h kousket hag ul liñsel dindan (pe liñselioù&ur pallenn), botoù-bale pe heuzoù.

Priz leun : un den gour gant 1 bugel ouzhpenn 4 bloaz : 90 €, gant 2 vugel :110 €, un den gour 60 €, 12 € dindan 4 bloaz. Priz digresket pe prizioù all, deuit e darempred ganeomp.

**Lakait hoc'h anv a-benn an 17 a viz HERE mar plij** (pe a-raok ma c'hallit) [kenurzhier@keav.bzh](mailto:kenurzhier@keav.bzh) 06 06 45 85 08, [keav@keav.bzh](mailto:keav@keav.bzh)

**Plijadur a vo e brezhoneg gant ar re vihan hag ar re vras !**



## DIBENN-SIZHUN E BREZHONEG

EVIT AR FAMILHOÙ HAG AN DUD GOUR HEP BUGEL

D'ar 1-2 -03 a viz DU e KARAEZ

**Deuit HOLL evit kaout plijadur en ul lec'h kaer ha degemerus !**

Eus ar Gwener 01 d'ar Sul 03 a viz Du e vo dalc'het ur staj e KARAEZ gant KEAV. Pal ar staj zo sikour ar familhoù da gaozeal brezhoneg etreze : ar vugale, ar vugaligoù hag o zud a oar un tamm brezhoneg, un tamm mat a vrezhoneg zoken, met n'eo ken aezet a se atav kaozeal brezhoneg er familh pa vezer krog da gaozeal galleg.

D'ar familhoù a gomz brezhoneg etreze disoursi e vo un doare da vevañ e brezhoneg en un endro plijus, ober anaoudegezh gant familhoù nevez ha sikour ar familhoù all.

C'hoarioù a vo graet etre ar vugale, evite d'ober anaoudegezh an eil re gant ar re all, ha kalz a obererezhioù e brezhoneg, bugale hag o zud asambles : c'hoarioù a bep seurt, pourmen, kanañ, dañsal, selaou kontadennoù, labour-dorn, beilhadegoù....

D'an dud gour a zeuio hep bugel e vo kinniget kemer perzh en obererezhioù ar familhoù da vareoù zo ha d'ar mareoù all e vo kinniget dezhe obererezhioù a-ratozh evite, gweladenniñ ur mirdi kinniget gant doareoù nevez, mont da ergerzhet ar vro, kejañ gant brezhonegerien ar vro, ha nozvezhioù laouen !

Atav ez eus bet graet ur plas d'ar vugale ha d'o familhoù e kampoù KEAV. Met, er mare-mañ, muioc'h eget ma oa bet biskoazh, eo a bouez bras sikour ar familhoù en o strivoù d'ober eus ar brezhoneg o yezh... Dazont ar yezh zo e familhoù ar vrezhonegerien. Pa vez kaozeet brezhoneg gant ar vugale en o familhoù, e teskont o yezh tamm-ha-tamm, e karont anezhi, hag e vezont prest da vont hardi, dizaon, e bed ar galleg pe ar saozneg hep disoñjal ar brezhoneg...

Ar brezhoneg er skol zo un dra vat, met ma ne vez ket kaozeet brezhoneg er familhoù, n'eo nemet un touell.... Abalamour da se e lavaromp : e pep korn-bro e rankomp aozañ stajoù brezhoneg evit ar vugale hag o familhoù. E pep korn-bro hag aliesoc'h-aliesañ !

Lakaat ar vugale, o zud ha tud gour all da vevañ asambles e brezhoneg a zo un doare da ziskouez eo ar brezhoneg yezh ar gevredigezh, yezh an holl.

Gwelet ar vugale ha komz gante, evit an dud gour eo bevañ ar brouenn ez eus un dazont d'ar brezhoneg ; evit ar vugale, gwelet tud all estreget o zud o komz brezhoneg a zo meizañ e c'hall ar brezhoneg bezañ yezh ur gevredigezh. Abalamour da se e tegemerimp ivez tud gour ha n'eus bugel ebet gante. Plijadur da gomz gant tud all ha gant bugale o devo, ha spi hon eus gant brezhonegerien bro Karaez ivez.

**Deuit niverus d'an dibenn-sizhun brezhoneg e Karaez,  
d'ar Gwener 1 Sadorn 2 ha Sul 3 a viz Du  
da c'hoari ha da vevañ e brezhoneg !**

Staj aozet gant KEAV ha Ti ar Vro Kemper  
Degemeret e vimp e kreizenn Kerampuilh e Karaez

**Obererezhioù kaset gant KEAV war tachenn ar brezhoneg er familhoù :**

- Degemeret e vez ar familhoù en ur strollad a-ratozh, Brezhoneg er familhoù e anv, e-pad ur sizhun e kamp-hañv KEAV abaoe 2012 gant sikour DISKOUARN.
- Daou zibenn-sizhun evit ar familhoù ar bloaz a vez aozet gant KEAV ha Ti ar Vro Kemper, abaoe 2015.
- Ur studiadenn war implij ar brezhoneg er familhoù a zo war ar stern gant rann sokiolegiezh skol-Veur Roazhon 2 ha KEAV.

**TITOUROÙ – ENSKRIVADURIOÙ da gas a-benn an 17/10/19 mar plij**

**kenurzhier@keav.bzh**, 06 06 45 85 08, keav@keav.bzh, lec'hienn : keav.bzh.

KEAV, 22 str. Menez ar Piked 29120 Pont-'n-Abad

**Dibenn-sizhun evit ar familhoù hag an dud gour a zeuio hep bugel  
01-02-03 a viz Du 2019 e kreizenn Kerampuilh e Karaez**

**Tud deuet**

Anv-familh	Anv-bihan
.....	.....
.....	.....

Chomlec'h : ..... kod-post .....kêr : .....

Chomlec'h elektronek / lekchomlec'h : .....

Niverenn(où) pellgomz.....ha.....

**Bugale**

Anv-familh	Anv-bihan	ganet d'	Skoliataet e brezhoneg ?	Hentad ar skol
			Ya <input type="checkbox"/> N'eo ket <input type="checkbox"/>	Diwan <input type="checkbox"/> Prev. <input type="checkbox"/> Pub. <input type="checkbox"/>
			Ya <input type="checkbox"/> N'eo ket <input type="checkbox"/>	Diwan <input type="checkbox"/> Prev. <input type="checkbox"/> Pub. <input type="checkbox"/>
			Ya <input type="checkbox"/> N'eo ket <input type="checkbox"/>	Diwan <input type="checkbox"/> Prev. <input type="checkbox"/> Pub. <input type="checkbox"/>

**Yec'hed** : Allergiezh pe angougemer (*intolérant*) ouzh tra-mañ-tra ya  ket   
**Aotren a ran** KEAV da boltrediñ, filmañ an dud, gour ha bugale evit e deulioù brudañ, e lec'hienn ya  ket

Deiziad:.....

Sinañ:.....

## C'HOARIVA

### Stal c'hoariva

- ✓ **Ar furlukin**  
Ar furlukin a sikouro pep hini da c'hoari da vat ar pezh a zo don en e galon, da vezañ dres d'an ampoent evit santout ar fromoù, da vezañ war evezh e pep mare ha da vezañ kad da c'hoari war ar prim. Pleustradegoù a vo diazezet war an alan, ar selaou hag ar selloù.
  
- ✓ **Ar c'horf hag ar vouezh**  
A-raok kregiñ da c'hoari e ranker kemer amzer da zistignañ ar c'horf. Er vuhez pemdeziek e vez lakaet bec'h war an den, war e gorf. Neuze e vo kemeret amzer da sioulaat ha da selaou ar c'horf dre pleustradegoù Qi Gong evit mont e darempred gant hon diabarzh deomp-ni. Peurachuet e vo al labour gant ar c'horf a-drugarez d'an dañs a sikouro ac'hanomp evit kaout skiant eus an egor tro-dro deomp hag eus korfoù an dud a vo a-gevret ganeomp-ni war al leurenn.  
Pouezus-kenañ eo alaniñ mat. A-drugarez d'an alan e c'heller implijout mat ar vouezh hag ar c'horf.
  
- ✓ **Ar skritur**  
Pep hini a c'hall lavaret ar pezh a zo don en e galon. Al labour gant ar c'horf, gant ar vouezh e vo un digarez da bep hini da ijinañ ha da skrivañ istorioù berr.

Ul labour a-stroll eo ar c'hoariva : ober anaoudegezh gant ar re all, kemer plijadur, ha kaout doujañs dreist pep tra. Ret e vo dont bemdez ha chom betek Gwener noz evit an abadenn.

### Petra zo da zegas ?

- Dilhad da bemdez sklaer pe gant livioù : bragoù pe sae pe vroz, hiviz pe roched pe tee shirt, un tog. Lakaet a vo an dilhad-se asambles evit ober ur gwiskva a-stroll ; ar furlukin a blij dezhañ en em zic'hizañ gant dilhad dispar (dépareillé) !
- Botoù du skañv pe botoù dañs,
- Un tapis, ur c'haer hag ur c'hreion.

---

**EVEZHIADENN** : Pleustret e vo war an danvez-se bemdez eus 9 eur betek kreisteiz hag eus 2 eur betek 5 eur goude kreisteiz, a-hed ar sizhun.

Ar stajidi o devo dibabet mont gant ur rummad diouzh un tem ne c'hellint ket kemer perzh er c'hentelioù brezhoneg kinniget diouzh live an dud.

## Danevell Sophie Pochet

Sophie Pochet a oa krog d'ober war-dro « Brezhoneg er familhoù » e 2012. Met kroget e oa bet se e KEAV un tammig en a-raok. Ret e oa kavout un den evit reiñ lusk d'ar strollad.

Goulennet e oa bet ganin peogwir e oan o tesevel ma bugale e brezhoneg. War-lerc'h hon eus graet un taol-esae gant an dud divugel ivez.

E penn-kentañ e oa un enklask graet gant Hugues Pentecouteau ha Katell Chantreau diwar-benn treuzkas ar yezh er familhoù hag ul labour em boa graet-me evit ar skol veur.

Ar pezh a blije din a oa sikour an dud da grouiñ liammoù e brezhoneg en o familh.

Bodet e vez asambles ar vugale hag o zud hag e vez kinniget dezho ober traoù :

- rimadelloù, kanaouennoù, dañsoù, istorioù

- da eil c'hoarioù er-maez

- labour-dorn pe keginañ

– hag er-maez adarre : pourmen, c'hoarioù, amzer war an draezhenn, pourmen a-hed ar stêr...

Un amzer a zo evit pleustriñ evit abadenn ar Gwener noz. Ur paotr eus Divskouarn a zo ganeomp. Bez ez eus un nebeut koupladoù, o live yezh a zo liesseurt. Ur c'houplad a zeu eus Polonia, unan anezho a zo Breizhad. Ar vugale bremañ a zo etre 8 miz ha 10 vloaz.

Ma bugale a blij dezho dont peogwir d'ar mare-se e ran traoù ne ran ket er gêr. Kemer a ran amzer da vezañ ganto, oc'h ober traoù ganto hag evito.

Kinnig a reomp ivez daou zibenn-sizhun ar bloaz.

Ar vugale a zo techet da respont din e galleg, met gant ar framm-se ez eus sikour eus an daou du. Harpañ a reomp ar gerent, hag gant ar skouer e implijont muioc'h mui a vrezhoneg.

Evidon, treuzkas ar yezh a zo evit komz, evit reiñ tro da gomz, ha skoulmañ liammoù e brezhoneg. Ma gwaz ne gomz ket brezhoneg met asantiñ a ra e vefe komzet en e gichen. Prezidant Skoazell ar skol eo, neuze dedennet gant ar brezhoneg, met ne fell ket dezhañ komz. Ma mamm, er c'hontrol, a oa an hini nemeti na gomze ket brezhoneg er familh, met kavout a rae reizh e komfemp nemet galleg pa oa ganeomp. An emzalc'h a oa disheñvel.

Tud zo, evel Naig, a zeu bep bloaz. Komz a ra brezhoneg, he gwaz ivez met yezh ar familh eo ar galleg. Reoù'zo o deus c'hoant just da dremen amzer plijus gant o bugale, reoù all o deus palioù uheloc'h hag e fell dezho kenderc'hel e brezhoneg en o familh. A-wechoù, ar vugale kentañ a zo bet desavet e galleg, hag ar re yaouankañ e brezhoneg.

Ret eo reiñ lañs d'an traoù. Plijet eo an dud : distreiñ a reont. Un dibenn-sizhun a zo un amzer berr a-walc'h met mat eo evit krediñ mont pelloc'h.

Dieub eo spered an dud pa gemeront perzh e « brezhoneg er familhoù » peogwir n'eus ket da geginañ, d'ober ar pourvezioù, da walc'hiñ ar vugale. Amzer o deus evit ober traoù all. Evidomp eo un tamm evel « ur vilajenn evit desevel ur bugel ».

Er c'hontrol d'ar greizenn dudi, ur bugel n'en defe ket c'hoant d'ober ar striv komz brezhoneg, a zo muioc'h en e vleud. Gant e dad, pe mamm emañ a-hed an deiz.

Amañ ez eus tro 200 den a gomz brezhoneg : n'eus ket e lec'h all, gwir soubidigezh eo.

Peurliesañ eo divyezhek ar familhoù, sikouret int gant ar skol evit kas ar brezhoneg war-raok. Bez ez eus da nebeutañ ur brezhoneger er familh. Sikour a reomp an dud evit n'en em santfent ket o-unan o klask desevel o bugale e brezhoneg. Me oa bet en ur strollad kerent yaouank gant Divskouarn hag hor boa kroget en ur eskemm diwar-benn sujedoù evel : reiñ bronn d'ar babigoù, al lienn adimplij, ar skerb dougen ha temoù a-seurt.